



DESCARTES
DISPLEG WAR AN HENTENN
brezhoneg gant **JIL ewan**

Dianlavar :

Ar Reizhiad Bred Ene Spered
gant **JIL EWAN**

PREDER
Kaier 76-78
Here-Kerzu 1965

DESCARTES
DISPLEG WAR AN HENTENN
brezhoneg gant **JIL EWAN**

Dianlavar :

Ar Reizhiad Bred Ene Spered
gant **JIL EWAN**

PREDER
Kaier 76-78
Here-Kerzu 1965

Emañ Preder o tistreiñ d'he mennad kentañ : bezañ ur gelaouenn a brederouriezh, pe gentoc'h ur gelaouenn m'he devo ar brederouriezh ul lec'h mat enni; rak n'eus ket da grediñ e c'hallo kent pell en em zistagañ diouzh Preder ar rummadoù stabil kresket diwarni ha gouestlet d'ar yezhoniezh ha d'ar gouezoniezhioù. Tu zo bremañ avat da ziawelout ganedigezh ur rummad ken stabil all gouestlet d'ar filozofiezh nemetken. Lies abeg ez eus d'an distro-se. Ne venegin nemet an tri fennañ anezho.

1. Diorreadur ar yezh resis. N'eo ket a-walc'h lavarout e tiluziomp hiziv e brezhoneg kudennoù hor buhez hiniennel, keodedel ha broadel; hogen prouiñ a c'hellomp bemdez e chom hiviziken ar galleg pell war-lerc'h ar brezhoneg evit o diluziañ. C'hwezh an touf zo gant ar re a glask c'hoazh ober politikerezh e galleg.

2. Stummidigezh ar gefredourion. Tud a-walc'h ez eus bremañ gouest da vevañ o spered ha da aozañ d'o zro magadurezh er yezh resis.

3. Diazeidigezh ar framm stadel. E bal zo bezañ ar stern da vuhez pemdeziek ar vro; talvezout a ra adalek bremañ da stern fetis d'ar preder brezhon.

Diogelaet ar yezh, diogelaet bezañs ar skrivagnerion hag al lennerion, diogelaet ivez an atil broadel hag an oksigen politikel nad eo hep preder evit diwanañ hepto, e o'haller diouganañ deizioù brav d'ar brederouriezh vrezhon. Padal, un dra bennak a fell dezhi c'hoazh evit dont d'he ment : kemer d'he hini hengoun ar filozofiezh, digeriñ he gwazhiennoù d'ar sepr a red dre skourroù ar prederouriezhoù all, prederouriezhoù Europa da gentañ penn. Ar skourr gall n'eo ket an hini disterañ.

En amboaz-se e kinnigomp hiziv troidigezh "Discours de la Méthode" da studierion Preder.

En "Displeg" e kavint da gentañ un heklek eus an emsav prederel birvidik a rene er 17th kantved war Cornogeuropa. Unan eus kreizennerion an emsav-se a voe ur gall, an Tad MERSENNE, mignon da ZDESCARTES. Duidus e vo deomp diwelout ar Frañsizien a anavezomp, fredet gant kleñvedoù an diskar, evit kejañ ouzh an emsaverion e c'ant gouest da

vezañ pa ne oa ket disec'het c'hoazh mel o eskern gant terzhienn an impalaerouriezh.

E lec'h all e vo displeget gant barrekoc'h egedon talvoudegezh oberenn DESCARTES hag ar perzh bras he deus bet en emroadur preder ha tonkad Kornog hag ar bed.

Fellout a ra din hepken tennañ evezh ar studier war berzhioù troidigezh JIL EWAN. Boas omp hiziv d'ar frazennoù berr, d'an displegoù krennus; dihostal a reomp gant ar skrivagner a venn kevaotañ ouzhpenn teir lavarenn. Dre ar boaz-se e skañvaer d'ar yezh, ez arboeller e boan d'al lenner; ar speredoù frammet-mat a oar lakaat e-lec'h ar pikoù-skej an ereoù poelloniell lezet e gouzispleg; ar speredoù bruzhunet avat a chom luget er gwiskadoù ster basañ ha ne gavont ket an tu d'en em vestroniañ; hag evel ma paota al lennegezh vas, lennegezh ar bruzhun, e chomont betek eur o marv er-maez eus pep buhez-preder. Setu perak ez eo talvoudus d'ar Vrezhoned yaouank hentiñ an displegoù frammet-start, merket pervezh enno dre ar c'hevaotadur kement ere a zo etre luskoù an dez-evout. Diaes e vo moarvat en derou d'o skevent chomet pell en diegi tizhout dibenn ar frazennoù e-ser un tenn-anal; padal n'eo ket hepken kigennoù o bruska denno o mad eus an embregerezh, hogen dreist-

holl kigennoù hag eskern o meizerezh.

Anzav a ranker ez eo landremmek eston skriv-
erezh DESCARTES. Ar stern-kevaotañ latin hep ar
c'hellusk-prezegiñ latin a lez ar galleg gwall
stambouc'hus. Ar brezhoneg, gant e lusk hag e
bouezmouezh, p'en devez an eurvat da zont gant ur
bluenn ken mistr hag hini JIL EWAN, a c'hall gwiskañ
dizaon toga ledan Marcus Tullius.

D'hor skolidi d'ober bremañ o mad eus hir-
bleustridigezh an troour brezhon evit peuzeskiñ
ereadur o yezh ha pinvidikeat o zroioù-lavar.

ABANNA

R A K L A V A R

An droidigezh a ginnigan d'al lenner en lakey
marteze da soñjal en eurvezhoù studius, hogen
evurus, p'edo en ur c'helenndi bennak o verat e
velenn e pezel "DISCOURS DE LA METHODE", oberenn
vrudet DESCARTES, badezet amañ ganin "DISPLEG WAR
AN HENTENN".

Mar bez ar skola-jourion c'honvat e kiañ, -
hervez ma lavarer da vihanañ ! - ouzh imbroudadur-
ioù ar prederour bras, n'eo ket en abeg d'e c'her-
iadurezh an hini eo, rak boutin-souezhus eo-hi e-
skoaz hini meizourion hon amzer.

An diaester brasañ gant DESCARTES zo e frazenn-
adurezh skoueriet-mik war hini al latin yezh e veiz-
erezh hag e studioù. Dishañvel-bras diouzh pleusk
ar veizourion arnevez, gwasket o frederennoù en o
gerioù kalvezel, pleusk ha doare DESCARTES zo diaz-
ezet war arz ar c'horlavar, gant kevaotoù-degouezh
o c'haoliata an eil egile, rik diouzh stumm al latin-
egerion. Kammed, avat, ne weler an aozour o pec'hif
ouzh reizhder an displegerezh, bennoz d'un ijin-
testennañ bet savet uhel gantañ.

Jubennet em eus ar fealañ gwellañ negez un den
a soñjo pep hini diwar e benn ar pezh a garo. Un
arnodskrid e-keñver troouriezh eo am eus klasket,
dreist pep tra, kas amañ da benn.

Staget em eus ouzh an destenn notennoù-kevezezhaf
hag all, ur vordilh anezho evit gwir, gant ar soñj
e c'halljent skoazellañ ar skolioù brezhonek da
zont, hag e-giz Dianlavar, e kinnigan ur studienn
da vezañ burutellet gant ar brederourion a vicher.

Gwengamp, d'ar 15 Kerzu 1965

Jil EWAN

o o o

D I S P L E G W A R A N H E N T E N N ¹

EVIT REN ERVAT E BOELLEREZH

HA KLASK AR WIRIONEZ ER SKIANTOU

Mar hañval an displeg-mañ bezañ re hir da
lenn en un taol, e vo gallet e rannañ e c'hwec'h
lodenn. Gant an hini gantañ e vo kavet prederiad-
ennoù liesdoare diwar-benn ar skiantoù; gant an
eil, pennañ reolennoù an Hentenn bet imbroudet
gant an aozour; gant an drede, lod eus reoù an
divezouriezh en deus-eñ tennet diouzh ar seurt
Hentenn; gant ar bevare, ar peragoù oc'h anataat
bezoud Doue hag ene mañden, anezho diazezoù e
vetafizik; gant ar bempvet, urzh ar c'hudennoù fi-
zikel bet imboure'het gantañ ha pergen disklêrid-
igesh lusk ar galon hag ul lod krafoù all o tennañ

d'ar vezekniezh; pelloc'h ivez an digemm etre hon
one hag hini al loened, ha, gant an diwezhañ, pe-
tore pezhioù a seblant dezhañ bout rekis evit mont
larkoc'h eget n'eur aet war imbouro'h an Natur hag
an abegoù o deus graet dezhañ skrivañ.

o
o o

N'eus pezh gwelloc'h ingalet eget ar skiant-
vat : rak pep den a gred dezhañ bezañ ken pourchas-
et-mat ganti, ma ne vez ket troet, zoken ar reoù
muiañ rankles war nep pezh all a zo, da c'hoantaat
diganti muioù eget n'o devez. Ha gwirheñvel n'eo
ket e fazife an holl. Kentoc'h e talv se da desten-
iekaat : e vez kevatal, dre natur, galloud pep den
da zezvarn ervat ha da ziverzout ar gwir diouzh ar
gaou, pezh a vez anvet end-geun ar skiant-vat pe
ar poell; e vez disheñvelled hor mennozioù o tont,
neket diouzh ma vez darn poellekoc'h eget darn all,
hogen diouzh ma renomp hor prederennoù dre hentoù
disheñvel ha netra ken, hep merzout an hevelep
pezhioù. Rak n'eo ket awalc'h kaout ur spered barrek,
ar pep retañ eo pleustriñ gantañ ervat. Ken tuet
e vez an eneoù brasañ evit ar brasañ gwalldechoù
ha ma vezont evit ar brasañ vertuzioù hag ar re na

valeont nemet goustadik-tre, mar eont eeun bepred
gant o hent, a c'hell mont kalz pelloc'h eget ar
rederion o tiroudennañ.

Evit va lod, n'em eus biskoazh fougeet e vije
perveshoc'h tamm ebet va spered eget hini ar gendud;
hetet em eus, a zo kaeroc'h, kaout ur reiz ken prim
pe ur faltazi ken glan ha ken fraezh pe c'hoazh un
eñvor ken frank ha ken sentus ha darn all. Estreget
ar re-mañ, n'eus perzhioù all ebet, e gement a oufen,
hag a dalvezefe da beurlleat ar spered; rak evit
kel ar skiant-poell pe skiant, ha hi ar pezh nemetañ
oc'h ober tud ac'hanomp hag ouzh hon diforc'hañ di-
ouzh al loened, mennout a ran krediñ emañ-hi en he
c'hlokted e kement den a zo, hep din pellaat diouzh
ur gredenn boutin d'ar brederourion pa lavaront n'
eus a vuioù pe a nebeutoù nemet etre an darvoudoù
ha tamm ebet etre furmoù pe naturioù hiniennoù un
hevelep spes.⁽²⁾

Tremen, avat, ne rin ket hep lavarout e soñj
din bezañ bet kalz eurvad da vout en em gavet, ha
me yaouank c'hoazh, war hentoù 'zo m'on bet kaset
drezo davit prederadennoù ha pennreolennoù aet ganin
da frammañ un hentenn, ma hañval din kaout tro, bennoz
dezhi, d'amplaat va gouiziadur, dre bazennata, ha

d'he gorren tamm-ha-tamm betek an uhelañ kribell e c'hello distervez va spered ha berrbadelezh va buhez aotren dezhi diraez. Brasat frouezh, evit gwir, am eus-me dastumet endeo diwarni, pegement bennak ma strivan bepred, hervez ar mennoz a vagan war va divout, da stouñ war-du an emzsisfiz kentoc'h eget war hini an emvalc'h-der, peogwir, o sellout gant lagad ar prederour ouzh oberoù hag embregadurioù liesseurt an holl dud, nen eus, din da c'houzout, hogos hini anezho hag a ve aner pe zidalvoud; kement ha ken bihan ma ne baouezan da gaout laouenidigezh espar ganin dirak an arakadenn a hañval din bezañ graet betek-henn war imbourc'h ar wirionez, ha da verat ken kaer goanagoù evit an dazoned, ken, a gredan soñjal, mar ez eus etouez prederioù an dud, hag int tud e gwirionez, unan bennak a ve mat ha talvoudus, ez eo an hini am eus-me dibabet an hini eo.

Bez' e c'hall bout evelkent e fazifen, ha marteze n'eo nemet un tamm kouevr pe un tamm gwer a gemeran evit acour ha diamant. N'on ket hep gouzout pegen techet ez omp da dreuzintent kement a sell ouzhimp hon-unan, na pegen diskredus e tle bezañ evidomp barnadennoù hor

c'heneiled pa vezont o toniañ ganimp. Un drugar vras e vefe din, avat, reiñ da welout, gant an displeg-mañ, an hentoù am eus darempredet, ha da ziskouez amañ va buhez evel war un daolenn, da bep hini da zougen e varn, ha din-me, goude anaout mennoz an dud dre ar vrud o redek, da c'houzout dre eno, diouzh desketaat, ur stek nevez, mat da strollañ gant ar re m'on bons d'ampledañ diouto.

Amañ n'eus ratozh ebet ganin, eta, da gelemm an hentenn a rank pep den ober diouti evit ren ervat e boellerezh, hogen reiñ da welout hepmuiken penaos em eus graet diouzh ren va hini. D'an neb a glask reiñ kenteliadurezh, e verm e kavfe dezhañ bout e-unan ampartoc'h eget piv bennak he degemer digantañ, ha mar c'hwit hennezh war an disterañ tra, e vez da damall. Hogen, o vezañ ma kinnigan-me ar skrid-mañ evel un denevell ha netra muioe'h, pe, mar kerit, evel ur vojenn na vo kavet enni marteze, etre an nebeut skouerioù d'ober diouto, lies a hini all ivez da dreiñ diwarno gant abeg, em eus spi evelkent e vo emsavus da lod, hep bezañ nozus da c'hour, hag e vo anaoudek an holl ouzh va lealded.

Mezhuret on bet gant al Lizhiri adalek va bugeliezh; ha dre ma vezed o klask gonit warnon e

c'halled, bennosh dezho, dastum gouiziadur splann ha diogel eus kement a dalvez evit ar vuhez, e save c'hoant divent emnon d'o mestroniañ. KerKent, avat, ha peurglozet ganin rac'h ar seurt kelc'h-
iad-studioù ma vezer boas, ur wech degouezhet e penn, da vezañ degemeret e renk an aotreeion, e kemmis va mennoz en holl d'an holl. Rak nec'het oan gant entremarioù ha kammgredennoù ken niver-
us, ma kave din e oan chomet hep tennañ gonid ebet, o strivañ da zeskiñ, nemet hag evit dizol-
eifi muioc'h-mui va diouiziegezh e vije.

Hag evelkent edon en unan eus brudetañ skolioù Europa, lec'h ma krede din e tlee bezañ tud ouiziek, mar kaved anezho tu bennak war an douar. Bez'e teskis eno kement o doa desket ar re all; kaeroc'h c'hoazh : ha me berr va c'heust-
eurenn ganin diwar ar skiantoù a veze kelennet dimp, sed e tarlonkis an holl levrioù tapet ganin lakeat va c'hrabanou warno, dre ma pleustrent war an danvezioù a vez sellet evel an iskisañ hag ar rouesañ re a zo. En tu-hont da se, ne oan ket hep anaout mennozioù ar re all diwar va fenn; ha, din da c'houzout, disteroc'h-prizet ne oan ket me tamm eget va c'henskolidi, petra bennak ma kaved endeo en o mesk un toulladig bet dibabet

da gemer lec'h hor mistri. Hag e penn ar gont e seblante din e oa hor c'hantved-ni ken bleuniek ha ken fonnus hag ar re gent, evit kel ar spered-
où barrek. Ma frankae warnon diwar se da varn pep hini drezon va-unan ha da soñjal n'edo neblec'h skiant, a vije pezh a oa bet roet diagent din da grediñ e oa.

Ne dremenet ket evelkent hep prizout ar gourdonadoù ma vez warno pleustret er skolioù. Gouzout a raen na c'heller ket dicueriñ ar yezhoù a vez desket eno evit intent al levrioù kozh; e vez gant koantiri ar mojennoù dihunet ar spered; e vez hemañ uhelskoueriet gant taolioù brudet an Istorioù, peogwir e tarbaront da stummañ an dez-
varmerzh (3) adalek ma lenner anezho gant diverz-
egezh (4); e vez lenn kement levr mat a zo evel un diviz gant an dereatañ tud a zo bet oc'h aozañ ar c'hantvedoù tremenet, hag un diviz imbroudet zoken, ma tizoloer ennañ ar pep gwellañ eus o frederennoù; he devez ar Brezegouriezh nerzhioù ha kaerderioù hep o far; he devez ar Varzhoniezh flourderioù ha teneridigezh voemus; he devez ar riavellouriezh ijinadennoù lemm-kenañ, gouest da dalvezout, diouz ar c'hentañ, ken evit reiñ o gwalc'h d'ar gonoc'h-
erion, ken evit reiñ lusk d'an arzvicherioù ha

skafivaat labour an dud; e kaver dre ar skridoù o pleustriñ war ar boazioù kalz a gentelioù ha galvatiz⁽⁵⁾ d'ar vertuz, pezh a zo emsavus-meurbet; e ro ar Brederouriezh an tu da gomz dre wirheñvel diwar-benn an holl bezhioù evit lakaat ar grakouiziaded da vamiñ; e kinnig ar Reizhoniezh⁽⁶⁾, ar Vezekniezh hag ar skiantoù all digoroù ha pinvidigezh d'o gonideion; hag, en diwezh, e vez mat bezañ bet armodet pep hini anezho, zoken ar re vrishañ ha direishañ, evit anaout o zalvoud-gezh wirion ha diwall da vezañ touellet ganto.

Pedal e kave din bezañ foranet amzer-awalc'h evelse gant ar yezhoù pe zoken gant Lennadur al levrioù kozh hag ivez gant an Istorioù hag ar mojennoù a gaver enno. Rak, divizout gant tud ar c'hantvedoù all a zo, war-bouez nebeut, koulz ha beajiñ. Emichañs e vez mat gouzout tra pe dra diwar-benn boazioù ar pobladoù liesseurt, dimp da varn yac'hoc'h a se hor re-ni ha da virout a soñjal e vez lu ha dibocell kement tra na vez ket hervez hon doareoù-ni, evel ma vourr ober ar re n'o devez biskoazh gwelet mann ebet. Hogen, pe lakaer re hir amzer da veajiñ, e teuer en diwezh da vezañ un estrañjour d'e vro; ha pa furcher betek re, o klask gouzout pezh a veze

graet er c'hantvedoù tremen, e chom an nen peur-lieesañ gwall verr e gelenn war an traoù a bleder ganto hiziv an deiz. Ouzhpenn ma vroud ivez ar mojennoù ac'hanomp da faltaziañ evel tra c'hallus ur bern c'hoarvoudoù nan int ket; hag an Istorioù reishañ, zoken pa chomont hep kemmañ pe greskiñ talvoudegezh an traoù, dezho da seblantout dell-ezekoc'h a se da vezañ lennet, bepred e tavont, koulz ha bep taol, war an darventezioù viloc'h ha diskedusoc'h, ken na hañval mui ar pep all diwar-se bezañ evel m'emañ e gwirionez; hag an neb a ren e voazioù diouzh ar skouerioù tennet gantañ ac'hano, hennezh a vez techet da gouezhañ e dirollded ar babored diskouezet gant hor romantoù, ha da verat dezoioù a vez trec'h d'e c'halloud.

Kaer-dreist e prizen-me ar Brezegouriezh ha nay oan gant ar Varzhoniezh, paneve na welen ket e oa an eil hag eben kentoc'h donezonoù digant ar spered eget frouezh diwar ar studi. An neb a vez gantañ an daclataerezh⁽⁷⁾ kreñvañ ha gouest da c'hoiñ e brederennoù diouzh ar gwellañ, dezhañ d'o displegañ sklaer hag heveiz, hennezh a vez barrek da lakaat da grediñ, diouzh ar gwellañ bewech, ar pezh a ginnig, ha pa na gomzfe nemet brizhvrezhoneg⁽⁸⁾ pe ha bezañ ma vefe bet hep biskoazh deskiñ seurt war

an Helavarouriezh; ha neuze, nep piv bennak a vez gantañ an imbroudadennoù c'hwekañ hag ampartiz-awalc'h d'o displegañ gant ar c'hinkladurioù fonnusañ hag an deneridigezh vrasañ, hennedh ne vo biken barzh ebet evitañ, zoken na pa vefe di-zeek war ar werzoniezh.

Gant ar Riffvellouriezh eo e vourren dreist-holl, en askont d'an diarvarded ha d'an anadurezh a gaver en he frouennoù, daoust ma ne verzen ket c'hoazh, c'honvat, an ampled gwirion a c'hell-ed ober dicouti; ha peogwir e soñje din na dalvedhi nemet d'an arzoù ardivinkel, eviti koulskoude da vout ken postek-all ha ken start war he sol, e oan souezhet o vezañ na oa ket bet c'hoazh diazezet warni netra uheloc'h. Dreist-holl o vezañ ma keñverien skridoù an hen baganed diwar-benn ar boazioù ouzh dinazennoù balc'h ha meurdeuz-espar savet ma oant ken war an traezh hag al liboud. Gorren uhel-kaer ar vertuzioù a reont hag ober van d'o frizout dreist pep tra war an douar; deskifñ anaout anezho mat-awalc'h, avat, ne reont ket, hag alies pezh a roont dezhañ un anv ken kaer n'eo nemet antrivli⁽⁹⁾, lorc'hentez, dic'hoanag pe neuze tadlazherezh⁽¹⁰⁾.

Hon Teologiezh a gehelen, peogwir e felle din, kement ha da biv bennak a ve, gonit ar barados; nemet o vezañ desket, evel pezh diogel-start, e vez digor-frenk an hent daviti d'an diouiziekañ koulz ha d'ar gouiziekañ, hag ar gwirionezennoù diskuliet, a gas dezhi, o c'houzout emaint dreist diraez pep reiz, biskoazh n'em bije kredet o sujañ-int da warded va foellataerezh. Ma kave din eta e ranked kaout ur skoazell ezvoutin digant an neñv ha bezañ tremen un den kent stagañ d'o burutellañ gant berzh.

Ne lavarin mann diwar-benn ar Brederouriezh, panevet, o welout ez eo bet hi embreget gant ar c'haer-añ speredoù o deus bevet abaoe meur a gantved hag e van bepred, daoust da se, pezh pe bezh da rendaeliñ war e zivout ha, dre se, d'arverañ warnañ, ne oan ket ma diaviz-awalc'h evit esperout kavout enni kaeroc'h eget ar re all; hag oc'h arvestiñ ouzh ar mennozioù liesseurt a vez o tennañ d'an hevelep kraf, gant tud ouizieek ouzh o difenn, hep na ve morse ouzhpenn unan anezho a ve gwir, e sellen evel gaou kement pezh na oa nemet gwirheñvel.

Hag evit kel ar Skiantoù all, e kement ha ma tennont o diaezennoù diouzh ar Brederouriezh, e soñje din na c'helled biskoazh bezañ bet savet tra start ebet war solioù ken bouk. Ha nag an digoroù

nag ar gonid a ginnigont ne spirent, din da vezañ broudet gant ar studi anezho; rak, din da c'houzout, ne oa ket va dere, dre c'hras Doue, diouzh ma rankjen ober ur vicher gant ar ouezoniezh evit gwellaat va stal; ha, daoust ma chomen hep diskleriañ va dismeg ouzh ar c'hlod ent-skriñveizour⁽¹¹⁾, evelkent, ne raen ket stad vras kennebeut eus an hini na c'hoanagen bezañ gouest da gaout, nemet ha gant gaou abeg e vije.

Hag en diwezh, evit kel ar c'helennadurezhioù brizh, e krede din e ouien-me trawalc'h-kaer evelse ar pezh a dalvent, din da dremen hep bezañ touellet na gant gouestloù un alkimiour na gant diouganou un huñ-steredour, na gant gevierezh ur strobinsellour, na gant breoù pe fougaserezh nep piv bennak a ro da grediñ e oar hiroc'h eget na oar.

Setu perak, kerkent ha ma voen en oad da dec'hel diouzh beli va c'hellennerion, e tilezis pep studi war al Lizhiri. Hag o kemer warnon chom hep klask siseurt gouiziegezh estreget an hini a c'helljen kavout ennon va-unan pe c'hoazh e levr bras ar bed, e tremenis ar peurrest eus va yaouankiz o veajiñ, o welout lezioù ha luioù, o taremprediñ tud a bep endro⁽¹²⁾ hag a bep stad,

o tastum arnodadurioù liesseurt, oc'h emaprou va-unan e-skeud kement kejadenn a raen hag e pep lec'h o vegañ seulseurt prederiadurezh war ar pezhioù a bare dirazon, ma c'helljen bepred ober un ampled bennak diouti. Rak poellataerezh hemañ-henhont o plediñ gant e gefridioù dezhañ, hag eñ tonket, mar c'hwit war e daol, da vezañ kastizet gant ar c'hoarvoudoù hep dale goude, diwarnañ eo, a grede din, e c'halljen kaout amploc'h gwirionez, kentoc'h eget diwar hini ul lennegour bennak o strivañ en e logell war imbroudadurioù diberzhus-krenn na gasont anezhañ da neblec'h nemet da dennañ marteze seul vrasoc'h emlorc'h diouto ma chomint seul belloc'h a se dicuzh ar skiant voutin, gant ar ret ma vo dezhañ diwaskañ seul vuloc'h a chemet hag ijin evit o lakaat da wir-heñvel. Ha dalc'hmat e save c'hoant divent ennon da zeskiñ diforc'h ar gwir diouzh ar gaou, din da welout sklaer em greadoù ha da vale diogel war hent ar vuhez.

Gwir eo, endra brederiañ ne raen ken war voazioù ar re all, ne gaven ket peadra gaer da varrekaat, peogwir e tizoloen eno ivez ken bras diforc'hoù pe dost hag evel diagent etre memzioù ar brederourion. Ken, o welout kement a draoù, hag int boas da vezañ degemeret ha meulet gant ar pobloù all, daoust ma

seblantont dimp-ni bezañ diboell-tre hag hec'hoap,
 ar brasañ mad a dennan ac'hano en divezh oa e
 tesken diwall da grediñ re start kement pezh oa
 bet gonezet warnon dre berzh ar skoueriata hag an
 henvoaz. Setu penaos e skarzhen diwar va zro tamm-
 ha-tamm meur a gammgredenn barrek da vouchañ dimp
 ar sklêrijenn-natur ha da bonneraat dimp ar c'hlev-
 ed-poell. Hogen, goude din tremen un toullad bloav-
 ezhioù o studiañ evel-se gant levr bras ar bed, en
 ur ober diouzh prenañ ivez un tamm skiant bennak,
 e ris un deiz va disentez imbroudiñ dre va fenn va-
 unan ha lakaat holl nerzhioù va spered da zibab an
 hent a rankjen mont gantañ. Pezh a dalvezas din, a
 gredan, ur buz kala brasoc'h eget mar bijen manet
 hep kammed pellaat na diouzh va bro na diouzh va
 levrioù.

E I L L O D E N N

Edon neuze en Alamagn, lec'h ma oan bet galvet
 e-skeud ar brezelioù n'int ket c'hoazh echu eno;
 hag evel ma oan o tistreiñ davit al lu, o tont eus
 lidkurunidigezh an Impalaer, e voen harzet gant
 derou ar goañv en ur ranavro na gaven enni hentez

ebet da zihuediñ en e ser; hag o vezañ ma ne oa,
 dre drugar, na prederi na c'hoantegezh ebet o waskañ
 va spered; e chomen va-unan-penn war hed an devezh
 kraouiet en ur fornezell⁽¹³⁾, lec'h ma kaven pep
 goar da blediñ gant va meizennoù.

Hag, en o mesk, unan eus ar re gentañ, a voe
 din dont da verzout na vez ket al labourioù lies-
 rann bet savet gant meur a vestroberour ken pervezh
 hag ar re deuet diwar zorn unan hepken.

Setu perak pa vezont embreget ha pengennet
 gant un adeiladour⁽¹⁴⁾, hag unan nemetken, e weler
 e vez ar savadurioù kaeroc'h peurliesañ ha kempenn-
 oc'h eget ar re o deus klasket lies a hini talfasat,
 dre lakaat da dalvezout kozh pilvoerioù bet adeil-
 adet diwar abegoù arall.

Setu perak, hag i deuet gant tro an amzer da
 vezañ kêrioù bras, evito da vezañ da gentañ nemet
 bourc'hadennoù, e vez ar c'headedoù kozh ken gwall
 genventet peurliesañ - e-skoaz ar gwilerioù reizh
 a vez treset bremañ en ur gomezenn gant un ijinour,
 diwar e faltazi -, petra bennak m'o c'haver alies
 ken arzek pe zoken arzekoc'h eget ar re all, o sell-
 out ouzh pep savadur hini dre hini. O welout evelato
 penaos e vezont strollet, unan bras amañ, unan bihan
 ahont, hag ivez penaos e wariont hag e vosigernont

ar straedoù, e levarfed ez int bet renket evel-se dre zarvoud, kentoc'h eget dre venn hiniennoù ha ganto un tammik melenn bennak dindan o c'hlopenn. Ha keerañ pezh a zo, pa soñjer ez eus bet atav, daoust da se, gwazourion en o freder diwall-mat ouzh tier ar brevezidi ma terejent ouzh ar gen-glinkadurezh, e vo ret-mat anzav e vez start kas da benn traoù peure'hraet, o tremen gant labour-at hepken war oberiadurioù an nesañ.

Setu perak ar pobloù bet gwechall hanter-ouez ha deuet hepken a damm da damm da sevenaat - peogwir n'o deus-i graet o lezennoù nemet seul ma'z int bet rediet d'o c'haout gant ar reustl o sevel diwar an drouklazh hag ar rioterezh -, e veizis na c'hallent ket bezañ ken diorreidik (15) hag ar re o deus sentet ouzh bonreizhioù (16) un dezvour fur bennak diwar an deiz m'o deus kevredet. Ken anat-kaer eo se ha ma tle ivez stad ar gwir gravez bezañ pellespar gwelloc'h reizhet eget kement hini all a zo, pa'z eo gant Doue nemetañ ez eo bet graet ar gourc'hemennoù anezhi. Ha kement ha komz diwar-benn traoù denel, e kev din ez eo bet Sparta skedus-kenañ gwechall, neket moarvat en askont da vadelezh pep hini, diouti hec'h-unan, eus he lezennoù, peogwir e veze

niver anezho gwall-iskis ha zoken kontrol d'ar boazioù mat, hogen dre ma tennent holl gwitibunan d'an hevelep finvezh, ijinat ma oant bet gant un den nemetken.

Ha setu perak Skiantoù al levrioù, ar re da vihanañ na vez an arguzerezh anezho nemet gwir-hefvel, hep na ve digantañ nep anatadurezh dre ma 'z eo bet aozet ha kresket tamm-ha-tamm diwar venn-oziou meur a dud, e veizis na vezont ket ken 'tost ouzh ar wirionez hag ar seurt poellataerezh eeun a c'hell dont dre natur digant un den n'en deus nemet e skiant-poell da zezvarn kement a zeu a-wel dezhañ.

Ha setu perak c'hosha, ha ni bet holl bugale kent dont da vezañ tud, p'hon eus ranket bezañ renet pell amzer gant hon tehoù, dimp war hon tro kentel-iourion⁽¹⁷⁾ oc'h enebiañ alies an eil ouzh egile, hep na c'halljemp-ni kaout bewech marteze na digant an eil na digant egile an ali furañ, e veizis ez eo hogos dic'hallus dimp kaout barnadennoù ken glan ha ken kadarn ha m'hor bije bet, mar bije bet ganimp ur vestroni glok war hor poellerezh, adalek hon don-edigezh war an douar, dimp da vezañ bleniet gantañ nemetken, e-pad an amzer.

Ne welomp ket, gwir eo, perak e kasfed d'an traoñ holl diez ur gêr bennak war an digarez ne-metañ d'eilsevel anezho disheñvel ha d'ober ganto straedoù kaeroc'h a se; bez' e weler kalz a dud, avat, o tiskar o re evit o adsevel da c'houde, rediet ma vezont gwechoù zoken d'henn ober, pa vezont war var da gouezhañ en o foull, gant ar blot ma vez o diazezoù.

Diwar hevelep skoueriadurezh e teuis eta da grediñ start na oa e gwirionez riskl ebet e weljed un den prevez o lakaat en e benn adreizhañ ur Riez bennak, war-bouez kemmañ enni pep tra adalek he solioù pe gant he diskar e-sell d'hec'h adserzhañ da c'houde, na kennebeut adreizhañ zoken korf ar Skiantoù pe an urzh merket er skolioù diouzh o c'helenn; hogen, evit kel ar menoiù aet d'ober va c'hredennoù, n'hallen ket betek neuze ober kaeroc'h eget strivañ, ur wech evit mat, da gaout an disamm anezho, din da lakaat en o lec'h pe reoù gwelloc'h pe c'hoazh an hevelep re goude din o resedañ gant ar poell. Ma kredis neuze divrall-kaer e tapjen an tu dre eno da ren va buhez kalz gwelloc'h eget war-bouez mañsonat war solioù kozh pe dre harpañ va labour war ar pennsturioù a blegis em yaouankiz da vezañ kendrec'honiet ganto, hep biskoazh chom da

sellout ha gwir e oant.

Rak, daoust ma verzis eno ivez diaesterioù liesdoare, diremed ne oant ket evelato nag heñvel kennebeut ouzh ar re a gaver pa vez anv adreizhañ an disterañ tra o tennañ d'ar c'hevredig⁽¹⁸⁾. Seurt korfoù bras e vez re start o adsevel pa vezont diskaret pe zoken o sintrañ pa drabidellont; ha rust-meurbet e vez atav o lamfrez. A-hend-all, evit kel o nammoù, mar o devez, - hag a-walc'h eo an disheñvelderioù a vez etrezo evit anataat o devez niver anezho - moarvat ez int aet kalz war esmoliñ, dre berzh ar boazamant, ken ez eo bet zoken dizarbennet pe wellaet evel-se ur bern anezho, plaendihevez⁽¹⁹⁾, pezh na vefe ket tu d'ober ken brav all, dre berzh ar furmez nemeti. Hag en diwezh, skañvoc'h e vezont hogos bep tro da c'houzañv eget na vefe un eskemmadur bennak anezho, dres diouzh skouer an hentoù bras o troidellañ dre ar menezioù hag o tont tamm ha tamm da vezañ ken kompez ha ken hebleustr, war-bouez bezañ darempredet, ma vez kalz gwelloc'h mont ganto, eget klask troc'hañ berroc'h dre nijal war lein ar rec'hell ha diskenn betek e don an islonkoù.

En abeg da se n'oufen tamm toniañ gant ar seurt hinbennoù⁽²⁰⁾ brell ha maritellus n'int ket evit padout hep goriñ dalc'hmat un adreizhadurezh

bennak en o spered, ha goude ma n'int galvet na dre o lignez na dre o glad da verat kefridiou kevredik. Ha mar klevfen e ve un disterañ tra, dre va skrid, a-walc'h evit diskrediñ warnon hevelep sotoni, e vefen glac'haret-bras o welout embann anezhañ. Biskoazh n'em eus sellet pelloc'h eget klask ecunaat va mennoziou-me ha frammata war un dachenn a zo groñs va feadra.

Rak-se, ma roan-me patrom va labour amañ deoc'h da welout, hag eñ o plijout din, n'eo ket dre ma karfen evit kelo-se aliañ gour ebet d'ober dioutañ. Neb zo degouezhet dezhañ digant Doue gresoù kaeroc'h en devo uheloc'h mennad egedon marteze; nemet em eus son bras e ve hemañ re feuls endeo evit meur. Divizout hepken kaout an distrob eus kement mennoz aet betek-henn d'ober e gredennoù n'eo ket ur skouer da hep den mont d'e heul. Hag ar bed n'eus ennañ koulz lavaret nemet daou rumm-speredoù na zere tamm ebet va labour outo, da spisaat : hini (21) neb piv bennak a gred dezhañ bout ampartoc'h eget nan eo, hep na ve gouest da herzel ouzh primder e varmadennoù ha da venel habask-a-walc'h evit ren holl e veizennoù gant urzh; kement ha ken bihan, ma n'hellfe hennesh biken derc'hel war ar wenodenn a ranker mont ganti da gerzhout **eeunoc'h**,

hag e vefe dianket e vuhez-pad, mar deufe ur wech bennak d'arvariañ war ar pemsturioù bet legadet dezhañ ha da dreññ diwar an hent boutin. Da c'houde, hini (22) an den ha dezhañ poellegezh hag izelegezh a-walc'h evit meizout e vez e-unan diakuitoc'h eget lod all barrek d'e geleñn war ar c'hraf diverzout ar gwir diouzh ar gaou, ken na rank, a zo kaeroc'h, tremen gant degemerout mennoziou al lod all-hont, kentoc'h eget imbroudiñ reoù gwelloc'h.

Hag evit va c'helou, moarvat e vijen bet gant an eil rumm, o lakaat n'em bije bet atav nemet an hevelep mestr-skol pe chomet dic'houzvez eus an digemmoù a zo bet a-viskoazh etre mennoziou an duñ ouiziekañ. Diwar amzer ar Skolaj, avat, e teskis na c'helled ket empeniñ an disterañ pezh, pegen iskis bennak pe beuz digredus e ve, a gement na vije bet komzet endeo diwar e benn gant ar brederourion; hag abaoe, war-bouez bale bro, e teuis d'anzavout nan eo na barbarel na gouez kement den a vez dezhañ mennoziou kontrol-kaer d'hor re-ni, nemet e ra ken-koulz ha ni, pe welloc'h, arver eus e boellerezh; hag un hevelep den, gantañ bepred an hevelep spered, maget ma'z eo bet adalek e vugeliezh e-ser Gallaoued pe Alamaned, e welis ivez pegen disheñvel e teu-eñ da vezañ diouzh a vije bet, ma vije chomet da vevañ

kevret gant Sinaiz pe Garmibaled; ha penaos adarre an hevelep tra, betek e stumm hon dilhad, pegement bennak m'en deus plijet dimp dek vloaz 'zo hag e c'hallfe ober c'hoazh marteze war hed dek vloaz all, a seblant dimp bremañ koulskoude bout istrog-ellek ha goapaüs; kement ha ma'z eo kalz muioç'h dre nerzh ar boaz hag ar skouer e vezomp kendrec'h-oniet kentoc'h eget diwar-bouez nep gouiziadur di-arvar, daoust ma n'eus ket da denañ anatadurezh diouzh liested ar mouezhioù evit kel ar gwirionez-enoù dinesik da dizhout, o vezañ ma'z eo kalz gwirheñveloc'h e vent bet dizoloet gant un den hepken kentoc'h eget gant ur bobled en he fezh; ken ma vanen hep gallout dibab gour a vije bet kavet gwelloc'h e vennozioù ganin eget reoù an dud all ha ma sellen ouzhin evel rediet da gemer warnon ren em unanik va c'hammedoù.

Nemet evel un den o vale digenvez hag en deñv-alienn, e ris va disentez mont ken goustadik hag ober ken pervezh war dro pep tra ma tiwalljen mat da vihanañ da gouezhañ, ha pe n'enraokajen ket gwell nemeur. Ne fellas ket din zoken kregiñ da zic'hrataat en holl d'an holl hini eus ar memzioù aet gwechall dre sil d'ober va c'hredennoù, hep dezho kaout dor zigor gant va foellerezh, a-rack

m'em bije lakeat anzer a-walc'h da savelañ raktres an oberenn oan o stagañ ganti ha da glask ar wir hentenn ma teuje drezi va spered da c'houzout kement pezh a c'hellje.

Fa oan yaouankoc'h em boa brasstudiet ar Boelloniezh gant rannoù ar Brederouriezh, hag ivez, gant ar Riñvellouriezh, Dielfennerezh ar ventonicourion hag an atalouriezh, anezho tri arz pe deir skiant hag int torket, war a halfale din, da genober e stumm pe stumm gant va mennad. Oc'h imbroudiñ anezho, avat, e taolis pled, evit kel ar Boelloniezh, e talvez he c'hempoellatadoù⁽²³⁾, ha, dre vras, he c'helemdurezh da sklerijennañ an unan war an traoù a oar pe zoken, hervez itrikeriezh Lulle, da gomz hep dezvarn diwar-benn an traoù na oar ket⁽²⁴⁾, kentoc'h eget d'o deskiñ. Ha daoust dezhi da gaout moarvat kalz a bennsturioù gwir-tre ha mat-kenañ, neozh, kalz a reoù all a gaver en o mesk hag i noazus pe neuze dreistezhomm, ma vez hogos ken tenn o digejañ ha ma vez benañ un Dianenn pe ur Vinervenn bennak en un dolzenn varmor kuit a vezañ divrazet. Pelloc'h, evit a sell ouzh Dielfennerezh an Henaourion hag atalouriezh an Arnevezourion, ouzhpenn ma ne bakont nemet kudennoù difetis-meurbet hag, evit doare, diampled-krenn, c'hoazh e vez ken sujet an hini

kentañ anezho da arvezadur al lunioù, ma ne c'hell ket ar meizerezh bezañ gourdonet gantañ, anez d'ar faltazierezh dont da skuizhañ; hag evit eben, ken penvestret eur deuet da vezañ gant lod eus he reolennoù hag hec'h arouezioù, ma'z eo bet-hi savet d'un arz luziet ha teñval, landrammus evit ar spered, kentoc'h eget d'ur skiant diorreadus. Ar pezh am renas da soñjal e ranked klask un hent-enn all a vije distrob eus o nammoù dezho o zri, hep koll dellidoù nep unan anezho. Hag evel ma roer troad alies d'ar gwalldechoù diwar-bouez ur vordilh lezennoù, ken, pa vez nebeut anezho, hag int miret-strizh, e vez kalz gwelloc'h reoliet ur Riez bennak, kenkouls all eta, e-lec'h an niver ken bras a bennsturioù graet ganto ar Boclloniezh, e soñjis e vije trawalc'h-kaer din-me kaout ar pevar da heul, gant ma rajen va mennoz start ha kendalc'hus da chom hep an disterañ gwech c'hwitañ d'o doujañ.

An hini kentañ oa chom hep morse degemer nep pezh da wir, anez e vije anat din bout-er heñvel-seurt, henn eo : mirout gant aked ouzh pep pres ha rakveno, ha diwall na zougje va dezvarnadoù mann all en tu-hont d'ar pezh a barje war va spered en un doare ken sklaer ha ken diforc'h, ma n'em bije tu ebet d'arvariañ warnañ.

An eil oa dasparzhañ kement kudenn imboure'het ganin e ken lies a gevran ha ma c'helljen hag e vernje, e-sell d'he diluziañ gwel a se.

An trede, ren gant urzh va meizennoù dre stagañ gant an elfennoù digevrannekañ e kañ hag aezetañ d' anaout, evit sevel tamm ha tamm, evel dre bazennata, betek anaoudegezh ar reoù kevrannekañ, en ur c'houl-akaat zoken un urzh etre ar re na vezont ket o ti-araogif an eil an all dre natur.

Hag an hini diwezhañ, ober e pep degouezh niver-adeoù ken klok hag adweladegoù ken hollek ma vijen sur da chom hep diankadif⁽²⁵⁾ netra.

Diwar ar seurt hirsteudadoù-prouennoù hag int ken eeun ha ken aes, m'eo boas ar ventoniourion d'amplediñ diouto da gas da benn o diskoulmadurioù luzietañ, e kavis tro d'empentiñ e vez kenemheuliadur unstumm gant an holl bezhioù barrek da gouezhañ dindan anaoudegezh mab-den, hag ivez na c'hellont ket, hini anezho, bezañ ken pellanav-se, ma n'o diraezfed en diwezh, pe c'hoazh ken kuzhet, ma n'o dizolofed, gant ma tiwallfed d'o degemer da wir, hep na vefent, hag e virfed atav an urzh ret evit o dezren an eil re diouzh ar re all. Ha debriñ va spered ne ris ket ne-meur o klask gant pere stagañ, rak gouzout a raen endeo e oa gant ar reoù digevrannekañ hag aezetañ

d'anaout an hini oa; hag o verzout n'eus bet nemet ar Rihvellourion, e-mesk an holl dud o deus di-agent klasket ar wirionez er Skiantoù, a gement o dije kavet ul lodig diskoulmadurioù bennak, henn eo : un toulladig prouennoù diarvar hag anat, n'hallen nemet krediñ e oa gant an hevelep re, bet imbroudet ganto, eo o doa kroget, daoust ma ne vagen spi ebet o bout-int spletus din an disterañ tamm, paneve da voazañ va spered da euvriñ gwirionezennoù e vije, ha d'ober diouzh ma ne dremenje morse gant brizhabegennoù.

Padal ne ris ket va mennoz, evit kelo-se, klask deskiñ ar seurt skiantoù dibar, boutinavet Rihvellouriezh; o welout, avat, na c'hwit hini anezho da glotañ an eil ouzh eben, pegen disheñvel bennak ez eo selladoù pep unan anezho - peogwir ne sellont nemet ouzh ar feurioù hag ar c'henfeurioù a bar diwarno⁽²⁶⁾ -, e veizis e vije gwelloc'h din mar ne studijen tra nemet ar feurioù-se dre vras, dre o goulakaat hepmaiken en danvezioù a vije barrek da zegas din aezetoc'h anaoudegezh anezho, gant ma n'o mizjen ket, avat, enket eno kennebeut, din da c'hallout o marc'hañ, gwell a se war gement hini all diouzh o doare. Pelloc'h, goude din teurel pled e rankjen gwechoù, evit

anaout anezho, prederiañ warno, pep unan diouzh e du, ha, gwechoù all, o c'hounañ nemetken pe o c'hompren, lies a hini en ur gevret, e soñjis e vije ret din, evit o studiañ gwelloc'h a se, pep unan en e roll, o skeudenniñ gant linennoù, o vezañ ma ne gaven seurt ebet eeunoc'h na gouestoc'h da dalvezout da fraeshoc'h aroueziadur da'm faltazierezh ha da'm skiantaerezh⁽²⁷⁾; nemet e verme din o displegañ⁽²⁸⁾ gant ar berrañ delunioù ma c'halljen, din, dre seurt rikoù, da sunañ o fep gwellañ digant an Dielfennerezh Mentoniell ha digant an atalouriezh ha da c'hwennat gant harp unan holl nammoù egile.

Ma kredan eta lavarout e teuas din ken bras eezamant da ziluziañ an holl gudennoù a vez dindan grog an div skiant-se, war-bouez doujañ strizh an nebeut pennsturioù bet dibabet ganin, ken, en ur lakaat daou pe dri miz nemetken d'o studiañ - dre vont da gentañ d'ar reoù digevrannekañ hag hollekañ, ha seul wirionezenn dizoloet ganin o vezañ seul reolemm o talvout din goude da ziluziañ reoù all - ma tapis, n'eo ket hepken da drec'hiñ war lies a hini a gaven gwall denn gwechall, nemet e spurmantis ivez, war an diwezh, e c'hallen resizañ dre bennaos ha betek pelec'h e oa tu da vont evit di-

rouestlañ soken ar re n'anavezen ket. Ha marteze e kavo deoc'h n'on ket c'hoazh ken diboell-se, mar soñjit ervat n'eus nemet ur wirmed hepken e kement pezh a zo hag e oar neb he dizolo kement a oufed gouzout diwar he fenn; setu perak e c'hell da skouer ur bugel skoliet war an Niveroniez, hag eñ o paouez ober ur sammadur hervez e reolennoù, reiñ da wir en deus-eñ kavet, evit kel ar sammad imbroudet gantañ, kement a oufe spered mab-den kavout. Rak-se, an Hentenn ma tesker ganti mont da heul an urzh wirion ha niveriñ jurdik kement elfenn o tennañ d'ar pezh a glasker, e vez endalc'het ganti kement a ra di- arvarded reolennoù an Niveroniez.

Brasañ gras a gaven, avat, gant seurt Hentenn, oa din bezañ sur d'amplediñ diouzh va foellerezh e pep degouezh hag ar gwellichañ, panevije ar peurwellañ, ma c'halljen; ouzhepen ma verzen ivez, dre bleustriñ warni, e vonze va spered tamm ha tamm da vezata⁽²⁹⁾ sklaeroc'h ha diforc'hoc'h e selladoù⁽³⁰⁾, hag o vezañ ma chomis hep e sujañ da nep danvez epis, e oan e spi d'e sipañ ivez da grefen ar skiantoù all, ken spletus ha ma ris d'an atalouriezh. Neket e oan diaviz a-walc'h, diwar-henn, da glask imbroudiñ da gentañ

kement skiant a oa, rak mont enep d'ar pezh a gemenn-hi⁽³¹⁾ e vije bet se. Hogen, o teurel pled e tlee holl o diazezennoù bezañ tennet diouzh ar Brederouriezh, daoust ma ne gaven c'hoazh ganti⁽³²⁾ hini a gement a vije diarvar, e veziz e ranken, dreist pep tra, strivañ da bourchas reoù dezhi; hag o vezañ ma oa dres erc'ho an dalc'h, ha ret, war seurt tachenn, diwall-mat par ma c'halled ouzh kement pres ha rakveno, e verne din eta chom hep klask aze penn ebet d'ar gudenn, kent din bezañ deuet d'un oad kalz diazesoc'h eget hini tri bloaz warn-ugent ma oan d'an ampoent, ha lakaat hir amzer da sternañ outi, koulz war-bouez diwriziennañ diouzh va spered an holl vennoziou fall a rois bod dezho betek neuze, koulz dre strollañ ur bern arnod- adurioù, mat da vont goude d'ober danvez va foell- atadoù, hag atav war-bouez pleustriñ war an Hentenn oan emouestlet dezhi, din da spegañ outi kadarn-oc'h- kadarn.

o
o o

T R E D E I O D E N N

Hag en diwezh, o vezañ ma n'eo ket a-walc'h deoc'h diskar ho ti-anez kent stagañ d'e adsevel, na pourchas dafar hag adeiladourion, pe c'hoazh pleustriñ hoc'h-unan war an adeiladerezh, na zoken bezañ bet aozet-aketus • tresañ, hogen bezañ bet kavet ivez un all gouest d'ho herberc'hiñ en hoc'h aez e-kerz al labourioù, en hevelep doare, rag aon na chomjen da dermal e-skeud va greadoù, peogwir e vijen bepred rediet a-walc'h er stad-se gant va foellerezh d'henn ober e-skeud va dezvarnadoù, hag evit na baouezjen mui diwar neuze da vevañ ken evurus ha ma c'helljen, e savis evidon un divezouriezh war arnod⁽³³⁾, teir pe beder fennreolenn hepken endalc'het ganti, ma karfen a-walc'h bremañ reiñ deoc'h an doare anezho.

An hini gentañ oa sentiñ ouzh lezennoù ha boazioù va bro, o virout atav ar gravez am eus bet an drugar digant Doue da vezañ kelennet emmi, adalek va bugeliezh, hag o ren va buhez war bep tachenn all, hervez ar mennozioù goñvoretan⁽³⁴⁾ hag ar pellañ diouzh ar gourfred⁽³⁵⁾ lakaet peurliesañ da dalvezout gant an darn boellekañ eus an dud tonket din bevañ en o ser. Rak, dre

ma oan krog d'an empoent da zilezel da vat va reoù-me, peogwir e felle din ober un adwel warno holl, e oa divar din na c'hellen ober netra gwelloc'h eget mont da heul re an dud poellekañ. Ha daoust ma kaved marteze e-metou Persiz pe Sinaiz hini-enoù ken poellek ha ni, evelkent e seblante din e oa talvoudusoc'h evidon kemer skouer diwar ar re lakaet din bevañ en o c'hevret, hag, ouzhpenn, e ranken teurel evezh ouzh o greadoù kentoc'h eget ouzh o c'homzoù, din d'anaout o mennozioù e gwirionez; neket hepken gant ar brein ma'z eo bremañ ar boazioù dre an abeg ma n'eus ket nemeur a gement a c'hoantafe lavarout holl ar pezh a gredont, hogen dre ma'z eus kalz ivez ha n'henn gouzont ket int o-unan; rak, ar gwered meizel oc'h ober dimp krediñ pezh pe bezh, hag eñ disheñvel diouzh an hini oc'h ober dimp gouzout en en kreder, alies ne gaver nemetañ hep an eil. Hag etre meur a vennoz ingal-brizet, e tibaben ar re c'hoñvoretan hepmuiken, koulz dre an abeg ma vezont bepred emsavusoc'h e-keñver an ober, ha gwelloc'h, evit doare, peogwir e vez fall pep dic'hoñvor peurvuiañ, koulz, o lakaat e felljen, e doare ma trojen diwar an hent gwirion nebeutoc'h eget ma rajen ha me o tennañ da unan eus ar pennvarroù⁽³⁶⁾, goude ma rankjen bezañ bet dibabet egile. Ha peurgetket e lakaen war ar renk gant an

dic'hoñvoriou kement gouestl o kinnig krennañ tamm pe damm war ar rezid, neket dre an abeg ma tianzaven - evit parraat ouzh valigañs ar speredou laosk pa vez ganto un dezo mat bennak pe c'hoazh e-sell eus diogelded an hentadurezh un dezo neptu zoken - e tougjed lezennoù oc'h actren leoù pe gevratou a redi mab-den da gendalc'hekaat gantañ; naren, hogen dre an abeg ma welen na oa nep pezh ebet a gement' a vanje gantañ ur stumm bepred peurheñvel; ha peogwir, evit va c'heloù din, e oan e preder gwellaat muioc'h-mui va dezvarnadoù ha neket o gwashaat, em bije kredet seveniñ ur mell mestaol enep d'ar skiant-vat, o lakaat, ha me d'an ampoent o veuliñ pezh pe bezh, em bije ranket e zegemer c'hoazh evel mat, endra m'en dije paouezet da vezañ heñvelseurt endeo, pe neuze goude din dont en diwezh d'e zibrizout.

An eil pennreolenn din oa dont da vout ar c'hadarnañ hag ar groñsañ ma c'helljen gant va greadoù, hag ar mennoziou arvarekañ, ur wech ma vijen-me youlet dezho, diwall mat na gendalc'hjen d'ober ken pervezh diouto ha ma vijent reoù diogel-tre. Dres diouzh skouer ar veajourion dianket en ur goadeg hag a rank neket kantreal o troista, gwech war un tu, gwech war un tu all, na nebeutoc'h c'hoazh chom

harpet en ul lec'h bennak, hogen kerzhout atav an eeunañ gwellañ war an hevelep tu, hep morse kemnañ diwar abegoù dister, ha pa na ve marteze war an taol nemet an dargouezh⁽³⁷⁾ hepken ouzh o broudañ da zibab; rak, dre seurt mod, zoken mar n'eont ket d'al lec'h resis a garfant mont, bepred e tegouezhont en diwezh tu bennak ma vezont, evit doare, gwelloc'h eget e-kreiz ar goadeg. Hag o vezañ ma ne c'houzañv ket oberennoù ar vuhez an disterañ dale, hervez ar wirionezenn hollanet, seul wech ma n'haller ket diverzout ar mennoziou gwirañ, e ranker ober diouzh ar reoù gwirheñvelañ; kaeroc'h c'hoazh, ha goude ma ne welfemp ket penaos e ve darn gwirheñveloc'h eget darn all, e rankfemp neozh youliñ da lod anezho, ha, diwar-henn o sellout, neket mui evel reoù arvarek war dachenn an ober, hogen evel reoù gwir-tre ha diarvar-kenañ, dre an abeg ma vefe heñvelseurt an digarez oc'h ober dimp youliñ dezho. Setu penaos e kavis nerzh da gas diwar va zro kement keuz ha morc'hed a vez purliesañ o strafuilhañ kreizon ar speredou-hont, hag i ken laosk ha ken valigant ma vezont techet atav d'ambreger evel mat traoù hag a sellont evel fall da c'houde.

An drede pennreolenn ganin oa klask atav kacout an trec'h warnon kentoc'h eget an curvad;

lakaat tro war va c'hoantadoù, kentoc'h eget war urzh ar bed, ha, dre vras, kustumiñ da grediñ nan eus netra nemet hor mennoziou a gement a ve glez dindan hon dalc'h; ken, p'hon eus graet diouzh hor gwellañ war-dro an traoù a van en diavaez dimp, kement a c'hwit neuze ganimp zo, sellet diouzhimp, dic'hellus-krenn. Ha mann nemet se oa trowalc'h, war a hafvale din, da virout na c'hoantajen, en dazoned, an disterañ tra n'am bije gonezet ha da lakaat stad emon. Rak, douget pa'z omp dre natur gant hor mennerezh da c'hoantaat ken nemet ar pezh a vez diskouezet dimp gant hor meizerezh evel tra c'hallus e stumm pe stumm, mar sellomp evel traoù keitpell diouzh hon dalc'h an holl vadoù a van en diavaez dimp, neuze ar pezh a seblanto bezañ dleet dimp dre hon orin - hag eñ diank dimp hep na vemp kiriek -, hirezhiñ dezhañ ne raimp ket, anat eo, muioc'h eget na reomp o welout nan omp ket perc'henn da riezou Sina pe Vec'hiko; pe c'hoazh, evel ma lavarer, oc'h ober dellid eus ar redi⁽³⁸⁾, bezañ yac'h ha ni klañv pe rez ha ni karc'hariet ne vo ket evidomp ur c'hoant brasoc'h eget hon hini bremañ da gaout korfoù graet gant materi ken amvreinus ha diamantoù pe da gaout eskell da nijal evel an evned. Anzav a ran neozh e ranker hirembreger ha prederiañ-

dasprederiañ kent bezañ da welout an holl draoù dindan hevelep arvez; nemet e kredan ez eo eno e klude rin ar brederourion⁽³⁹⁾ o deus gallet treiñ gwechall diwar hoaladur an eurvad, ha, daoust d'ar boan ha d'an dienez, kevezata ouzh o Doueed evit ar Wenvidigezh. Rak, e chal evel ma vezent e pep mare, da eveshaat ouzh ar bonnoù bet merket dezho gant an Natur, ha ken don oant-i kendrec'honiet na oa netra dindan o dalc'h en diavaez d'o mennoziou, ma spire se da virout outo da dommañ ouzh traoù all e nep doare; ken groñs oa ivez o beli warno, m'o doa un digarez bennak, diwar-henn, d'en em gavout pinvidikoc'h, galloudusoc'h, digabestroc'h hag evurusoc'h eget nep piv bennak all, peogwir ne c'hall morse an dud all, gant an diank ma vez dezho seurt prederoni, dont evel-se da vestroniañ kement pezh a garfent, pegen barre'hopret⁽⁴⁰⁾ bennak e c'hallfent bezañ gant an natur hag an eurvad.

En diwezh, evel disentezad war seurt divezouriezh, e ratozhis ober un adwel war brederioù liesseurt an dud er bed-mañ, din da ober diouzh dibab an hini gwellañ; ha goude ma n'houlfen lavarout netra diwar-benn reoù an nesañ, e vezis na c'hellen ober kaeroc'h eget kenderc'hel gant

va hini hag a oa neuze : gouestlañ va buhez anterin da ziorren va foellerezh ha skeiñ pelloc'h atav, par ma c'hellfen, davit anaoudegezh ar wirionez, o vont bepred diouzh an Hentenn oan emrediet dezhi. Ken barr oan-me gant ar gwalc'honioù⁽⁴¹⁾ deuet din abaoe ma krogis da verat hevelep Hentenn, ken ne oan ket evit krediñ e c'halled arnodin tra guñvoc'h na glanoc'h amañ war an douar; ha dizoleiñ bemdez, bennoz dezhi, 'un toullad gwirionezennoù hag int talvoudus a-walc'h, evit doare din, hogen dianav peurliesañ d'ar re all, oa da'm spered un drugar ken bras, ma ne raen mui van ebet eus ar peurrest. Ouzhpenn ma ne oa diazezet an teir femn-reolenn diaraok nemet war va dezo da genderc'hel da zesketaat; rak, ha ni o kaout digant Doue, pep hini ac'hanomp e lodig elêrijenn da ziverzout ar gwir diouzh ar gaou, biskoazh n'em bije kredet tremen, ur predig panaveken, gant mennozioù an nesañ, anez din bezañ war an amboaz da sipañ va dezvarnerezh-me d'o burutellañ pa vije deuet ar c'houlz; ha divorc'hed ne vijen ket bet, ouzh o doujañ, anez din mennadiñ war un dro chom hep c'hwitañ war an distersañ degouezh da gavout reoù gwelloc'h, o lakaat e vije bet. Ha neuze, krennañ war va c'hoantadoù n'em bije biskoazh gallet ober, na bezañ boleun⁽⁴²⁾, anez din mont da heul an hent, ma oan diogel, war

a greden, o vale gantañ, da breñañ kement gouiz-iadur oan barrek da gaout, ha diwar-se, war a greden ivez, kement mad gwirion a c'helljen biken perc'hennañ; seul vui ma ne vez douget hor mennerezh da heuliañ pe da dec'hel diouzh tra na vefe diskouezet dezhañ evel mat pe fall gant hor meizerezh, hag e spir, evit ober ervat, dezvarn ervat, ha dezvarn ar gwellañ ma c'heller, henn eo : e-sell da vestroniañ kement vertuz a zo, ha war un dro kement mad all a c'hellfe dont d'an nen en e gerz; ha pa vezer divarteze war se, kammed ne vezer risklet da dremen hep kaout e walc'h.

Goude din evel-se diarvariañ war seurt penn-reolennoù hag o c'hlenkañ diouzh o zu kevret gant gwirionezennoù ar Feiz, dalc'hmat aet da gentañ d'ober va c'hredennoù, e kavas din e c'hallen mont dezhi, e pep frankiz, evit skubañ kuit ar peurrest eus va mennozioù. Ha dre ma vagen spi da c'hellout aesoc'h o divarc'hañ war-bouez divizout gant an dud e-lec'h chom pelloc'h kreouiet er fornezell ma teuas din an holl veizennoù-mañ, ne oa ket c'hoazh tremenet mat ar goañv ma krogis adarre da veajiñ. Hag e-doug an nav bloavezh warlerc'h ne ris tra ken nemet redek amañ hag ahont dre ar bed, o klask ober muioc'h evel arvester eget evel oberer e kement

abadenn a vez c'hoariet e pep lec'h. Ha peogwir e vegen prederiadurezh pervezh, e-sigur pep tra, war ar pezh a c'hellje ober dimp diskrediñ warnañ ha faziañ gantañ, e tiwrizien e-keit-se diouzh va spered kement kamm-gredenn tapet ganti diagent toullañ hent betek emañ. Neket e trevezen evit se an Hollarvarourion, hag i bepred o tiskrediñ kement ha diskrediñ hag oc'h ober van da vezañ dalc'hmat war vordo, rak diarvarekaet, en enep, oa va dezo klok ha skarzhañ diwar va zro an douar-loc'h hag an traezh, din da gejañ tre gent ar roc'h pe ar pri. Hag akuitañ madik a-walc'h a raen, a gredan, peogwir, o klask dizoleiñ diwirded ha dianatadurezh gant kement krafenn a vurutellen, ne raen ket diwar-bouez martezeoù skort, hogen diwar-bouez nerzh poellatadoù sklaer ha diogel; kement ha ken bihan ma ne gaven hini, pegen arvarek bennak e vije, ha n'he dije roet an tu din, bep tro, da zigeriñ warni un disentezad bennak, pa na vije end-eeun nemet evit diskouez na oa ganti netra di-arvar. Hag evel pa ziskarer un ti kozh e virer peurliesañ an atredoù evit sevel unan nevez, en hevelep doare, war-bouez dichafrentañ diouzhin kement mennoz a halfvale din bezañ treuzdiazezet, e prenen kalz a skiant diwar arnodadurioù liesseurt o deus talvezet din abaoe da frammañ reoù diogeloc'h.

Hag e kendalc'hen ouzhpenn-se da bleustriñ war an Hentenn oan emouestlet dezhi, rak, estrapaget ma lakeen evezh da verat holl va meizennoù, peurliesañ hervez he reolennoù-hi, e tibaben ivez, gwech an amzer, un nebeut eurvezhioù din, evit pergen embreger kudennoù Rihvellouriezh pe zoken darn all hag a c'hellen tostaat, war vetek nebeut, ouzh reoù ar Rihvellouriezh, gant o distagañ diouzh kement diazezem oa d'ar skiantoù all, peogwir ne gaven ket anezho start a-walc'h, evel ma welor em eus graet evit lies a hini bet displeget amañ ganin em levr.

Neuze, hep din diskouez e veven en un doare disheñvel diouzh nep piv bennak a striv da c'hwemmat ar gwalldechoù diouzh ar plijadurioù, gantañ fred all ebet nemet ren ur vuhez kuñv ha dinoaz hag a denn ampled diouzh kement diduamant onest a zo, dezhañ da vourrañ gant e oarvezhioù, kuit a hirnezh, kenkoulz all me ne baouezen ket da genä-ere'hel gant va ratozh ha da fonnañ war anaoudegezh ar wirionez, marteze muioc'h eget n'em bije graet o chom da c'hwiliañ levrioù pe o taremprediñ tud lennek.

Neozh e tremenas an nav bloavezh-se kent din bezañ graet soñj ebet e-keñver ar c'hudennoù a vez

18

tabutet peurvuiañ diwar o fenn gant an dud ouizieq, na bezañ deraouet imboure'hiñ diazezennoù nep pred-erouriezh all a vije anatoc'h eget an hini voutin. Ha skouer niver ar speredoù dreist, bet em raok o vegañ hevelep mennad, hep dezho, evit doare din, bezañ gallet akuitañ gantañ, am douge da faltaziañ diaesterioù ken bras ma n'em bije kammed kredet sterniañ outi ken abred-all marteze, panevet e welis o doa darn lakaet ar vrud da redek e oa deuet endeo va zaol ganin da bennvat. Seurt meno, n'oufen ket laverout petore digarez oa dezhañ, ha, mar dichañsas din reiñ troad dezhañ tamm pe damm dre va c'homzoù, moarvat e voe diwar anzav kement na ouien ket, rikoc'h eget na vez kustum d'ober an neb a vez bet un disterañ war ar studi ha, marteze ivez, diwar lakaat war wel perak e kaven gwelloc'h diskredañ war galz a bezhioù sellet evel anat gant ar re all, kentoc'h eget fougasiñ gant siseurt kelennadurezh. Nemet o vezañ ma oan bras a-walc'h d'ober diouzh ma ne dremenjen ket evit ar pezh na oan ket, e veizis e ranken klask e pep stumm dellezout ar bri a veze douget din, ha setu dres penaos, eizh vloaz a zo bremañ, ha me dindan ar seurt broudadenn, e kemeris warnon pellaat diouzh kement lec'h ma c'hellen kaout anaoudeion din, ha dont amañ da glask bod, en ur vro ma'z eus

49

bet graet enni, e-skeud ur brezel hir, diarbennoù ken bras ma n'eus ken, hervez doare, nep kefridi gant al luadoù a vez dalc'het warni, nemet ober diouzh ma tañvafed frouezh ar peoc'h dindan ur gwarezerezh seul vrasoc'h a se; ul lec'h eta, ma c'hellis bevañ ken digenvez ha dihentez hag e deun ar pellañ gouelec'hioù, e-kreiz ur boblad stank a dud oberiant-kenañ ha hi evezhiekoc'h ouzh he stal dezhi hec'h-unan eget ouzh hini he nesañ; hep din kaout navitec da c'houzafiv an disterañ dienez war an aezamantoù a vez gant ar c'hêrioù ar muiañ darempredet⁽⁴³⁾.

P E D E R V E T L O D E N N

N'ouzon ket ha mat e ve din bremañ dezrevell ar prederiadennoù kentañ a zo deuet ganin eno, rak ken metafizikel ez int, ha ken divoutin, ma ne vint ket marteze diouzh blaz an holl. Hag evel-kent, evit ma c'hellor dezvam hag-efi ez eo start a-walc'h an diazezoù am eus dibabet, e kav din emañ evel enket en ur stumm bennek da gomz diwar o fenn.

Abaoe pell, e verzis, evit kel ar boazioù, e ranker a-wechoù ober hervez lod mennozioù, dres evel pa vent andiskredadus⁽⁴⁴⁾, daoust dimp gouzout ez int gwall arvarek, hervez m'eo bet displeget uheloc'h; hogen, dre ma ne c'hoantaen ken d'an ampoent nemet plediñ gant imboure'h ar wirionez, e soñjis e oa ret-mat din ober ar c'hontrol-fed hag argas, evel diwir-groñs kement pezh e c'halljent spurmantifi gantañ ur c'hriñsenn arvar, din goude-se da welout hag-efi ne vanje ket ganin em c'hredennoù pezh pe bezh andiskredadus-krenn. Setu perak, ha ni gwechoù touellet gant hor skiantoù, e falvezas ganin goulakaat na oa seurt ebet a ve hañval ouzh ar pezh a reont dimp faltaziañ. Ha peogwir e vez tud oc'h ober fazioù dre o foellatadoù, zoken war grefen skañvañ ar ventoniezh hag oc'h ober treuzveizadoù⁽⁴⁵⁾ war o sigur, gant se, o welout e oan-me ken techet hag un all da fellel, e tiarbennis evel diwir kement arguzenn bet savet ganin diagent da boellanatadenn⁽⁴⁶⁾. Hag en diwezh, goude din merzout e c'hall holl an hevelep meizennoù a sav ennomp, ha ni dihun, dont dimp kenkoulz all, ha ni kousket, hep navitse da hini anezho bezañ gwir, e ris diwar-henn va mennoz ober evel pa na vije gant an holl bezhioù deuet biskoazh war va

spered, brasoc'h gwirded eget na oa gant an touelladurioù o vont d'ober va huñvreoù.

Nemet endra ma felle din evel-se soñjal e oa diwir pep pezh, setu-me kerkent goude ha teurel pled e ranken, dre ret, ha ME o vout o soñjal se, bout va-unan ur pezh bennak. Hag ar wirionezenn da heul : "BOUT E SOÑJAN, RAK-SE BOUT EZ ON", dre ma verzen na oa hini ebet eus holl vertezeadoù brishañ an arvarourion evit he distroadañ, ken postek ha ken diogel ha ma oa-hi, e kavas din e c'hallen hep morc'hed he degemer evel kentañ diazezenn d'ar brederouriezh oan o klask.

Ha me pelloc'h d'imbroudiñ gant aked war va divout ha gwelout e c'hallen asvaniñ⁽⁴⁷⁾ na ve ganin korf ebet, na war va zro bed ebet o vezout, na kennebeut lec'h ebet, din da vezañ ennañ;nemet ne c'hallen ket asvaniñ na oan-me ket'o vezout, peogwir, en enep, e tedarzhe ken splann-all ha ken diarvar e oan o vezout diouzh end-seun ma oan o soñjal diskrediñ war wirded ar pezhioù all; c'hoazh mar bijen chomet hep soñjal, daoust da gement a vije bet empentet ganin bezañ gwir, neuze c'honvat n'em bije mui bet an disterañ digarez da grediñ e oan o vezout. Sed eta dre benaos e welis e oan ur solwez, rac'h an anien pe an natur anezhañ soñjal.

52

ha netra ken, hep tamm ezhomm dezhañ na da gaout siseurt lec'h na kennebeut all da sujeren⁽⁴⁸⁾ ouzh an disterañ tra danvezel⁽⁴⁹⁾. E doare ma'z eo diforc'h-kreñn diouzh ar c'horf ar seurt ME, henn eo : ar spered ma'z on drezañ ar pezh ez on hag e vez zoken aezetoc'h hemañ d'anavezout eget na vez hennezh; ken, o lakaat na vefe ket anezhañ, n'ehanfe ket evelkent egile da vezañ rac'h ar pezh ez eo.

Diwar-henn e sellis dre vras ouzh ar pezh a zo rekis d'ur grafenn bennak da vezañ gwir ha diogel; rak, ha me o paouez kavout unan anavezout ganin heñvelseurt, e soñjis e ranken ivez anavezout endalc'h-adurezh⁽⁵⁰⁾ hevelep diogelled. Hag ar bomm "soñjal a ran, setu perak ez on", o verzout n'eus ennañ siseurt ebet oc'h anataat din e lavaran ar wirionez, panave e welan splann-kaer e ranker bezout evit soñjal, e kavas din e c'hallen kemer da reolenn voutin : bout gwir an holl bezhioù a veizomp splann-tre ha diforc'h-tre, nemet bezañ diaesoc'hik diverzout pere a veizomp diforc'h.

Hag o prederiañ da c'houde war va bout oc'h arvariañ ha, dre se, war va bout hep bezañ peurglok, - pa welen splann e oa gouiziadurezh peurglokoc'h eget entremar -, e vennadis klask a belec'h e teuas din soñjal e peurglokoc'h eget na oan; ma tiverzis-

53

anat e tlee se donet diñ diouzh un anien bennak ha hi peurglokoc'h e gwirionez. Evit a sell ouzh kealioù ganin eus kalz a bezhioù hag int en divaez din, evel an oabl, an douar, ar sklêrijenn, an tommer ha miliadoù reoù all, ne oan ket e preder gouzout a belec'h e teuent, rak, dre ma ne verzen ganto seurt ebet o tiskouez e oant dreistel⁽⁵¹⁾ din, e oa tu evidon da grediañ, o lakaat e oant gwir, na oant nemet sujereadurioù ouzh va anien e kement ha ganti tamm pe damm peurglokted; hag o lakaat na oant ket, e teuent din neuze diouzh an netra, da lavarout eo n'edont ennon nemet dre ma oa olboud ennon⁽⁵²⁾. Heñvelseurt, avat, n'halle bezañ ganin keal ur boud hag eñ peurglokoc'h eget va hini : rak, donet-eñ din diouzh an netra oa dic'hallus-anat, koulz ha donet-eñ diouzhin va-unan, peogwir bout ar peurglokañ o tisoc'hañ eus an anglokañ hag e sujere outañ a zo ken argerzhus ha bout ur pezh bennak o tedarzhañ diouzh nep pezh. Ken na chome ken din nemet soñjal e vije bet-eñ lakaet ennon gant un anien all peurglokoc'h e gwirionez eget na oan-me, unan ha ganti end-eeun bloc'h an holl beurglokterioù a c'hallen-me kaout ur c'heal bennak anezho, da lavarout eo, din da droc'hañ berr, unan hag a vije DOUB.

52

ha netra ken, hep tamm ezhomm dezhañ na da gaout siseurt lec'h na kennebeut all da sujeren⁽⁴⁸⁾ ouzh an disterañ tra danvezel⁽⁴⁹⁾. E doare ma'z eo diforc'h-krenn diouzh ar c'horf ar seurt MB, henn eo : ar spered ma'z on drezañ ar pezh ez on hag e vez zoken aezetoc'h hemañ d'anavezout eget na vez hennezh; ken, o lakaat na vefe ket anezhañ, n'ehanfe ket evelkent egile da vezañ rac'h ar pezh ez eo.

Diwar-henn e sellis dre vras ouzh ar pezh a zo rekis d'ur grafenn bennak da vezañ gwir ha diogel; rak, ha me o paouez kavout unan anavezout ganin heñvelseurt, e soñjis e ranken ivez anavezout endalc'h-adurezh⁽⁵⁰⁾ hevelep diogelled. Hag ar bomm "soñjal a ran, setu perak ez on", o verzout n'eus ennañ siseurt ebet oc'h anataat din e lavaran ar wirionez, panave e welan splann-kaer e ranker bezout evit soñjal, e kavas din e c'hallen kemer da reolenn voutin : bout gwir an holl bezhioù a veizomp splann-tre ha diforc'h-tre, nemet bezañ diaesoc'hik diverzout pere a veizomp diforc'h.

Hag o prederiañ da c'houde war va bout oc'h arvariañ ha, dre se, war va bout hep bezañ peurglok, - pa welen splann e oa gouiziadurezh peurglokoc'h eget entremar -, e vennadis klask a belec'h e teuas **din soñjal** e peurglokoc'h eget na oan; ma tiverzis-

53

anat e tlee se donet din diouzh un anien bennak ha hi peurglokoc'h e gwirionez. Evit a sell ouzh kealioù ganin eus kalz a bezhioù hag int en divaez din, evel an oabl, an douar, ar sklêrijenn, an tommer ha miliadoù reoù all, ne oan ket e preder gouzout a belec'h e teuent, rak, dre ma ne verzen ganto seurt ebet o tiskouez e oant dreistel⁽⁵¹⁾ din, e oa tu evidon da grediañ, o lakaat e oant gwir, na oant nemet sujereadurioù ouzh va anien e kement ha ganti tamm pe damm peurglokted; hag o lakaat na oant ket, e teuent din neuze diouzh an netra, da lavarout eo n'edont ennon nemet dre ma oa olboud ennon⁽⁵²⁾. Heñvelseurt, avat, n'halle bezañ ganin keal ur boud hag eñ peurglokoc'h eget va hini : rak, donet-eñ din diouzh an netra oa dic'hallus-anat, koulz ha donet-eñ diouzhin va-unan, peogwir bout ar peurglokañ o tisoc'hañ eus an amglokañ hag e sujere outañ a zo ken argarzhus ha bout ur pezh bennak o tedarzhañ diouzh nep pezh. Ken na chome ken din nemet soñjal e vije bet-eñ lakaet ennon gant un anien all peurglokoc'h e gwirionez eget na oan-me, unan ha ganti end-eeun bloc'h an holl beurglokterioù a c'hellen-me kaout ur c'heal bennak anezho, da lavarout eo, din da droc'hañ berr, unan hag a vije DOUE.

Ouzh heñn e strollis na oa ket ac'hanon ar boud nemetañ o hanvout, peogwir ez anavezen un toullad peurglokterioù hep din o c'haout (salokras, gant geriennoù ar Skol⁽⁵³⁾ eo a rin amañ e pep frankiz), nemet e ranke unan all bennak peurglokoc'h bezout, m'oan-me sujereet outañ, hag o kaout digantañ kement a oan perc'henn dezhañ. Rak, o lakaat e vijen bet em unan o vezout ha disujere diouzh kement hini all, e doare ma vijen bet perc'henn, drezon va unan, da vloc'h an nebeud a genlodennen gant ar Boud Peurglok, neuze moarvat em bije gallet, evit an hevelep abeg, tennañ diouzhin ivez bloc'h ar peb-all a ouien ober diouer din, ha diwar-se, bout va-unan didermen, hollbad, digemm, hollanaoudek, hollc'halloudek, hag en diwez, kaout an holl beurglokterioù a c'hellen spurmantiñ bezañ gant DOUE.

Rak, diouzh ar poellatadoù o paouez dont amañ ganin, evit ma teujen d'anavezout anien DOUE kement ha ma c'hallen ober gant va hini, e oa trawalc'h din sellout ha bez'e oa peurglokted pe ne oa ket o perc'hennañ an holl bezhioù a geven ennon ur c'heal bennak anezho, ha raktal e teue da vezañ divarteze din, evit kel ar pezhioù anat warno un diglokter bennak, n'edo hini ebet anezho EMNAÑ, nemet, en enep, edo bloc'h an holl reoù all. Dres evel ma

welen n'edo EMNAÑ nag entremar, na valigañs, na tristidigezh na seurt all heñvel, peogwir e vijen bet' laouen-kaer me va-unan o kaout an distrob anezho. En tu-hont da se c'hoazh edo ganin kealioù eus kalz a draoù skiantoù ha korfel : rak daoust din goulakaat e oan oc'h huñvreal hag e oa diwir kement a welen pe a faltazien, padal n'hallen ket nac'h n'edo ket ar c'healioù anezho evit gwir em spered; hogen, dre ma oan deuet endeo, diwar imbroud, da c'houzout splann-kaer, ez eo diforc'h an anien veizel diouzh an hini gorfel, neuze, goude din merzout e par sujereidigezh war bep kenelfennadur hag e tiskouez anat ar sujereidigezh bezañ un diouer, e tevarmis na c'helle ket tremen evit peurglokter da ZOUÉ bout-EN kenelfennet gant an div anien-se hag en abeg da se na oa ket; hogen mar edo dre ar bed lod korfoù pe speredoù pe anienoù all hep na vije peurglok hini anezho, e ranke neuze o boud sujeren ouzh E c'halloud-EN, kement ha ken bihan ma ne c'hallent trebadout HEPZAN, ur predig paneveken.

Er goudevezh e fellas din klask gwirionezennoù all; hag o troadañ va ratozh war sellad ar ventonourion meizet ganin evel ur c'hendalc'had⁽⁵⁴⁾, pe c'hoazh evel un egor astennet anvevenn hed-led ha

56

krec'h-traoù, ha gouest da vezañ dasparzhet e meur a gevran liesluniek ha liesmentek, loc'hadus ha treuzlec'hiadus war gement tu a zo, - rak bloc'h ar seurt goulakadurioù a gaver e sellad ar ventonourion -, setu me neuze ha brazimbourc'hiñ ar pep eeunañ eus o anataurioù. Hag o teurel pled nan eo diazezet ar seurt gourdiogelled a vez anzavet dezho gant an holl nemet war ar perzh e vezont meizet splann hervez ar reolenn bet meneget ganin ergent-aoiik, e verzis war un dro n'edo mann ebet enno e-tailh de'm diarvariñ e-keñver bezoud ar sellad anezho. Rak, ha me da skouer o c'houlakaat un tric'horn, pegement bennak ma welen mat e ranke an tri c'hogn anezhañ bezañ par da zaou gorn serzh, ne welen mann all, evit kelo-se, oc'h anataat din e vije un tric'horn bennak dre ar bed. Hogen oc'h imbroudiñ adarre keal ar Feurvoud, e kaven ar bezoud endalc'het gantañ, dres evel ma'z eo endalc'het gant hini un tric'horn bout par an tri c'hogn anezhañ da zaou gorn serzh, pe c'hoazh gant hini ur voull bout keitpell an holl gevranoù anezhi diouzh he c'hreiz, ha se splannoc'h c'hoazh zoken; ken ez eo diwar-se ken diarvar d'an nebeutañ ha ma c'hellfe bezañ ne vern pe anatur mentoniezhe emañ DOUE o vout pe o vezout, hag EN ar Feurvoud ANEZHAÑ.

57

Bez'ez eus koulskoude tud gonezet gant ar mennoz e vez bec'h o tastum gouiziadur ANEZHAÑ ha zoken eus o ene; ha pezh a zo kiriek da se eo na sevont kammed o spered en tu-hont d'an traoù skiantañ, rak ken kustum e vezont da studiañ pezh pe bezh, diwar an enskeudennadur anezhañ ha tra ken, - un doare-soñjal henezh hag a zo diouzh ar pezhioù danvezek -, ma kred dezho na vez meizadus nemet pezh a vez enskeudennadus. Hag ur menno boutin a-walc'h eo henezh, peogwir en o skolioù, e tremen gant ar brederourion da bemreolenn : na gaver "nep pezh dre ar meizout na ve bet da gantañ dre ar merzout"⁽⁵⁵⁾, petra bennak ma'z eo diarvar koulskoude n'eo deuet biskoazh kealioù Doue hag an ene dre eno.

Ken e sellan-me neb a venn arverañ e enskeudennerezh, evit o c'hompren⁽⁵⁶⁾, evel unan hag a c'hoantafe klevout pe c'hwesa gant e zaoulagad, ha goude ma vefe c'hoazh un diforc'h evelkent, rak, skiant ar gweled n'eo ket muioc'h dianat dimp gwirid he rakvoudoù eget nan eo hini ar c'hwesa pe ar c'hleved, endra n'hallfe biken nagenskeudennerezh na skiantaerezh anataat seurt ebet dimp, anez d'hor meizerezh darbodiñ.

Neuze mar chom bepred hiniennoù hep bezañ ken-
drec'honiet a-walc'h war vezoud Doue hag o ene, war-
lerc'h an abegennoù degaset amañ ganin, e karfen
reiñ dezho da c'houzout ez eo arvarkekoc'h an holl
draoù all, pegement bennak ma tevezont marteze bezañ
diarvaretoc'h war o divout, evel kaout ur c'horf,
kaout sterennoù hag un douar war o zro ha kement zo
heñvel. Rak seurt traoù, dacoust d'an diogeloni⁽⁵⁷⁾
hon eus anezho, hag unan ken bras ma n'eus ket tu,
hervez doare, d'arvariñ warno, nemet ha fursot e
vefed, padal, nemet ha diboell e vefed ivez, pa vez
anv eus diogelded usvedoniel⁽⁵⁸⁾, n'eur ket evit
nac'h nan eus ket peadra a-walc'h da gaout diogelded
c'hroñs anezho, diwar-bouez bezañ taolet pled hep-
ken e c'hallomp kenkoulz-all faltaziañ, ha ni kousket,
hon eus ur c'horf arall, hag e welomp sterennoù
arall hag un Tir arall, hep na ve fulenn anezho.
Rak penaos gouzout e vez ar meizennoù diwar huñvre
diwiroc'h eget ar re all, peogwir ne vezont lies a
wech na bouc'hoc'h na dispisoc'h a se ?

Poaniet ar gwellañ speredoù ganti, kement ha ma
karint, evidon-me ne gredan ket e c'hallfent, anez
raklakaat bezoud Doue, degas tanfoeltr abegenn a
spirfe da skarzhañ kuit seurt entremar. Rak, pezh
am eus degemeret evel reolenn diagentik, da spis-
aat : bout gwir kement a vezomp splann-tre ha

diforc'h-tre, se, da gentañ, n'eus gentañ diogel-
ded, nemet peogwir amañ DOUE o vout pe vezout
hag EN ar Feurvoud ANEZHAÑ ha dre ma teu dimp
DIGANTAÑ kement zo ennomp. Ma teheul ac'hano na
c'hell bezañ nemet gwirded gant hor mennozioù pe
gealioù, o vezañ ma'z int pezhioù bezoudek⁽⁵⁹⁾
hag o tedarzhañ diouzh DOUE dre gement perzh o
laka splann ha diforc'h. Ken, mar sav ennomp darn,
ha ganto diwirded, aliesik, n'hall seurt-se bezañ
nemet reoù luziet ha displann enno pezh pe bezh,
ha se, dre ma kenlodenont gant an netra, da lav-
arout eo n'en int evel-se luziet ennomp, nemet
dre an abeg ma'z omp diglokvoudel. Ha bezañ diwir-
ded ha diglokted, betek heñvelseurt⁽⁶⁰⁾, o tedarzh-
añ diouzh DOUE, a zo, anat eo, ken argarzhus ha
bezañ gwirded ha peurglokted o tedarzhañ diouzh
an netra. Hogen, penave dimp gouzout e teu diouzh
ur Boud peurglok ha didermen kement pezh bezoudek
ha gwir a zo ennomp, pegen splann ha diforc'h
bennak e c'hallfe hor c'healioù bezañ, bepred e
fazife dimp pep abegenn d'hon diarvariñ e ve ganto
peurglokted ar wirded.

Hogen goude dimp bezañ bet diarvaret evel-se
war seurt reolenn, dre berzh anaoudegezh DOUE hag
an ene, ez eo aes-mat gwelout na zle mui tamm ebet

an huñvreadurioù empenñtet ganimp pa gouskomp, ober dimp diskredañ war wirmed ar meizennoù a sav ennomp, ha ni dihun. Rak, mar degouezhfe d'an nen kaout, zoken dre e gousk, ur c'heal bennak hag a ve fraezh-holl, evel, da skouer, dont d'ur mentoniour dizoleañ un anatadur nevez, n'eo ket ar c'housked a gement a virfe outañ da vezañ gwir. Hag evit kel an touell stag peurvuiañ ouzh hon huñvreademoù, - hag eñ o c'hoarvezout e kement ha ma vez neuze skeudennet ennomp traezoù liesseurt, dres en hevelep doare ha ma vezont gant hor skiantoù-korf, - ne dalv ket eñ da reiñ tro dimp da zisfiziout diouzh gwirmed ar seurt kealioù, peogwir e c'hallomp ivez faziañ warno aliesik, hep na vemp kousket : dres evel ar re a vez ganto ar melenadur, pa welont liv ar melen gant pep tra, pe c'hoazh evel ar sterenoù ha korfoù all gwall bell diouzhimp, pa seblantont dimp bezañ kalz bihanoc'h eget nan int. Rak, setu : divorfil pe gousket, arabat dimp gwech ebet plegañ d'ar gendrec'h-idigezh, nemet ha diwar-bouez anadurezh e ve digant hor poellerezh. Ha ra vo merzet mat e lavaran hor poellerezh ha neket hon enskeudennerezh nag hor skiantaerezh. Koulz ha goude dimp gwelout an heol splann-meurbet, e ve arabat dimp, evit kelo-se, dez-varn na ve gantañ nemet ar vent a welomp-ni dezhañ;

ha kaer hor befe enskeudennañ fraezh-mat ur penn leon war gorf ur c'havr, c'hoazh n'hallfemp ket evit se dezastum ez sus dre ar bed ur C'himerenn bennak : rak, n'eo ket merket dimp gant ar poell e ve gwirion pezh a welfemp pe a faltazifemp evel-se. Merkañ mat a ra dimp, avat, e rank kement memnoz pe geal ganimp kaout ur soliad bennak a wirmed, anez, e vefe dic'hallus e vent bet lakaet ennomp gant DOUE, hollglok hag hollwirion evel ma'z eo. Ha peogwir ne vez kammed hor poellatadurioù, endra gousket, ken anat na ken anterin hag endra zihun, daoust d'hon empentadurioù neuze bout alies ken pe vuio'h lemm ha spisdremmet, e verk eñ dimp ivez, evit kel ar meizennoù o tont ganimp - hag int hep gallout bezañ gwir holl gwitibunan, pa n'omp ket ni kennebeut hollglok -, e rank ar c'hementad gwirmed a vez ganto parañ dic'hwitus-kaer war gement hini a sav ennomp, kentoc'h endra vezomp dihun, eget endra huñvreomp.

o

o . o

P E M P V E T L O D E N N

Karout a-walc'h a rafen kenderc'hel ha reiñ amañ da welout en he fezh steuded ar gwirionezennoù all am eus tennet diouzh ar re gentañ nevez-deuet ganin ergentaouik. Hogen, dre ma rankfen neuze degas ar gaos war lies a graf - ha breud war o sigur etre gouiziaded na c'houlan-me tamm broc'hañ ganto -, e vo gwell din, a gredan, tremen warno ha komz dre vras hepken diwar o fenn, evit lezel ar re furañ da varn hag eñ e ve spletus d'ar c'hevredig, gouzout hiroc'h war o divout. Atav em eus dalc'het start d'ar mennoz graet ganin : chom hep arlakaat ken diazezenn all nemet an hini emañ o paouez ober diouti da boellanataat bezoud DOUE hag an ene, na degemer nep pezh da wir na vefe din sklaeroc'h ha diogeloc'h da welout eget na voe diagent anatadur ar ventonicourion. Padal e kredan lavarout em eus, neket hepken kavet an tu d'akuitañ, e berr amzer, gant ar c'hrafoù pennañ, boas da vezañ meret war dachenn ar Brederouriezh, nemet em eus c'hoazh diverzet lezennoù 'zo, hag i bet gant DOUE ken diazezet mat dre an Natur⁽⁶¹⁾ hag ar c'healiou anezho tennet ken fraezh war hon eneoù ma n'oufed mui diskrediñ, goude prederiañ warno mat a-walc'h, na vent ket int miret strizh e-

keñver pezh a zo pe a c'hoarvez dre ar bed. Hag o sellout pelloc'h ouzh heuliad ar seurt lezennoù, e kav din em bout dizoloet meur a wirionezenn, hag int ampletusoc'h ha talvoudusoc'h eget holl ar pezh am boa desket a-raok pe zoken bet ar spi da zeskiñ.

Nemet, peogwir em eus klasket diskleriañ ar pep pouezusañ anezho e korf ur pleustrad⁽⁶²⁾ - na c'hellan ket embann evit un nebeut abegoù⁽⁶³⁾, - ar gwellañ din d'ober neuze, dezhañ da vout anavezet, a vo lavarout amañ dre vras pezh a gaver ennañ. Va mennad zo bet, kent e lakaat dre skrid, dastum ennañ kement a soñje din gouzout diwar-benn anien ar pezhioù danvezek. Hogen, dres diouzh skouer al livourion: pa ne c'hellont ket, int kennebeut, skeudenniñ ervat war un daolenn gompes holl arvezioù disheñvel un dra fetis bennak, e tibabont neuze unan eus ar re heverk-añ hepken, d'e lakaat e gouloù an deiz, hag o lezel ar re all en amc'houlou, ne roont dezho anadurezh nemet betek ma c'hellont bezañ gwelet war-bouez sellout ouzh hennezh end-eeun, kenkoulz-all eta, ha me aon din na c'helljen lakaat em danevell kement a oa ganin war va spered, sed e tremenis gant displegañ an ampañ gwellañ tra ken nemet va meizadoù diwar-benn ar sklerijenn, en ur astenn, e-ser houmañ, ur meneg bennak diwar-benn an Heol hag ar

stered anloc'h, dre ma tedarzh-hi diouto hogos anteriñ; goude, diwar-benn an oabl, dre ma'z eo-hi treuzkaset gantañ; ivez diwar-benn ar planedennoù, ar sterennoù lostek hag an Tir, dre ma'z eo-hi dameuc'het ganto; ha pergen diwar-benn an holl draoù a zo war an douar, dre ma'z int pe livek pe dreuzwelus pe skedus; hag en diwez, diwar-benn mab-den, dre m'emañ-efñ oc'h arvestiñ outi. Zoken evit lezel an traoù-hont tamm pe damm en amc'houloù ha bezañ gouest da lavarout seul zieuboc'h a se pezh a soñjen war o divout, hep na ve dav din heuliañ pe dizarbenn ar mennoziou a vez degemeret gant ar ouiziaded, e tivizis leuskel rac'h an holl vedad-mañ dindan o rendael, din ken da gomz diwar-benn ar pezh a c'hoarvezfe war unan nevez mar kroufe DOUE bremañ, tu bennak dre an egorennoù empentadus, trawalc'h a vateri d'e aozañ war-bouez stribouilhañ kej-mej rannadoù liesseurt hevelep danvez, e doare da fardañ gantañ ur C'henluz⁽⁶⁴⁾ a c'hellfe barzhed taolenniñ gant an teñval ma vefe, ha kuit DEZHAÑ d'ober tra ken da c'houde nemet degas E skoazell voas d'an Natur, o lezel anezhi da vont hervez al lezenn bet GANTAÑ diazezet.

Ha me neuze ha tresskrivañ da gantañ hevelep materi, ha klask e skeudenniñ seulseurt ma n'eus

mann dre ar bed, a gav din, na ve sklaeroc'h na meizadusoc'h, keneve pezh a zo bet lavaret ergentaouik diwar-benn DOUE hag an ene : rak goulakaat a ris zoken, a-ratozh-kear, n'edo ennañ hini ebet eus ar furmoù pe berzhioù ma vez ar Skolioù o tabutal war o divout, na, dre vras, seurt all a vefe ken reizh an anaoudegezh anezhañ d'hor meiz, ma n'hor befe tu ebet d'ober van zoken d'en dianavezout. Reiñ a ris ivez da welout pere oa lezennoù an Natur; hag hep sintrañ va frouennoù gant nep diazezenn all, keneve peurglokterioù didermen DOUE, e ris diouzh lakaat anat kement hini a roje tro dimp d'arvantiñ warni tamm pe damm, hag ivez diouzh reiñ da welout e vezont seulseurt ma n'eus nep bed arall na dizhfent bezañ miret ennañ, gant lakaat en defe DOUE krouet lies a hini. Diskouez a ris pelloc'h penaos, da heul al lezennoù-hont, e tlee ar pep brasañ eus danvez hevelep Kenluz dont da gemer ur stumm bennak hag un doare framm, dezhañ da hañvalaat ouzh hon oabloù-mi; hogen penaos ivez e tlee lod eus e rannadoù mont d'ober un Tir, tra ma raje lod all planedennoù ha sterennoù lostek, ha lod all un Heol ha stered anloc'h.

Hag ennañ, o pouezañ war gudenn al Luc'h, e tisplegis hir-mat peseurt hini oa moarvat da gevout

gant an Heol hag ar stered ha penaos, en un taol, e treuze-efñ alesont eo'honnennoù divent an oablou, penaos ivez oa dameuc'het-efñ war an Tir gant planedennoù ha sterennoù lostek. Pezhioù all niverusik a lakais ouzhpenn o tennañ d'an danvez, al lec'h-iadur, al lec'h ha ken lies perzh a'zo stag ouzh an oabl hag ar sterennoù-hont; kement ha ma kave din edon erru pell-a-walc'h evel-se gant va son da reiñ d'anaout nan eus mann da verzout e traoù hon hollvedad-ni na zlefe pe, da vihanañ, na c'hellfe bezañ heñvel-mik da welout e traoù ar bed oan o tresskrivañ.

Diwar-henn e teuis da spisaat e-sigur an Tir: penaos n'ehane ket e gevrannoù da luskañ davit ar c'hreiz dik anezhañ, daoust din avat bezañ goulakaet fraezh n'en doa roet DOUE d'an danvez o vont d'e ober tamm ponnerder ebet; penaos adarre gant an dour hag an aer a zo war e c'horre, e tlee stad an oabl hag ar sterennoù, hini al Loar dreist-holl, degas ul lanv'hag un tre heñvel e pep keñver, ouzh pezh a verzomp-ni amañ gant ar morioù hag, ouzhpenn, ur meni red dre an dour koulz ha dre an aer, adalek ar Reter betek ar C'hornog, c'hoazh evel m'en gweler etre an Trovanoù; penaos e c'hall ivez menezioù, morioù, stivelloù ha stêrioù diwanañ warnañ ha

metaloù dont diwar ar mengleuzioù ha plantennoù kreskiñ war ar maezioù ha, dre vras, kement korf anvet kemmesk pe kenaczet bezañ ganet ennañ.

Ha peogwir war-lerc'h ar sterennoù n'anavezan, dre douez an traoù all, seurt ebet estreget an tan a gement a daolfe sklerijenn, e lakais preder da zisplegañ fraezh-meurbet kement pezh a denn d'e natur; penaos e teu-efñ da vezañ graet, penaos e vez maget, penaos a-wechoù ne vez gantañ nemet gwrez hep luc'h, hag a-wechoù nemet luc'h hep gwrez; penaos e vez gantañ intret, e korfoù liesseurt, livioù ha perzhioù all niverus; penaos e vez lod anezho teuzet gantañ ha lod all kaledet; penaos e c'hall o leskiñ hogos holl gwitibunan pe c'hoazh o fulluc'hañ pe vogedekaet, hag en diwez penaos, dre fo nemetañ e nerzh, e taskor-efñ gwer diwar ludu. Ha dre ma kaven hevelep treuzkemmañ a ludu da wer ken estlammus evit gwir ha ne vern peseurt hini dre an Natur, e kemeris plijadur dibar gant an tresskriverezh anezhañ.

Pedál n'houlenn ket dezastum diwar-henn e oa bet krouet ar bed-mañ hervez an doare a ginnigenn; rak, gwirheñveloc'h eo, un tamm mat, e voe stummet adalek an derou gant DOUE diouzh ar seurt ma ranke bezañ. Diarvar eo, avat - ha kevrediañ ar

meno d'an deologourion -, ez eo mar-mik E wered-
EN bremañ d'e virout d'an hini lakaet GANTAÑ d'e
grouiñ; kement ha ken bihan, ken, ha goude ma n'EN
dije roet dezhañ, en deroù, nep stumm estreget hini
ur C'henluz, gant diazezañ evelato lezennoù an
Natur ha degas E c'hored da houmañ da labourat evel
m'eo-hi boas d'ober, ma c'heller krediñ, hep noaz-
out ouzh burzhud ar Grouidigezh, o dije gallet, ken
nemet rak se, bloc'h ar pezhioù a zo danvezek-holl
dout da vezañ, gant an amzer, heñvelseurt m'o gwel-
omp-ni d'an ampoent. Ha kalz aezetoc'h e vez emi-
chañs reizout o natur pa vezont gwelet o tiwanañ
evel-se tamm-ha-tamm, eget pa seller outo hepken,
hag i deuet da vezañ peuro'hraet.

Goude tresskrivadur ar c'horfoù diveved hag
ar plantennoù, e trois war hini an anevaled ha, dre
spis, war hini mab-den. Hogen, dre ma ticouren
c'hoazh gouziadur a-walc'h anezho, din da son di-
war o fenn en hevelep doare ha ma raen evit ar pep
all - henn eo, o tiskouez an devoudadoù dre berzh
an devouderioù hag o reiñ da welout diwar betore
had ha dre benaos e tle an Natur o c'henderc'hañ -
e tremenis gant goulakaat e vije bet DOUE o pleusk-
añ korf un den heñvel-mik ouzh hini unan ac'hanomp,
koulz e-keñver stumm diavaez an izili hag e-keñver

kempennadur diabarzh an organoù, hep DEZHAÑ e gen-
aozañ gant nep materi estreget an hini bet tres-
skrivet ganin na lakaat ennañ, en deroù, nep ene
poellek na seurt all ebet o talvoud dezhañ da ene
struzhek⁽⁶⁶⁾ pe skiantak⁽⁶⁷⁾; nemet EN dije broud-
et en e galon unan eus ar seurt tanoù disklerijenn,
hag i bet endeo displeget ganin, c'hoazh ne veizen
dezhio anien all estreget an hini a vez o lakaat ar
foenn da c'horfiñ, pa vez bet dastumet ent-glas, pe
ivez an hini a ra d'ar gwin nevez birviñ, p'en lezer
da c'hoiñ war ar maskloù. Rak, oc'h imboure'hiñ ar
c'hefridiezhioù⁽⁶⁸⁾ a c'helle diwar-se bezañ gant
hevelep korf, e kaven dres kement hini a zo ganimp-
ni, kuit dimp a soñjal enno zoken na, dre-se, hep
ma'z emellfe enno hon ene, henn eo, ar rann-se di-
forc'h dicouzh ar c'horf, c'hoazh em eus diskleriet
uheloc'h en he sigur bout an anien anezhi soñjal
ha netra ken; hag holl, kement ha ma'z int, hañval
an eil ouzh an all; ken e c'haller lavarout e taol
dimp an anevaled neppoell, hep na vijen-me gouest
navitae da gavout ganto nikun eus ar reoù⁽⁶⁹⁾ a vez
e gourc'hemenn ar reiz hag oc'h aparchantañ ouzhimp
evel tud; e-lec'h m'o dizoloen bloc'h ganto goude
din goulakaat en dije DOUE krouet un ene poellek
hag e gediet ouzh ar c'horf-hont hervez un doare a

dresskriven.

Hogen diouzh ma welor penaos e veren eno seurt donvez, e karfen bremañ lakaat amañ an disklêriadur diwar-benn lusk ar galon hag an talmennoù, rak, hag eñ ar c'hentañ hag an hollekañ hini a vez anat gent an anevaled, e vo aes dezvern dioutañ pezh a zo da soñjal diwar-benn ar reoù all.

Hag evit ma veizer aesoc'h a se pezh a lavarin war henn, e karfen gwelout ar re nan int ket arroutet war ar Gorfadurezh o kemer ar boan, a-raok lenn kement-mañ, da lakaat troc'hañ dirazo kalon ul loen bras bennak, gantañ skevent, rak heñvel a-walc'h e vez-hi, e pep keñver, ouzh hini an den; ha neuze goulemm ma vo diskouezet dezho an div gell pe gleuzenn⁽⁷⁰⁾ a gaver enni.

Da gentañ, hini an tu dehou anezhi, div gorzenn ledan-bras o kejañ ganti, da spisaat :

- ar wazhienn-gav, anezhi pennañ mirlestr ar gwad, ha hi evel keñver ar wezenn m'emañ holl wazhied all ar c'horf oc'h ober he barroù;
- neuze ar wazhienn-dalmer⁽⁷¹⁾, un anv fall hemañ, pa'z eus anezhi e gwir un dalmerenn o kemer hec'h andon er galon, hag ur wech difluket diouti, o liesskourrañ dre bezh ar skevent.

Pelloc'h hini⁽⁷²⁾ an tu kleiz, ivez div gorzenn ken ledan pe ledanoc'h eget ar re gent o kejañ ganti en hevelep doare, da spisaat :

- an dalmerenn wazhiennel⁽⁷³⁾, anvet fall ivez, dre ma n'eus anezhi nemet ur wazhienn o tarzh-mañ diouzh ar skevent, lec'h m'eo dasparzhet e skourroù niverus o kenweañ gant reoù ar wazhienn dalmer hag ivez gant reoù ar seurt kan anvet c'hwitell⁽⁷⁴⁾, ma tenner drezañ an anal;
- neuze an dalmerenn vras⁽⁷⁵⁾ o tiflukañ diouzh ar galon da strewiñ he skourroù dre bezh ar c'horf.

Bez'e karfen ivez e tiskouezfad pervezh dezho an unnek pluskennig⁽⁷⁶⁾, anezho evel ken lies a zorkikell o tigeriañ hag o stankañ ar pevar riboul a gaver en div gleuzenn, da spisaat :

- teir⁽⁷⁷⁾ ouzh genou ar wazhienn-gav, lec'h ma'z int stignet e doare ma ne c'hellont tamm ebet herzel ouzh ar gwad a vez eno da vont e kleuzenn zehou ar galon, daoust ma viront groñs outañ da zont er-maez;
- teir all⁽⁷⁸⁾ ouzh genou ar wazhienn-dalmer, hag i, dre ma'z int stignet peurontrol-kaer,

o lezel ar gwad a vez e-barzh ar gleuzenn-hont da dremen e-barzh ar skevent, hep d'an hini a vez e-barzh ar skevent gallout dont di war e c'hiz;

- div all c'hoazh⁽⁷⁹⁾ ouzh genou an dalmerenn wazhiennel, hag int o lezel ar gwad da redek diouzh ar skevent trema kleuzenn gleiz ar galon, met o virout outañ da zistreiñ;
- ha teir adarre⁽⁸⁰⁾ ouzh genou an dalmerenn vras, aotreet ganto ar redek diouzh ar galon, harzet avat an distro daviti.

Ha n'eus ket ezhomm da glask abeg all da niver ar seurt pluskennigoù nemet peogwir ez eo hirgelo'h-iek genou an dalmerenn wazhiennel, en askont d'al lec'h m'emañ o pengenniñ, hag aesoc'h a se dezhañ bezañ stanket gant div, endra vez diwallusoc'h d'ar re all, pa'z int kelc'hiek, bezañ gant teir.

Karout a rafen c'hoazh e vefe roet dezho da welout ez eo kaletoc'h ha startoc'h - danvezennet an dalmerenn vras hag ar wazhienn - dalmer eget nan eo an dalmerenn wazhiennel hag ar wazhienn-gav; hag emañ an div-mañ o vont war deñvaat kent trebarzh-iañ⁽⁸¹⁾ er galon hag oc'h ober eno evel div yalc'h anvet divskouarn ar galon m'eo heñvel ar c'hig

anezho ouzh hec'h hini; hag ivez ez eo brasoc'h an tommder e diabarzh ar galon eget e pep lec'hienn all bennak dre ar c'horf ha barrek en diwez ur seurt gwrez, pa strink un dakenn wad bennak en he c'hleuzennoù, d'ober diouzh ma teufe houmañ trumm da goeñviñ ha da stambouc'hañ, evel ma ra peurvuiañ kement liñvenn a vez lezet da verañ en ul lestr bennak tomm-berv.

Rak, war-lerc'h-se, n'em eus ket ezhomm da vont pelloc'h da zisplegañ lusk ar galon, panevet, evit kel he c'hleuzennoù, pa chomont hep bezañ karget gant ar gwad, e tiver hemañ tamm pe damm dre ret diouzh ar wazhienn-gav e-barzh an hini zehou ha diouzh an dalmerenn wazhiennel e-barzh an hini gleiz; seul vui ma vez leun atav an div wazhienn-mañ ha ne c'hell ket ar genou anezho troet war-du ar galon bezañ stanket d'ar c'houlz-se. Hogen, pa gouezh evel-se bep a dakenn wad e pep kleuzenn - hag int beradennoù gwel vras, rak brasmat an trebarzhioù⁽⁸²⁾ ma'z eont drezo ha leun-tenn ar gwazhienn ma teuont diouto -, kerkent e tanavaont hag e stambouc'hont en abeg d'ar gor a gavont eno; hag o lakeat ar galon diwar-se da c'hwezhañ, e poulzont hag e stankont ar pemp dorikell ouzh trebarzh an div wazhienn ma teuont diouto, oc'h

herzel dre eno na ziskennfe muioe'h a wad er galon; hag 'o terc'hel bepred da vont'war danavaat, e pouz-ont hag e tigoront ar c'hwec'h dorikell all ouzh trebarzh an div wazhiedenn all ma skarzont drezo, o lakaat evel-se da c'hwezhañ holl skourroù ar wazhienn-dalmer ha reoù an dalmerenn vras, war an hevelep tro, koulz lavaret, hag ar galon, tra ma tic'hwezh houmañ raktal goude, dres evel ma ra an talmerennoù gant ar gwad o yennat en o diabarzh; hag e vez neuze o c'hwec'h dorikell o serriñ, tra ma tigor ar pemp a zo war ar wazhienn-gav, en ur lezel adarre div veradenn all da dremen, ma vez ganto adc'hwezhet ar galon hag an talmerennoù, dres en hevelep doare ha gant ar re gent. Hag en askont ma tremen ar gwad, evel-se gant e hent d'ar galon, dre an div yalc'h-hont a vez anvet he divskouarn, e vez lusk ar re-mañ kontrol-fed d'hec'h hini-hi, peogwir e tic'hwezhont pa vez-hi o c'hwezhañ. Evit ac'hano, da virout ouzh an neb n'anevez ket nerzh an anatadurioù riñvellouriel pe ouzh piv bennak na vez ket boas da ziverzout ar prouennoù gwir diouzh ar re wirheñvel da glask nac'h kement-mañ hep teurel evezh outañ, e fell din merkañ dezho e tibenn ar seurt lusk emañ o paouez displegañ di-ouzh stignadurezh an organoù a c'heller gwelout

gant al lagad e diabarzh ar galon, diouzh ar gor a vez tu da verzout enni gant ar bizied, diouzh anien ar gwad a vezer gouest d'anaout dre arnod-erezh, ha se ken difazi ha ma ra hini un korolaj diouzh nerzh, lec'hiadur ha stumm e bouezioù hag e rodoù.

Mar goulenner avat perak ne zeu ket gwad ar gwazhiennoù da ziseriañ, war-bouez diruilhañ evel-se dalc'hmat e-barzh ar galon, ha perak ivez ne vez ket barr an talmerennoù gantañ - peogwir an holl gementad anezhañ o tremen dre ar galon e gengas enno - e vo a-walc'h din respont dre ar pezh a zo bet skrivet endeo gant ur mezeg Saoz⁽⁸³⁾, hemañ dleet da vezañ meulet evit bezañ freuzet ar c'hler amañ, ha bezañ bet an hini kentañ o kelenn e kaver, e beg an talmerennoù, meur a riboulig m'emañ drezo ar gwad, deuet dezho diouzh ar galon, o treantiñ skourroùigoù ar gwazhiennoù, evit distreiñ ac'hano d'ar galon; ken ma n'eo ar red anezhañ seurt all nemet un troista peurbad. Se zo lakaet gantañ war wel, diouzh ar c'hentañ, dre berzh un arnodadenn a vez boutin gant ar surj-ianed pa liamont ur vrec'h damstart a-us d'al lec'h ma tigoront ur wazhienn, oc'h ober evel-se d'ar gwad skarzhañ fonnusoc'h eget mar ne vefe liamm ebet. Ar c'hontrol-kaer o c'hoarvezout emichafis, mar lakafent

'al liamm izeloc'h etre an dorn hag an ask, pe c'hoazh mar liammfent start-kenañ uheloc'h. Rak anat eo e c'hell un ere damstardet herzel ouzh ar gwad a zo endeo e-barzh ar vrec'h da zistreiñ d'ar galon dre ar gwazhiennoù, endra na vir ket evit-se na zeufe bepred hini nevez dre an talmerennoù, en askont m' emaint dindan ar gwazhiennoù hag e vezont diaesoc'h da waskañ, gant ar c'haletoc'h ma'z eo ar c'hroc'hen anezho, hag ivez en askont ma tenn ar gwad, o tont diouzh ar galon, da dremen drezo war-du an daouarn gant un nerzh brasoc'h eget na ra pa zistro ac'hano war-du ar galon dre ar gwazhiennoù. Ha peogwir e skarz ar gwad evel-se diouzh ar vrec'h dre an ask a vez graet en ur wazhienn, e rank, dre ret, bezañ tremenvoed bennak traoùoc'h eget an ere, henn eo e-tro penn ar vrec'h, lec'h ma c'hell c'hoazh talmerennoù donet. Ar pezh a lavar ivez diwar-benn red ar gwad zo prouet gantañ kenkoulz-all dre ur meni pluskennigoù, hag int stignet un tamm dre-holl war-hed ar gwazhiennoù diouzh ma virfent outañ da dremen eus kreiz ar c'horf betek ar bleñchoù, oc'h aotren dezhañ hepken distreiñ diouzh ar blenchoù davit ar galon; hag ouzhpenn-se, gant an arnoderezh e tiskouez-efi ivez e c'hall an holl gementad a zo dre ar c'horf mont kuit en ur predadig dre un dalmerenn

nemetken, pa vez-hi troc'het, ha na pe ve-hi errestrizh zoken damostik d'ar galon, ken na vefe tu ebet da soñjal e teufe ar gwad eus lec'h all.

Kalz a draoù all zo avat o testeniekat bout an hini a lavaris devouder gwirion seurt lusk gant ar gwad. Da gentañ ar c'hemm, da skouer, a gaver etre an hini o skarzhañ dre ar gwazhiennoù hag an hini o skarzhañ dre an talmerennoù ne c'hall donet nemet dre ma'z eo hemañ tanavaet hag evel strilhet, war-bouez tremen dre ar galon; ma teu neuze da vezañ linkoc'h ha bouilhoc'h, hag ivez - raktal goude diflukañ, pe, mar kerer, tra ma vez c'hoazh en talmerennoù -, da vezañ tommoc'h eget na vez un tamm ar-raok distreiñ, henn eo, tra ma vez bepred er gwazhiennoù. Ha ma taoler evezh, e welor na vez hevelep kemm o parañ ervat nemet war-dro ar galon ha nebeutoc'h dre al lec'hiennoù a vez ar pellañ dicuti. En tu-hont da se, kaleter ar c'hroc'hen o vont d'ober ar wazhienn-dalmer hag an dalmerenn vras a ziskouez trawalc'h e sko ar gwad outo kreñvoc'h eget ouzh ar gwazhiennoù. Ha perak e vefe kleuzenn gleiz ar galon hag an dalmerenn vras frankoc'h ha ledanoc'h eget ar gleuzenn zehou hag ar wazhienn-dalmer, panave en askont da vad an dalmerenn wazhiennel chom hep bezañ aet pelloc'h eget ar skevent abaoe m'eo tremenet dre

ar galon, ma'z eo linkoc'h diwar-se ha mont primoc'h hag aezetoc'h war danavaat eget an hini nevez-deuet diouzh ar wazhienn-gav ? Hag ar vezeged o tastornat ar poulz, petra int gouest-int da ziwelout, anez dezho da gentañ-penn gouzout e c'hell ar gwad, hervez ma kemm e natur, bezañ tanavaet gant gwrez ar galon mui pe vihanoc'h, ha prim pe brimoc'h eget en araok ? Ha pa seller dre benaos e sil hevelep tomnder dre an izili all, c'hwistim hag eñ ne ranker ket anzav bout dre hantererezh ar gwad an hini eo, hemañ o taspugn tomnder en ur dremen dre ar galon hag, alese, o fennañ dre ar c'horf en e bezh ? - Ac'hano e c'hoarvez, pa denner gwad diouzh ul lodenn bennak, e lamer war un dro an tomnder diouti. Ha goude d'ar galon bezañ ken grizias hag un houarn ruz, neozh ne spirfe ket da dommañ an treid hag an daouarn evel ma ra, panave dezhi bezañ, e-pad an amzer, o tegas di gwad nevez. O vont pelloc'h, e tizoloer ivez dre eno kefridi wirion an analerezh hag a zo : degas aer fresk stank a-walc'h e-barzh ar skevent, evit d'ar gwad - hag eñ o tegouezhout diouzh kleuzenn zehou ar galon lec'h m'eo bet tanavaet hag evel aezhennaet -, dont eno da fetisaat ha da dreiñ e gwad adarre, kent dezhañ diruilhañ er gleuzenn gleiz, peogwir anez da se, n'hallfe ket

talvezout da vagañ an tan a zo enni. Pezh a zo kadarnaet gant doare al loened, rak, ar re n'o deus skeventenn ebet, e weler ivez n'o deus nemet ur gleuzenn hepken en o c'halon; hag ivez gant doare ar vabigoù, rak, peogwir n'int ket evit amplediñ diouto, tra ma'z int bac'het e kof o mamm, e kaver neuze dezho ur riboul o tegas gwad diouzh ar wazhienn-gav betek kleuzenn gleiz ar galon hag, ouzhpenn, ur gorzenn o tegas ivez diouzh ar wazhienn-dalmer betek an dalmerenn vras, hep tremen dre ar skevent. Hag ar goerezh neuze, penaos e vefe anezhañ e diabarzh ar c'hreuz, panave d'ar galon kas di tomnder dre an talmerennoù, ha gant-se un darn linkoc'h eus ar gwad evit harpañ teuzidigezh ar boued a lakeer eno ? Hag al labour treiñ e gwad chug ar boued-se, daoust hag-eñ ne vez ket aes e anavezout, pa verzer e vez strilhet-eñ war-bouez riboulat dre ar galon, marteze tremen kant pe daou-c'hant gwech bemdez ? Hag evit displegañ ar mezhur, ha kenderc'h ar bestlennoù liesseurt e-barzh ar c'horf, e vo a-walc'h lavarout e vez rannoù eus ar gwad - gant an nerzh ma red hemañ diouzh ar galon da veg an talmerennoù, war-bouez tanavaat - o sac'hañ e-kreiz-tre reoù an izili m'o c'haver, hag o kemer lec'h darn anezho a vez argaset evel-se; ken ma vez al lod-mañ-lod o

tec'hel en tu-mañ-tu, hervez lec'hiadur, stumm pe vent ar mandoulloù⁽⁸⁴⁾ a gavont war o hent; dres diouzh skouer ar c'hrouerioù liesseurt a c'hell pep hini ac'hanomp bezañ gwelet hag int, dre ma vezont toullet liesstum, o talvout da rannañ an eil diouzh eben greunenoù disheñvel.

Hag en diwezh ar pep heverkaff gant kement-mañ holl eo engehentadurezh an anevalsperedoù, hag int evel un nezhenn skaffvik-tre pe gentoc'h evel ur flamm glan-glan ha bividik-lemm o sevel atav gant fonn bras diouzh ar galon davit an empenn hag alesont o fennañ dre an elfoù⁽⁸⁵⁾ davit ar c'higennoù da reiñ lusk d'an holl izili; kuit a glask, evit kel ar rannoù-gwad bouilhañ hag intrusañ -, ha diwar-henn an azasañ da vont d'ober seurt speredoù, - perak e kasont war-du an empenn kentoc'h eget war-du lec'h all, panave en askont d'an talmerenoù, ouzh o dougen di, bout ar re o tont war an eeunañ-holl diouzh ar galon, ha peogwir ivez, o vont diouzh saveleñoù an Ardivinkerezh, heñvel ma'z int ouzh reoù an Natur : pa denn meur a dra da loc'hañ war un hevelep tu, lec'h ma vez re strizh an dachenn evito holl - evel ma ra rannoù ar gwad skarzhet diouzh kleuzenn gleiz ar galon pa dennont etrezek an empenn - neuze e vez distroet ar re wanoc'h hag habaskoc'h dre ret diwar

o hent gant reoù all, a vez barrekoc'h a se da red-ek o-unan-kaer war an tu-se.

Gant ar pleustrad oan bet e-sell da embann, e tisplegis spis a-walc'h an holl grafoù-se. Hag e tiskouezis da c'houde peseurt frammadurezh zo dleet e vefe hini an elfoù hag ar c'higennoù e korf an den kent d'an anevalsperedoù a zo ennañ kaout nerzh da gefloc'hañ an izili anezhañ, evel m'henn gweler, evit kel ar pennoù nevez-troc'het, pa vezont c'hoazh o fiñval hag o tantañ an douar, dacust ma'z int aet diene; ivez peseurt kemmoù zo dleet e c'hoarvezfe dre an empenn, kent dezhañ degas an dihunvan, an hunvan hag an huñvreoù; penaos e c'hall ar sklêrijenn, ar sonioù, ar c'hwezioù, ar blazioù, an tomm-der hag holl berzhioù all an traoù-diavaez tennañ warnañ keallioù liesseurt dre hantererezh ar skiantoù; penaos e c'hall an naon, ar sec'hed hag an diayoul-enoù all⁽⁸⁶⁾ kas ivez o re betek ennañ; petra a dleer kemer evit ar skiant voutin, o tastum ar c'heallioù-se; evel an eñvor o virout anezho hag evel ar faltazi, a c'hall o c'hemmañ a-ziseurt hag ivez stummañ reoù nevez, ha, dre eno, bennozh d'an anevalsperedoù dasparzhet gantañ dre ar c'higennoù, ke-floc'hañ izili ar c'horf ken diseurt-all, e kement ha ma c'hell hor re-ni c'honvat bezañ loc'het hep

d'hor mennezh mont d'o blenfañ evit kel an traez-
où a zeu dirak hor skiantoù pe an diayoulennoù a
sev ennoomp. Pevh na seblanto ket iskis tamm ebet
da neb a vez o c'houzout gant na pet ha pet em-
fifiver pe ardivink-emlusk liesseurt e c'hell kalv-
ezegezh mab-den ober - hep arver nemeur a bezh-
iennoù e-skoaz niver bras an eskern, ar c'higennoù,
an nervennoù, an talmerennoù, ar gwazhied ha kement
lodenn all a gaver e korf pep aneval - hag o sell-
out ar c'horf-se diwar-henn evel un ardivink pell-
espar gwelloc'h urzhiet, p'emañ-efi o tont diwar
zorn DOUE ha, gantañ en e ziabarzh, luskou bamus-
oc'h eget pehini bennak a c'hellfe mab-den kalvezañ.

Ha me da bouezañ episoc'h amañ, gant ar ra-
tozh, - lakaet e teufed da gavout hevelep ardivink-
où, dezho benvegadoù ha dremm ur marmouz pe ul
loen all bennak neppoell, - da reiñ da welout n'
hor befe ket an disterañ tu da ziverzout na vent
glez kenanien gant ar seurt loened end-eeun. E-
lec'h, mar befe anezho darn, hag i peurhañval ouzh
korf an nen, hag o trevezañ hon oberoù kement ha
ma vefe tu meizelson⁽⁸⁷⁾ d'henn ober, bepred e
vanfe ganimp daou stek dic'hwit-krenn da ziverzout
na vefe ket tud anezho evit gwir :

- an hini kentañ o vezañ na vefe biken gouest

ar seurt ganto d'arverañ komzoù nag arouez-
ioù all war-bouez o c'hennozañ evel ma reomp-
ni evit displegañ hor mennozioù d'an nesañ;
rak, pegement bennak ma c'heller meizout un
ardivink, hag eñ graet diouzh ma rannfe komz-
où, zoken un toullad reoù e-skeud gweredoù,
korfel o teges kemmoù bennak en e venvegadoù,
evel, da skouer, goulenñ pezh a venner lav-
arout dezhañ pa stoker outañ tu bennak pe
neuze, tu bennak all c'hoazh, hopal e reer
poan dezhañ ha kement-all heñvel, neozh
n'hallfe ket o c'hempenn a-ziseurt evit atebañ
ster kement a lavarfed dezhañ, evel ma vez
barrek d'henn ober drochañ den a zo ;

- an hini all o vezañ, petra bennak ma reont
neur a dra kenkoulz pe marteze gwelloc'h
eged ne vern piv ac'hanomp, na c'hellfent
ket evelkent tremen hep c'hwitañ war draoù
all; ma tizolofed diwar-se na labourfent ket
dre c'houiziadurezh, hogen dre berzh stignad-
urezh nemeti o benvegadoù; rak, tra ma'z eo
ar poell ur benveg hollvezel, graet evit talv-
ezout e kement degouezh a zo, seurt benvegadoù,
int, a rank kaout ur stignadurezh arbennik di-
ouzh kement labour unvezel a reont; ac'hano an

dic'hallusted veizel da gavout organoù di-seurtel a-walc'h e korf un ardivink bennak, dezhañ da vezañ lusket ganto, e pep degouezh eus ar vuhez, dres en hevelep doare ha ma vez an nen gant e boellerezh.

Hogen dre an daou stek-mañ end-eeun ez eus tu c'hoazh d'anavezout ar c'hemm a zo etre an dud hag al loened. Rak, heverkañ pezh a zo, n'eus den, pegen beulke ha pegen amboubal bennak e ve, hep disoñjal an diskianted, a gement na vefe ket barrek da gempenn komzoù liesseurt ha d'aozañ ganto ur prezeg bennak evit reiñ e vennozioù da gompren. En enep-kaer, avat, n'eus loen ebet, pegen disi ha pegen ganet-mat bennak e ve, hag a vefe gouest d'ober heñveldra. Pezh na c'hoarvez ket diouzh ma ra diouer organoù dezho, pa'z eo anat e c'hall ar piged hag ar perokeded distilhañ gerioù kenkoulz ha ni, evito da chom hep gallout komz evelomp, sev o tiskouez e soñjont er pezh a lavaront. E-lec'h-se, an dud a vez ganet mut ha bouzar, hag o tiouerif diwar-henn an organoù a dalvez d'ar re all da gomz kement pe vuoc'h eget al loened, int avat, a vez boas d'ijinañ un nebeut arcouezioù dre o fenn o-unan, evit reiñ dre seurt hent o mennozioù da vezañ d'ar re a vez ganto o vevañ, dezho da c'hellout deskiñ o yezh. Pezh a ziskouez, evit kel al loened,

neket e ve berroc'h hepken o foellerezh eget hini an dud, hogen n'o deus tamm hini ebet. Rak anat eo na ranker ket kacout nemeur evit bezañ gouest da gomz. Ha pa weler pebezh digevatalded a vez etre al loened kennoezhañ koulz hag etre an dud ha pezoas e vez lod aezetoc'h eget lod all da zeskiñ, n'eur ket evit krediñ na vefe ket kevatalded, e seurt keñver, etre bavidikañ bugel a vefe, pe da vihanañ ur bugel a vefe brizhempennet, hag ur marmouz pe ur peroked, ar gwellañ hini a c'hellfed da gavout en o noezhañ, mar ne vefe ket o ene disheñvel-krenn e anien diouzh hon hini. Hag arabat kammgerout evit luskoù-ene, a dalv da verkañ youladurezh⁽⁸⁸⁾, ar c'homzoù a c'hell an ardivinkoù drevesañ koulz hag al loened, na kennebeut krediñ, evel ma ra lod Henaurion, bout al loened o komz, daoust ma ne vefe ket intentet o yezh ganimp, rak, mar befe gwir, e c'hallfemp ni o c'hompren ivez, kenkoulz ha ma ra o c'henbared, p'o deus ur bern organoù o tennañ da re an nen. Ha ken heverk-all eo ivez gwelout meur a loen, daoust ma tiskouezont kacout brasoc'h ijinusted egedomp e-sigur darn eus ar gweredoù a sevenont, o tiskouez evelkent n'o deus an disterañ tamm evit kel ur bern reoù all. E doare ma n'emañ ket ar pezh a reont gwelloc'h egedomp oc'h anataat o

deus meiz, - rak, o vont dre eno, o defe muioc'h eget ne vern piv ac'hanomp hag o bout neuze oc'h ober pep tra gwelloc'h eget na reomp-ni, - kentoc'h avat n'o deus tamm ebet hag o bout lusket gant an Natur diouzh ma vez stignet o benvegadoù, giz un horolaj n'eus anezhañ nemet rodoù ha gwinterelloù, hag a zo barrek da jediñ an euriou ha da ventiñ an amzer resisoc'h egedomp, pegen evezhiek bennak e vemp.

Diwar-henn e tresskrivis an ene poellek, o reiñ da welout penaos n'hall ket eñ bezañ tennet e nep doare diouzh galloud an danvez, evel an traoù all a sonis diwar o fenn; nemet e rank-eñ bezañ krouet aratozh; penaos ivez n'eo ket a-walc'h dezhañ kêriñ e korf mab-den evel ma ra ul loman en e lestr, nemet hag evit keflloc'hañ an izili anezhañ e ve marteze, hogen penaos e rank-eñ kediañ ha bezañ strishoc'h-unanet gantañ kent kacout, ouzhpenn-se, merzadoù ha youladurezh par da re hon eus-ni hag amparañ⁽⁸⁹⁾ evel-se un den gwirion. Evit ac'hano, pouezet em eus amañ un tammig muioc'h war graf an ene, o vezañ m' emañ e-touez ar re dalvoudusañ. Rak, war-lerc'h nac'hidigezh Doue, ur fazi hag a soñj din bezañ diz-arbennet madik a-walc'h uheloc'h, n'eus hini a gement a bellafe muioc'h ar speredoù gwan diouzh ar vertuz

evel krediñ e vefe ene al loened kenanien gant hon hini, ken n'hor befa dre-se na brasoc'h aon, na brasoc'h goanag da gacout, goude ar vuhez-mañ, eget n'o deus ar c'helion pe ar merion. E-lec'h pa ouezer pebezh kemm a vez etrezo, e veizer kalz gwelloc'h ar peragoù oc'h anataat e vez hini an nen disujere-krenn, dre anien, diouzh e gorf ha, da heul, na vez tamm sujet da vervel war un dro gantañ. Ha pa ne gaver devouderioù all ebet ouzh e zistrujañ, e vezer douget dre natur da zezvarn diwar-henn e vez divarvel.

C' H W E C' H V E T L O D E N N

Hogen tri bloaz zo bremañ, ha me peurskrivet ganin va fleustrad war an holl bezhioù-hont, ha krog zoken d'e adwelout evit e lakaat etre daouarn ar mouler, sed e klevis diwar-benn tud a vezan o parc'hañ⁽⁹⁰⁾, - pa'z eus ganto war va greadoù ur galloud ken bras ha ma'z eo hini va foellerezh war va fredennoù, - edont o pacuez dic'hrataat⁽⁹¹⁾ ur grafenn Fizik bet embannet ur pennadig oa gant unan bennak na fell ket din lavarout e ven diouzh e du,

met, evelkent, na verzis gantañ, kent an dic'hrat-
adur, siseurt ebet a c'helljen soñjal bout nozus
nag ouzh krevez nag ouzh Stad, na graet diwar-henn
da virout ouzhañ a skrivañ war e sigur, mar bije
me a vije bet kendrec'het d'henn ober gant ar poell.
Ma savas nec'h emnon gant se, kas gouzout hag eñ
na oa ket ivez e-mesk va mennoziou, unanik bennak
a vijen deuet da faziañ warnañ, daoust d'an aked
bras a lakaen bepred da chom hep degemer em c'hredenn
nep hini nevez na vije bet peurwir ganin en araok,
na skrivañ hini ebet gouest d'ober gaou ouzh piv
bennak a ve. Pezh a voe trawalc'h din evit va rediañ
da dreññ diwar an disentez am boa graet d'embann
anezho; rak, petra bennak ma oa kreñv-meurbet an
abegoù bet o vroudañ diagent hevelep disentez ganin,
evelkent e kavis war an taol trawalc'h a reoù all
da'm digareziñ evitañ, gant an techet ma'z on bet
ataz da gasaat micher ar saverezh-levrioù. Ha ken
pouezus eo seurt abegoù e pep keñver, ma vo mat
tamm pe damm, neket din-me hepken son amañ diwar o
fenn, met marteze ivez d'ar c'hevredig gouzout an
doare anezho.

Biskoazh n'em eus graet stad kaer eus ar pezh
a darzhe war va spered; ha keit ha ma n'on bet o
kutuilh diwar an Hentenn arveret ganin frouezh all

ebet nemet ar walc'honi am eus tennet eus un toull-
ad krefen o sellout ouzh ar skiantoù-imbroudiñ, pe
nemet ar boan am eus lakaet o kiañ da reizhañ va
boazioù ouzh an arguzennoù a zesken ganti, n'em
eus tamm ebet dezevet e oa dleet din skrivañ war
he divout. Rak, evit pezh a sell ouzh ar boazioù,
ken feuls e fonn pep den en e gredenn dezhañ, ma
c'hellfed kavout ken lies penn, ken lies adreizh-
our, lakaet e vefe hiniennoù o kaout actre da gemmañ
tra pe dra eno, estreget ar re a zo bet savelet gant
Doue da vistri war e bobloù pe roet dezho gantañ
gras ha gred a-walc'h da vezañ diouganerion. Ha pe-
gement bennak ma plije va imbrouadennoù din kalz,
padal e kreden e teue ur re bennak ivez gant ar re
all hag e plijent dezho muioc'h c'hoazh marteze.

Hogen, kentizh ha paket ganin un toullad bras-
kealioù o tennañ d'ar Fizik, ha goude din, endra
grog endeo d'o skoueriñ ouzh lies a graf dibar,
dont da verzout betek pelec'h e vezont gouest d'hon
deren hag ivez pegement e tishañvalont diouzh ar
pennsturioù bet embregot betek-henn, e vezis na
c'hellen ken dero'hel anezho kuzhet, anez din gwall-
bec'hiñ ouzh al Lezenn a ra dimp un dlead bastañ
par ma c'hellomp he mad kevredin⁽⁹²⁾ d'an denelezh.
Rak, gwelout a raen, bennozh dezho, e c'halled

prenañ gouiziedurioù spletus-kenañ evit ar vuhez hag e oa tu da gavout, e-lec'h ar brederouriezh-imbroudiñ, seurt gant an hini a vez kelennet er skolioù, unan arall hag a vije pleustrek, sev e c'halljed dont ganti d'anavezout, ken rez ha ma reomp bremañ micherioù liesseurt hon artizaned, nerzh ha labour an tan, reoù an dour, an aer, ar sterennoù, an oabloù ha kement korf all a zo war hon tro, dimp, en hevelep doare, d'o lakaat da dalvezout evit kement arver e vezont azas outañ, hag, er stad-se, da zont da vout evel pa lavarfed mistri war an Natur ha perc'henn dezhi : ur pezh eta da c'hoantaat, neket hepken evit kel kalvezadoù diniver graet diouzh hol lakaat da gorvoiñ hep poan ebet frouezh an Douar hag an holl aezonioù a zo da gavout warnañ, met dreist-holl ivez evit kel mirout ar yec'hed, anezhañ ar mad kentañ, hep ket a var, ha bon holl vadoù all ar vuhez mañ; rak, ken start ez eo sujereet zoken ar spered ouzh ar c'horf, ouzh an demzadurezh anezhañ, hag ouzh stignadurezh e venvegadoù, ken, mar eo gwir e c'haller dont da c'houzout ar stek da furaat hag akuitaat an dud dre vras muioc'h eget nan eus bet graet betek-henn, e kav din ez eo neuze gant hent ar Vezekniezh eo e ranker monet.

Gwir eo, an hini ma reer ganti bremañ, ne gaver

91

ket enni kalz tra gwell heverk ar splet anezhañ; hogen, hep na ve ganin an disterañ ratozh d'he disprizout, e tiogelan koulskoude nan eus den, zoken e-mesk ar re a bleustr warni, a gement n' anzavfe ket na ouzer hogos netra diganti, e-skoaz ar pezh a chom c'hoazh da c'houzout; hag ouzhpenn, e c'hallfed bezañ disamm et eus kleñvedoù diniver o ren, ken war ar c'horf, ken war ar spered, koulz marteze hag eus ar gwanadur stag ouzh ar gozhni, mar befe-ni hor befe gouiziadurezh a-walc'h eus an devoùderioù anezho hag eus al louzoù diouto bet bastet dimp gant an Natur. Feogwir, avat, e vagen an dezo da lakaat va buhez a-bezh da gerc'hat ur Skiant ken ezhomet, hag o vezañ m'on degouezhet war un hent graet, evit doare, diouzh he dinoññ dic'hwit-kaer, war-bouez mont d'e heul, ha gant na vefe warnañ skoilh ebet o tont pe diouzh berrbad-elezh ar vuhez pe diouzh diouer an arnodadennoù, e kave din na oa ouzh an daou skoilh-mañ parradur ebet gwelloc'h eget reiñ titour bervezh d'ar c'hevredig eus an disterañ pezh a vije dinoet ganin ha pediñ ar speredoù akuit d'ober diouzh mont larkoc'h atav, dre genlabourat, pep hini hervez e bleg hag e c'halloud, war an arnodadennoù a vije da seveniñ hag ivez da gehentañ gant ar c'hevredig, e-skeud kement pezh

a zeskjant-int, evit ober diouzh ma krogje ar re zivezhañ lec'h m'o dije disoc'het ar re gentañ, hag evel-se, war-bouez kediañ buhezvezhiadoù ha trevelladoù niver a dud, bale holl en ur gevret kalz pelloc'h eget na c'hellje ober pep hini en e unanik.

Merzout a raen zoken, evit kel an armodadennoù, e teuont da vezañ seul retoc'h ma vez arroutetoc'h an unan. Rak, en derou, e vez gwell arverañ hepken ar re ma vez skoet meiz an unan ganto war an taol, - pa n'eus ket tu d'o dianavezout gant degas warno un tamm imbroud bennak - e-lec'h mont da gerc'hat reoù rouesoc'h ha studiusoc'h, peogwir e vez touell alies ar seurt ganto keit ha ma n'anavezzer ket devoaderioù ar re voutinañ anezho, ha peogwir, hogos bep tro, e vez ken divoutin ha ken munut an darventezioù e tibennont diouto, ma vez diaes-meurbet arvestiñ outo. Hogen, setu da heul an urzh am eus dalc'het dezhi amañ :

Da gentañ em eus klasket kavout dre vras ar pennaennoù pe benndevedoù da gement a vez pe a zo barrek da vezout dre ar bed, hep sellout evit se tra ken nemet ouzh DOUE, nep zo krouer anezhañ, na kennebeut hep tennañ ar seurt pezhioù diouzh lec'h all nemet diouzh had-gwirderioù 'zo a gaver dre

natur en hon eneoù.

Er goudevezh em eus klasket gouzout pere oa an devoadadoù kentañ ha boutinañ a c'helled tennañ diouzh ar seurt penndevoaderioù, ma kav din em eus dre eno dizoloet : oabloù, sterenoù, un tir ha zoken dour war an tir, aer, tan, kailh hag un nebeut traoù all heñvel, anezho ar reoù sesañ d'anaout, dre ma'z int ar re voutinañ hag eeunañ-holl.

Pa fellas din c'honvat diskenn, pelloc'h, betek ar reoù divoutinoc'h, e paras dirazon kement a reoù liesdoare, ma ne welen ket penaos e c'hallje spered mab-den diforc'hañ ar furmoù pe spesoù korfoù a zo war an douar diouzh an diniverad a reoù all, barrek da vezout warnañ ivez, mar bije Doue a venje o lakaat eno, na dre-se penaos e vije tu d'amplediñ diouto kennebeut, anez mont gant an devoadadoù da benn-hent d'an devoaderioù hag ober kalz armodadennoù dibar. Ma kredan diwar-se lavarout, en ur adtremen dre va spered kement tra paret biskoazh dirak va skiantoù, na'm eus nepred merzet enno an disterañ pezh na c'helljen displegañ sezet a-walc'h dre berzh ar pennaennoù bet dinodet ganin.

Padal, henn anzav a rankan ivez, ken bras ha ken ec'hon eo galloud an Natur ha ken eeun hag holl-

vezel seurt pennaennoù ma ne spurmantan mui, tost da vat, nep devoudad unvezel, anez din gouzout en arack ha bez'e c'hall hemañ bezañ dezreet diouto e stummoù niverus; ha n'eus evidon, diaester ebet brasoc'h eget klask kavout e peseurt stumm e vez-eñ o tibennañ diouto. Rak, evit'se, ne welan itrik all, nemet imbourc'hiñ adarre lod arnodadennoù, hag int diouzh ma ne vefe ket o disoc'h, mar dle hemañ bezañ displeget en ur stumm, heñveldra ha mar dle bezañ en ur stumm arall. Evit ac'hano, deuet on bremañ hag e welan madik a-walc'h, a gav din, penaos e ranker en em gemer evit akuitañ gant an darn vuiañ eus ar reoù graet da dalvezout e seurt keñver;nemet e welan ivez, diouzh o doare ha diouzh o niver ken bras, na spirfe biken, evit o seveniñ holl gwitib-unan, na va daouarn, na va leve, ha goude din kaout mil gwech c'hoazh muioc'h eget ar pezh am eus; kement ha ken bihan ma vezo hiviziken pe vras pe verr ment an arackaat a rin war anaoudegezh an Natur, hervez ma vo tu din ivez d'ober pe galz pe nebeut anezho. Ha setu dres ar pezh a vennaden reiñ d'anaout, gant ar pleustred am boa skrivet, o tiskouez ennañ d'ar c'hevredig ar gonid a c'hellje-eñ tennañ dioutañ, ha se gant kement a sklaerder, ma vije nep piv bennak a fell dezhañ peurliesañ mad an dud -

95

sev, kement den a vez vertuzius evit gwir, ha neket dre bilpouserezh na gant e benn hepken, - evel rediet neuze, koulz da'm zitouriñ diwar-benn ar reoù en dije sevenet endeo, koulz da'm skoazellañ war imbourc'h ar reoù a chomje c'hoazh d'ober.

Abaoe, avat, em eus bet abegoù all d'ober din kemmañ va meno ha dont da veizañ e tleen, evit gwir, kenderc'hel da skrivañ diwar-benn kement pezh a gavjen dezhañ un dalvoudegezh bennak, bep ma tizolojen ar warded anezhañ, en ur lakaat kenkoulz pred-eri d'henn ober ha ma vijen e-sell d'henn embann, din da gaout evel-se brasoc'h goar d'henn imbourc'hiñ ervat, dres en hevelep doare ha ma seller atav ouzh ar pezh a greder e vo gwelet gant an engroez pishoc'h eget na reer ouzh ar pezh a severer evit an unan hepken, - alies avat pezhioù hag a gave din bezañ gwir, pa grogen d'o meizañ, a seblante din bezañ diwir pa glasken o lakaat war ar paper, - ha din evel-se ivez da chom hep koll an disterañ digarez da spletiñ d'ar c'hevredig, mar galljen, hag ouzhpenn, lakaet e talvje va skridoù un dra bennak, d'ober diouzh ma c'hellje goude va marv an neb a vijent gantañ en e gerz amplediñ diouto evit ar pep gwellañ, hep tamm asantiñ e vijent embannet avat, ha me bev, rag aon na c'hoarvezje d'an eneberezh ha d'ar rendael a

savje marteze diwarno pe zoken d'ar vrud nemeti a c'helljen-me gonit ganto reiñ tro din, un disterañ, da goll un amzer a felle din gouestlañ da'm deskad-urezh.

Rak, petra bennak ma'z eo gwir e tle pep den bastañ, par ma c'hell, mad e nesañ, ha daoust ma'z eo bezañ ken didalvez ha tra chom hep spletifi da nikun, ken gwir all eo ivez e tle hon damant mont pelloc'h eget an amzer vremañ, hag e vez mat dilezel an traoù a dalvezfe marteze tamm pe damm d'an dud vev pa vez keal gant an unan ober traoù all a ve spletusoc'h d'e c'hournized. Hag e seurt keñver e fell din e ve gouezet nan eo an nebeud am eus desket hogos netra e-skoaz ar pezh na ouzon ket hag am eus spi da c'hellout deskiñ; rak an hevelep tra eo, tost da vat, evit an dud a vez o tinciñ tamm-ha-tamm ar wirionez dre ar Skiantoù hag evit ar reoù a vez krog da binvidikaat, ganto nebeutoc'h a boan bremañ d' ober prenadennou bras eget n'o devoa diagent oc'h ober reoù kalz bihanoc'h pa cant paouroc'h. Pe c'hoazh e c'heller o c'heñveriañ ouzh pennvrezelourion e vez peurvuiañ kresk o nerzh diwar-bouez o zrec'hioù; ken e rankont, evit dere'hel o c'hrog, goude koll un emgann bennak, kaout muioc'h a vestroni eget n'o devez ezhomm evit aloubiñ kêrioù ha rannvroioù.

Ha moarvat strivañ da drec'hiñ war gement diaester ha fazi o virout ouzhimp a dizhout anaoudegezh ar wirionez a zo, razas, embreger emgannoù, koulz ha ma'z eo koll unan degemerout ur mennoz diwir diwar-benn ur c'hraf bennak tamm pe damm hollek ha talvoudus, rak, evit distreiñ da c'houde d'an hevelep stad ha diagent, e ranker kaout kalz muioc'h ampartiz eget na vez ezhomm evit araokaat fonnus, ha gant an nen endeo en e zalc'h pennaennoù diogel. Evit va c'helou, mar em eus kavet amañ-diarok un nebeut gwirionezennoù dre ar Skiantoù, - ha spi am eus e tiskouezo ar pezhioù endalc'het gant al levrenn-mañ, em eus kavet hiniennou, - e c'hellan disklêriañ nan int nemet deheuliadoù ha diveradoù diouzh pemp pe c'hwec'h penngraf am eus trec'het warno hag a sellan evel ken lies a stourmad m'he deus troet ar voull ganin. Ma kredan zoken lavarout e vo trawalc'h, a gav din, gonit ken daou pe dri all evel-se, din d'akuitañ glez gant va mennadoù; hag, ouzhpenn, nan on ket c'hoazh aet ken kabac'h-se, ken, o vont diouzh red boas an Natur, na'm bije mui an tu da gavout goarvezh a-walc'h war seurt kefridi. Nemet e soñjan bezañ seul endalc'hetoc'h d'espern an amzer a chom ganin ma'z eo brasoc'h va goanag d'hec'h implijout ervat, ha me moarvat o kaout ken bras abegadurezh

d'he c'holl, mar embannfen diazezoù va Fizik. Rak, petra bennak ma'z int hogos holl ken anat, ken e vez a-walc'h klevout diwar o fenn evit krediñ enno, ha daoust ma n'eus hini anezho na vijen-me gouest, a gav din, da boellanataat, neozh, o vezañ ma ne c'hellont ket klotañ ouzh holl vennozioù liesdoare an dud arall, e welan e tegouezhfe din alies bezañ trubuilhet en askont d'an eneberezh a savfe diwarno.

Tu zo avat da lavarout e vefe emsavus ur seurt eneberezh, koulz evit ober din anaout va fazioù, koulz, o lakeat e vefe mat pezh pe bezh ganin, evit m'o defe ar re all brasoc'h meizidigezh anezhañ diwar-se, hag ivez, gant kregiñ adalek bremañ da dennañ ampled dioutañ, evit ma tegasfent din o skoazell dre berzh o c'havadennoù, peogwir e c'hall lieshini gwelout pelloc'h eget un den nemetken. Hag henn anzav a ran, petra bennak ma'z on-me techet-bras da fellel ha disfizicout hogos bep taol diouzh ar meizennoù kentañ a vez o tont ganin, padal ar skiant am eus prenet, diwar-bouez an arguzennoù a c'heller sevel ouzhin, a vir na c'hoanagfen tennañ diouto an disterañ gonid; rak alies endeo ez eo c'hoarvezet ganin reuziñ ouzh barnadennoù deuet gant tud hag a sellen evel mignoned din pe gant hiniennoù a soñjen bout diseblant em c'heñver pe zoken gant darn all

99

na oan ket me hep gouzout e rajent diouzh brudañ, dre o gourvenn hag o gwarizi, pezh a virje va c'hen-eiled dindan c'holo, dre garadegzh evidon.

N'eo ket degouezhet din alies, avat, e vije bet gindalet ouzhin pezh pe bezh na vije ket rak-verzet ganin muioc'h pe vihanoc'h, nemet ha pell-bras e vije diouzh va c'hraf; kement ha ken bihan ma n'em eus kavet biskoazh war va hent nep gourmat-aer⁽⁹³⁾ war va mennozioù a gement n'en dije seblantet din bezañ pe dic'harc'hoc'h pe direishoc'h egedon-me va-unan. Na gwech ebet n'em eus taolet pled kennebeut all, diwar-bouez ar breutadegoù a vez pleustret warno gant ar Skolioù, e vije bet dinoet ur wirionezenn bennak hag a vije manet dianav betek neuze; rak, endra ma striv pep hini da sammañ gantañ ar maout, e labour an nen evel-se kalz muioc'h evit lakeat gwir-heñvelled war wel eget evit pouezañ an arguzennoù diouzh an eil tu ha diouzh egile; ha tud 'zo, petra bennak ma vezont bet keit-all gwell vreutaerion, ne vezont ket evit se gwelloc'h barnerion da c'houde.

A-hend-all, e-keñver ar gonid o tont d'an hentez, war-bouez kaout titour eus va mennozioù, bras-tre ne vefe ket eñ kennebeut; seul vui ma n'on ket aet c'hoazh keit-all ganto ma ne rankfen mui stagañ outo nemeur

diouzh o lakaat da dalvezout. Mar befe unan bennak, avat, hag a vefe barrek d'henn ober, e kav din e c'hellan-me lavarout, kuit a fougeal, ez eo me kentoc'h eget un all an hini a vefe. Neket abalamour ma n'eus ket tu da gavout dre ar bed speredoù all niverus hag a vefe pellespar dreist da'm hini, hogen dre an abeg ma n'oufec'h reizata ur pezh bennak nag ober gantañ ho tra, pa vez un den all ouzh e zeskiañ deoc'h, kenkoulz ha ma rit pa vezit dre ho penn hoc'h-unan ouzh e zizoleiañ war-eeun. Ha se zo ken gwir, e seurt keñver, ken, ha goude din bezañ bet alies o tisplegañ lod eus va mennoziou dirak tud speredek-dreist, hag int stummet, war a grede din, d'o reizata reizh-kenañ tra ma komzen outo, daoust da se, pa'z int aet d'o restañ⁽⁹⁴⁾ war va lerc'h, em eus merzet o doa kemmet anezho bep taol koulz lavaret, e doare ma ne c'hallen me mui o anzav evit bezañ va re din.

Mar kemeran tro vat eta diwar-henn d'aspediañ amañ hon nized da chom hep morse krediañ, evel o tont eus va ferzh, ar pezh a vo lavaret dirazo, anez din bout bet en diambrezet va-unan. Ha souezh-iañ tamm ne ran gant ar rambreoù a vez lakaet e kiriegezh an henbrederounion, pa n'eus skrid ebet anezho ganimp, na dezvam kennebeut e ve diboell-

mik o frederennoù evit se, - peogwir e oant en o gre war ar renk gant ar speredoù kaerañ, - nemet ez eo bet restet-fall dimp diwar o fenn ha setu. Evel ma weler ivez nan eo c'hoarvezet biskoazh pe dost, e vije bet o diskibled trec'h dezho; ha di-arvar eo din e vefe laouen d'o soñj ar re daerañ bremañ da heul Aristoteles, mar befe int o defe ken bras gouiziadur eus an Natur ha m'en deus bet eñ, zoken gant lakaat n'o defe biken muioc'h ken. Hañval int ouzh an iliev a denn da sevel uheloc'h eget ar gwez m'ec-eñ harpet outo, hag a vez, alies zoken, o tont war draoñ, goude tapet gantañ ar beg anezho. Rak, war a seblant din ivez, o vont war draoñ eo e vez kentoc'h ar seurt ganto, henn eo e vezont, en ur stumm o tiouzi-lekaat muioc'h eget na rafent war-bouez chom distudi, peogwir hep bezañ boleun zoken o c'houzout kement pezh a vez displeget dezho heveiz gant o skridaozour, e vennont c'hoazh kaout digant hemañ an diskoulm da grefen niverus, daoust ma tav-eñ warno ha ma n'en deus biskoazh soñjet enno marteze. Evit ar speredoù dister, avat, e vez emsavus-meurbet doare-prederouriañ ar seurt tud, rak, en abeg da deñvalded an diforc'hataerezh hag an itrikoù arveret ganto, e c'hellont komz diwar-benn pep pezh, ken divergont ha m'o gouezfent

e gwirionez, hag ivez difenn enep d'ar re widilusañ
hag ampartañ, kement pezh emaint o lavarout, hep
na ve tu ebet da c'honit warno. Ma'z int hañval
dre se ouzh un den dall, c'hoant dezhañ da riotal
hep bezañ koll gant unan bennak o welout sklaer
hag a rafe da hemañ diskenn e strad ur c'hav teñval-
sac'h; ha lavarout a c'hellan ez eo mat evito mar
choman-me hep embann pennaennoù ar Brederouriezh
arveret ganin, rak, seun-tre hag anat-kaer evel ma'
z int, e rafen-me, war-bouez o diambrez, koulz ha
ma tigorfen un toullad prenestroù da lakaat an deiz
da gargañ ar c'hav-se ma'z int diskennet ennañ da
riotal. Hogen, zoken gant ar gwellañ speredoù ne
c'hoarvez ket e karfent dont d'anaout anezho, rak,
mar fell dezho komz diwar-benn pep pezh ha gonit ar
vrud da vezañ gouziek, e tizhint o fal, o tremen
gant ar wirheñvelled nemeti a c'heller kevout, hep
kalc a boan e pep seurt krefen, aezetoc'h eget o
turmudañ war-lerc'h ar wirionez, peogwir ne vez-hi
dizoloet nemet kammed-ha-kammed e-ser un darnig
anezho hepken, ha peogwir ivez, pa vez anv da gomz
diwar-benn ar pep all, e ra-hi un dlead da vab-den
anzav leal na car-eñ netra war e sigur.

Gant-se, mar rakdibabont⁽⁹⁵⁾ anaoudegezh un
nebeut gwirionezennoù war an asvan da c'houzout

pep pezh, - evel ma'z eo kalz gwelloc'h dezho ober
hep mar ebet; - ha mar o deus c'hoant da seveniñ
ur mennad par da'm hini, neuze n'o deus ket ezhomm
evit se da glevout diganin muioc'h eget ar pezh am
eus lavaret gant an displeg-mañ. Rak, mar int barrek
da vont pelloc'h egedon, e vint muioc'h a se c'hoazh
da gavout, dre o fenn o-unan, kement a gredan-me
bezañ dizoloet. Seul-vui ma n'em eus biskoazh imb-
roudet seurt ebet, nemet ha dre urzh e vije; ma'z
eo diarvar din, diwar-henn, ez eo startoc'h ha kuzh-
etoc'h dre natur ar pezh a van c'hoazh ganin da gav-
out eget ar pezh am eus gallet kejañ gantañ betek-
henn; ha gwall nebeutoc'h a blijadur o defe-int,
emichañs, diwar-bouez bezañ skoliet ganin, eget
war-bouez deskiñ dre o fenn o-unan. Ouzhpenn ma
talvo dezho, muioc'h eget na oufe ober kement kentel
diganin, ar gourdonadur a brenint gant imboure'hiñ
da gentañ pezhioù aezet, evit kerc'hat tamm-ha-tamm,
dre bazennata, reoù arell diaesoc'h. Hag evit a sell
ouzhin, n'eus ket da dermal : mar bije-me a vije
bet kelennet, adalek va yacuankiz, - hep din kaout
an disterañ poan d'o deskiñ, - war an holl wirion-
ezennoù am eus klasket poellanataat abaoe, biskoazh
marteze ne vijen deuet d'anaout hini all ebet, pe,
da vihanañ, biskoazh n'em bije tapet nag ar pleg

nag an aezamant a soñj ganin kaout bremañ da gavout
bepred reoù nevez, hervez ar preder a lakaan d'o
c'hask. En ur ger, mar ez eus dre ar bed un oberenn
bennak na c'hellfe bezañ kenkoulz sevenet gant nikun
keneve an den end-eeun a begas enni da gentañ, an
hini a zo bremañ ganin war ar stern an hini eo.

Gwir eo, e-keñver an arnodadurioù gouest da
vezañ lakaet ganti da dalvezout, ne spirfe ket un
den hepken evit o seveniñ holl gwitibunan; ha n'hell-
fe ket hemañ kennebeut-all dereadekaat outo daouarn
all ebet estreget e reoù-eñ, nemet ha reoù arzvicher-
ion e vent pe re hiniemoù a c'hellfe-eñ goprañ,
hag a rafe dres kement a vefe gourc'hemennet dezho
ober, broudet ma vefent gant ar c'hoant-gonit, un
itrik berzhus-tre hemañ. Rak, evit kel an emouestl-
erion a ginnigfe marteze degas o skoazell dezhañ dre
gonoc'herezh pe c'hoant-deskiñ, estreget ma vez bras-
oc'h o gouestladennoù peurliesañ eget o zoradoù ha
ganto tra ken da ziskouez nemet mennadoù kaer na dro
nepred hini anezho da vat, emichañs e klaskfent ken
difazi ha tra bezañ gopret gentañ diwar-bouez un
displegadenn bennak o tennañ da graf pe graf pe da
vihanañ diwar-bouez meuleudi ha ragacherezh goulllo,
ma kollfe-eñ c'hoazh an nebeut amzer a lezfe ganto.
Hag evit a sell ouzh an arnodadurioù sevenet endeo

gant reoù all, pegement bennak ma c'hoantafent-int
reiñ titour dezhañ diwar o fenn, - pezh na rafe
biken, avat, neb a vez oc'h ober rinoù anezho, -
ken fonnus e kaver enno darventezioù hag elfennoù
dreistezhomm, ma vefe diaes-meurbet evitañ diluziañ
ar wirionez dicuto. Ouzhpenn ma seblantfent holl
dezhañ bout ken displeget-fall pe ken diwir zoken,
- dre m'o defe klasket ar sevenerion anezho disk-
ouez e klotfent ouzh o fennsturioù, - ken, o lakaat
e vefe tu evelkent da gorvoiñ lod anezho, c'hoazh
ne c'hallfent ket talvout priz an amzer a rankfe-
eñ gouestlañ evit ober un dibab en o mesk. Kement
ha ken bihan, ken, mar befe war an douar un den
hag a vefe anavezet diarguz-kaer evel barrek da
gavadenniñ an traoù a c'hellfe bout ar brasañ hag
an talvoudusañ d'ar c'hevredig, - hag an dud arall
o strivañ en abeg da se d'e skoazellañ e kement
stumm a ve, dezhañ d'akuitañ gant e vennadoù, -
c'hoazh ne welan ket e c'hallfent ober evitañ
seurt-all nemet kemer perzh en dispignoù graet evit
an arnodademoù a rankfe-eñ seveniñ, ha, forzh
penaos, mirout na vefe hegaserezh gour o lemel di-
gentañ pep goarvezh. Hogen, estreget ma ne fougasan
ket ganin va-unan betek mont d'azav⁽⁹⁶⁾ pezh pe
bezh hag a ve dreistespar, na magañ kennebeut mennoziou

ken diaviz ha mont da huffvreal e vefe dleet d'ar c'hevredig bezañ dudiet-bras gant va mennadoù, padal n'on ket degouezhet hag e ve ganin em c'hreiz ur galon ken izel ha mont da gochennat digant den, piv bennak a ve, an disterañ menoued⁽⁹⁷⁾ a c'hallfed soñjal na ven ket me dellezek anezhañ.

Seurt evezhiadurioù holl berniet an eil war an all a reas din, tri bloaz a zo, chom hep diambrez ar pleustrad oa ganin etre va daouarn ha kemer war-non zoken tremen hep diskouez, va buhez-pad, hini all ebet a vije ken klok-all na gouest d'ober e teujed gantañ da veizañ diazezoù va Fizik. Abaoe, avat, ez eus bet c'hoazh DAOU ABEG ALL ouzh va rediañ da lakaat amañ da heul un nebeut arnodskridoù dibar, ha da reiñ doare d'ar c'hevredig eus va labour ha va dezoioù :

AN HINI KENTAÑ o vout e welfed, mar c'hwitfen d'henn ober, meur a dud, - dre ma ouezfent ervat e vijen bet e-sell ergentaou da lakaat moulañ un nebeut skridoù, - hag o defe tro da grediñ e vefe muioe'h em gaou eget nan int e gwirionez an digarezioù am broudfre bremañ d'en em virout. Rak, ha goude ma ne well-blij ket din dastum klod betek re, pe zoken, ha goude din, pe lavarin mat, kaout kas en e geñver,

107

e kement ha m'en barman evel un enebour d'ar siouloni⁽⁹⁸⁾ a barc'han dreist pep tra, padal, biakoazh n'em eus klasket kuzhat va greadoù evel pa vijent torfedoù, na kennebeut ober kalz diarbennoù da vevañ dianav, ken dre an abeg ma'm bije kredet ober gaou ouzhin va-unan, ken en askont ma vijen bet strafuilhet tamm pe damm, pezh a vije bet c'hoazh mont enep d'ar siouloni difestur a vezan o klask. Ha dre m'on manet atav diseblant ouzh ar preder da vout anavezet pe da chom dianav, hep gallout herzel navitse na ve deuet din ur vrud bennak, em eus soñjet e tleen ober diouzh va gwellañ evit mirout da vihanañ na ve unan fall.

AN ABEG ALL m'on bet endalc'het gantañ da sevel ar seurt skridoù zo din gwelout an dale brasoc'h-bras emañ bemdez va dezo da zesketaat o c'houzañv, en askont d'an arnodadennoù diniver am eus ezhomm d'ober, hep din gallout o seveniñ anez bout goredet gant an nesañ; hag evidon da dremen hep brabañsal betek mont da grediñ e tamantfe kalz ar c'hevredig da'm lazou⁽⁹⁹⁾, padal n'houlan ket desfailhañ kennebeut betek reiñ tro da'm warlerc'hidi da damall din un deiz em bije gallet lezel ganto kalz a bezhioù forzh gwelloc'h c'hoazh, mar bije-me a vije bet o terc'hel startoc'h warno d'o lakaat da veizout

penaos e oant-i gouest da bledañ gant va mennadoù.

Ken em eus dezevet e c'hallen bepred dibab un nebeut krefen hag int - hep reiñ troad betek re d'ar breutaerezh na va rediañ kennebeut da resisaat va fennsturioù muoc'h eget na fell din ober, - o pouezañ koulskoude da ziskouez splann-awalc'h pezh a c'hellan pe na c'hellan ket seveniñ war dachenn ar Skiantoù. Ur pal hennezh, c'honvat, na oufen ket lavarout ha tizhet eo bet ganin pe n'eo ket. Nemet n'houlan ket mont da benn-hent da varnadennoù nikun dre gomz va-unan diwar-benn va skridoù; mat-kenañ e ve din avat, mar befent imbroudet; hag evit ma vo seul vuoc'h a du d'henn ober, e pedan start kement hini en devo un arguzenn bennak d'eneb-ifi outo da gemer ar boan d'he c'has da'm levrier, ma vin-me kelet⁽¹⁰⁰⁾ gantañ, din d'ober neuze diouzh stagañ va respont outi war an hevelep tro, e doare ma vo tu d'al lennerion da varn seul aesoc'h a se ar wirionez, diwar-bouez gwelout an eil e-skoaz egile. Rak n'azavan ket ober atebou hir war o sigur; kentoc'h anzavout va fazioù gant lealded ha tra ken pa vint anat din, pe c'hoazh, pa n'hellan ket-me o merzout, lavarout neuze hep troidell kement a gavo din a vo ret evit difenn pezhioù bet skrivet ganin hep stagañ outo nep displegadur o tennañ da

nep krafenn nevez, din da dremen hep mont diziwezh d'embreger an eil hag an all.

Ar pezhioù, avat, am eus skrivet e derou ar "Ferweledoniezh" hag an "Oabladioù", mar bezer feuket da gentañ gant lod anezho, - dre ma ran goulakadioù anezho hep na ve doare ganin d'o anataet, - padal, ra lakaer pep habasketed da genderc'hel da lenn gant evezh betek ar penn hag e vezor dic'hoantet, spi am eus. Rak, war a gav din, seulseurt eo amañ emheuliadur an abegennoù, ken, pa vez anataet ar re ziwezhañ gant ar re gentañ ma'z int devouderioù dezho, e vez a-geveskemm ar re gentañ gant ar re ziwezhañ ma'z int devoudadoù diwarno. Hag arabat dezevout e ran amañ ar fazi a vez anvet kelc'h gant ar boellonicourion; rak, dre ma teu an darn vuiañ eus ar seurt devoudadoù da vezañ diarvar-tre, dre berzh an arnodif, an devouderioù en o dezrean diouto a dalv, neket pergen d'o frouiñ, d'o displegañ ne lavaran ket. En enep-kaer, int-i end-eeun eo a vez prouet ganto. Ha n'em eus graet goulakadioù anezho, nemet evit ma vo gouezet e soñj din e c'hallfen a-walc'h o dezren diouzh ar c'hentañ gwirionezennoù-hont am eus displeget uheloc'h. Chomet on, avat, a-ratozh hep henn ober, en abeg da lod speredoù, - peogwir e kev dezho e

ouezont, e korf un devezh, adalek ma tistager div pe deir c'homz dirazo diwar-benn se, holl ar pezh en deus unan all lakaet ugent vloavezh da brederiañ warnañ, ha peogwir ivez e vezont seul dechetoc'h da fellel ha seul nebeutoc'h digor d'ar wirionez ma vezont lemmoc'h ha blimoc'h, - da virout outo eta na c'hellfent-int kemer tro dre eno da sevel ur brederouriezh diboell bennak diwar ar pezh a gred-fent bezañ pennsturioù din, ha betek gouzout na ve douget warnon ar girlegezh anezhi. Rak, evit kel ar mennozioù a zo rac'h va re, o digarezif ne ran ket dre ma'z int nevez, gant an diwar m'eo din e vint kavet ken eeun ha ken heñvel ouzh ar skiant voutin diwar imbroudiñ ervat ar peragoù anezho, ma seblant-int bezañ diezvoutinoc'h ha dizurupailhoc'h eget pere all bennak a c'hellfed magañ war an hevelep krefen. Ha fougeal ne ran ket kennebeut dre ma'z on bet kentañ dinoer pehini bennak anezho a ve, hogen dre an abeg ma n'em eus biskoazh graet degemer dezho, - ha komzet e vije bet endeo diwar o fenn pe ne vije ket gant reoù all, - peogwir, avat, ez on bet kenderc'het warno gant ar poell hepken, ne lavaran ket.

Ha ma ne vez ket an arzvicherourion evit seveniñ raktal an ijinenn displeget gant ar "Ferweledoniezh", ne gav ket din e c'hallfed lavarout ez eo-hi fall

evit kelo-se; rak, gant an ampart ha gourdon ma ranker bout evit aozañ ha kalfichat an ardivinkoù am eus tresskrivet, hep ankounac'haat nep elfenn anezho, mar skuitfent war an taol, souezhetoc'h a se ne ven ket eget o welout unan bennak a ve barrek en ur ober un devezh, da seniñ al lud diouzh ar c'hentañ, dre an abeg nemetañ ma vije bet roet dezhañ sonlennadur mat. Ha mar skrivan e galleg, anezhañ yezh va bro, kentoc'h eget e latin, anezhañ hini va c'hentelicourion, ez eo dre ma vagan goanag e vo va mennozioù gwelloc'h dezvarnet gant tud oc'h arverañ tra ken nemet o foellerezh-natur glan, eget na vint gant ar re na welont nemet dre an henlevrioù hep-muiken. Hogen, evit kel an dud a oar stroliañ ar skiant-vat gant ar studi, hag int ar re nemeto a hetan da varmourion, diarvar on na vo ket ar seurt ganto ken untuek evit al latin ha monet da nac'h degemerout va mennozioù war zigarez ma vint bet displeget ganin e yezh ar boutin.

Evit ac'hanc, ne fell ket din komz amañ dre spis diwar-benn an enraokadennoù am eus fiziañs d'ober en dazoned war dachenn ar Skiantoù, na tonkañ kennebeut gant ar c'hevredig an disterañ gouestladenn na ven ket sur da seveniñ. Un dra hepken a lavarin : em eus divizet lakaat an amzer a chom ganin da vevañ d'ober

ken tra nemet klask kaout un tamm gouiziadur eus an Natur, hag ur seurt unan ma c'hellfed tennañ dioutañ, evit ar Vezekniezh, savelennoù diogeloc'h eget ar re hon eus bet betek-henn war he divout, hag ouzhpenn : em eus un tech ken taer da dreiñ diwar gement seurt ratozh all a zo, - peurgetket ar re na c'hellfe lod korvoiñ hep na noazfent ouzh lod all, - ken, mar befe un abegadurezh bennak ouzh va rediañ da blediñ ganto, ne gav ket din e ven gouest d'henn ober. Ac'hano ganin an disklêriadur-mañ, daoust ma n'on ket hep gouzout ervat na dalvezo ket din da vezañ brudet dre ar bed, - hogen n'em eus c'hoant ebet kennebeut da vezañ; - atav, avat, e virin brasoc'h dleadegzh ouzh an neb am skoazello da saouriñ va goar didrabas eget na rin ouzh nep piv bennak a ginnigfe din an uhelañ kargoù a ve war an douar.

((((oo)))

NOTENNOU - KEVYEZHAN

H A G A L L

- (1)-"DISPLEG WAR AN HENTENN" - "DISCOURS DE LA METHODE", gant DESCARTES. E galleg, hiziv an deiz, en defe ar prederour skrivet "rapport", rak, evel ma lavare d' an Tad Mersenne : "Ne lakaan ket "pleustrad" (traité) pe, mar kevrit gwell, kentel ur c'helennour meur war ar Brederouriezh, hogen "Discours" (Displeg), evit diskouez n'eus rat ebet ganin d'he c'helenn, met da gomz hepmuiken diwar he fem (an Hentenn)."
- (2)-darrouz, furm, natur, spes zo amañ en o ster skolastikel.
- (3)-"DEZVARNEREZH", g.- galloudezh-veiz e koulz ha ma vez o tezvarn ha neket o strizhpocellata hepken.- "DEZVARNAD" o vezañ frouezh an dezvarnerezh.
- (4)-"DIVERZEGEZH", b.- "discrétion" en destenn; perzh un den diverzek, sev un den a oar diverzout ervat; "dezvarnegezh" a vefe mat ivez.
- (5)-"GALVATIZ", g.- "exhortation", en destenn.
- (6)-"REIZHONIEZH", b.- Skiant ar Reizh, henn eo : Skiant ar Gwir Skrivet; pezh a dalvez kement ha Skiant al lezennoc'h. Skiant ar Reizh a vez mat, gant ma ne vez ket kontrol da Skiant ar Gwir Naturel,

pe "Gwironezh". Arver a ran eus ur ger krouet ganin "Reizhstandur" evit lavarout "Jurisprudence" e galleg hiziv an deiz.

- (7)-"DAELATAEREZH", g.- poellataerezh ur prezegour.
- (8)-"Bas-Breton" en destenn.
- (9)-"ANTRIVLI", g.- "insensibilité" en destenn.
- (10)-"TADLAZHEREZH", g.- Ober a ra Descartes meneg amañ eus diskibled Zenon, anvet gant ar brederourion Stoiz pe Stoaded, da lavarout eo, ur rumm-tud o kelenn e tleer chom difrom dirak holl zarvoudoù mat pe fall ar vuhez evit tizhout ar Furnez. Hogen unan eus ar Stoaded-se, graet Brutus anezhañ, eo a lazhas Caesar g dad (Tu quoque, fili ni !). Setu perak ez eus keal amañ eus tadalazherezh.
- (11)-"ENT-SKRIGNVEIZOUR", g.- en destenn : "en cynique".
- (12)-"ENDRO", b.- "humeur" hervez galleg Descartes.
- (13)-"FORNEZELL", b.- en destenn : "poêle", henneo:ur gambr tommet gant ur fornez.
- (14)-"ADELLADOUR", g.- "Tisavour".
- (15)-"DIORREIDIK", p.- douget d'an diorreadurezh, d'ar sevenadurezh; troet da c'houzañv bezañ diorreet. En destenn : "policé".
- (16)-En destenn : "constitutions".
- (17)-"KENTELIOURION", g.- "précepteurs" en destenn.
- (18)-"AR C'HEVREDIG", g.- en destenn : "le public".

- (19)-"FLAENDIHEVERZ", mv.- En destenn : "insensiblement".
- (20)-"HINBENNOU", b.- "Humeurs" en destenn.
- (21)-"HINI", - Gwel. uheloc'h "rumm-spered".
- (22)-"HINI", - Gwel. notenn 21.
- (23)-"KEMPOELLATAD", g.- En destenn : "syllogisme".
- (24)-"NA OAR KET" - DULLE (1235-1315), Frañsezad eus Spagn, bet aozet gantañ ul levr anvet "Ars Generalis", hag a zo evel un ardivink da "genstrollañ kealioù" e-sell d'ober "kavadennoù skiantel"...
- (25)-"DIANKADIÑ", - En destenn : "omettre".
- (26)-"DIWARNO", - henn eo : diwar rakpezhioù pep unan anezho (gwel. uheloc'h).
- (27)-"SKIANTAEREZH", g.- En destenn : "les sens".
- (28)-"DISPLEGAÑ", - Goulakaat ar pezhioù gant linennoù ha skeudenoù ne vez ket a-walc'h. Ret eo ivez o displegañ fraezh ha pleustrek, pezh na c'heller ober nemet gant delunioù. Hag an delunioù a vez implijet peurvuiañ zo lizherennoù ha rifvoù. Descartes a ra amañ gant ar ger "chiffre", kevatal en e vare gant "arcuez atalouriel".
- (29)-"MEIZATA", - "concevoir", en destenn.
- (30)-"SELLADOU", g.- "objets" en destenn.

- (31)-"A' GEMENN-HI", - "hi" eo an Hentenn.
- (32)-"GANTI", - Ar Brederouriezh.
- (33)- En destenn : "Une morale par provision".
- (34)-"GOÑVORETAÑ", - "les plus modérés" en destenn.
- (35)-"GOURFRED", g.- En destenn : "excès"; hBr.: gurprit.
- (36)-"PENNVAPROU", g.- En destenn "Les extrêmes".
- (37)-"DARGOUEZH", - En destenn : "hasard".
- (38)-"OBER DELLID EUS AR REDI" - En destenn : "Faire de nécessité vertu".
- (39)-"AR BREDEROURION", - henn eo ar Stoiz gwechall-gozh.
- (40)-"BARRC'HÖPRET", - Gwelout en destenn : "tant favorisés..."
- (41)-"GWALC'HONI", b.- gwalc'h speredel.
- (42)-"BOLEUN", En destenn : "content".
- (43)-"DAREMPREDET", - Diwar-benn kêr Amsterdam eo e komz amañ ar skridaozour.
- (44)-"ANDISIREADUS", pa.- "Indubitable" en destenn.
- (45)-"TREUZVEDIZADOU", g.- En destenn "paralogismes".
- (46)-"POELLANATADENN", b.- "Démonstration" en destenn.
- (47)-"ASVANIÑ", - ober evel pa ... , ober van.
- (48)-"SUJEREN OUZH", - Eren ouzh un dra bennak dre sujidigezh dezhañ. En destenn "dépendre de."
- (49)-"TRA DANVEZEL", - En destenn : "chose matérielle".
- (50)-"ENDALC'HADUREZH", b.- En destenn : "en quoi consiste".
- (51)-"DREISTEL DIN", - En destenn : "supérieur à moi".
- (52)-"DRE MA OA OLBOUD ENNON", - En destenn : "parce que j'avais du défaut".
- (53)-"AR SKOL", - Henn eo : ar Skolastik, ar Skolbred-erouriezh.
- (54)-"KENDALC'HAD", g.- En destenn : "Corps continu".
- (55)-"NEP PEZH DRE AR MEIZOUT NA VE BET DA GENTIAÑ DRE AR MERZOUT". - Lavarenn o kevyezhañ krafenn vrudet ar Skolbred-erourion gwechall. "Nihil est in intellectu quod non fuerit prius in sensu."
- (56)-"O C'HOMPREN", - "O" = Keal Doue ha keal an ene.
- (57)-"DIOGELONI", b.- "Assurance morale", en destenn.
- (58)-"DIOGELDED USVEDONIEL", - En destenn : "certitude métaphysique."
- (59)-"BEZOUDEK", - En destenn : "Réelles".
- (60)-"BETEK HDNVELSEURT", - "En tant que tel", en destenn.
- (61)-"TENNET KEN FRAEZH", - Amañ e ra Descartes meneg eus ar c'healiou engañet.

- (62)-"PLEUSTRAD", g.- Skridoberenn o pleustriñ en un doare kalvezel war un divoud bennak.
- (63)-"ABEGOU", - An abegoù, keal anezho amañ gant ar predercur, zo droukvarnidigezh ar Gouiziad Galileo gant al Lez-Imbourc'h.
- (64)-"UR C'HENLUZ", g.- "Chaos" en destenn.
- (65)-"GORED", g.- Skor, skoazell; hBr.: guoret, krBr.: goret.
- (66)-"STRUZHEK", - "Végétante" en destenn.
- (67)-"SKIANTAEK", - En destenn : "Sensitive".
- (68)-"KEFRIDIEZHIOU", - En destenn : "Fonctions".
- (69)-"AR REOU", - Ar c'hefridiezhioù.
- (70)-"KELL pe GLEUZENN", - Kofigoù ar galon eo an div gell pe gleuzenn zo kel anezho amañ.
- (71)-"GWAZHIENN-DALMER", - Kef ar skevent.
- (72)-"HINI", - Kleuzenn, sev "kofig-kleiz ar galon.
- (73)-"TALMERENN WAZHIENNEL" : "GWAZHIENN AR SKEVENT".
- (74)-"C'HWITELL", g. : "briant".
- (75)-"TALMERENN VRAS", - "aortenn".
- (76)-"PLUSKENNIG", - "trapig".
- (77)-"TEIR", - Teir fluskennig ("Trapig kentez-kofig dehou" pe c'hoazh "trapig tribroudek".)

- (78)-"TEIR ALL", - : sac'helloù-kornloarek kef ar skevent.
- (79)-"DIV ALL C'HOAZH", - : "trapig kentez-kofig kleiz pe "trapig mintrek".
- (80)-"TEIR ADARRE", - : "sac'helloù kornloarek an aortenn".
- (81)-"TREBARZHIÑ", - "Entrer" en destenn.
- (82)-"TREBARZHIOU", g. - "entrées" en destenn.
- (83)-"MEZEG SAOZ", - Meneg zo amañ eus Harvey, bet kavet gantañ red ar gwad e 1628.
- (84)-"MANDOULLOU", g. - Toulloù munut ma sil drezo ar bestlennoù. Kb.: "mandwll".
- (85)-"ELFOÛ", g. - Ur blijadur e vez din bep taol implij-out ar ger-mañ, rak dalc'hmat e rae gantañ va menna, Doue d'he fardono, evit lavarout "nervennoù". Nemet e tistage "elvoù" en he brezhoneg Goueloù.
- (86)-"DIAYOULENNOU", - En destenn : "passion intérieure".
- (87)-"MEIZELSON", - En destenn : "moralement".
- (88)-"YOULADUREZH", - En destenn : "les passions".
- (89)-"AMPARAÑ", - En destenn : "composer";hBr.: ampar.
- (90)-"PARC'HAÑ", - En destenn : "d'efférer".
- (91)-"DIC'HRATAAT", - En destenn : "désapprouver".
- (92)-"KEVREDIN", - En destenn : "général".
- (93)-"GOURNATAER WAR", - En destenn "censeur" de.

- (94)-"PA'Z INT AET D'O RESTAÑ", - En destenn : "lorsqu' ils les ont redites". N'em eus kavet an termen-mañ e geriadur ebet ha koulskoude n'eus nemetañ da vout arveret e Gouelou gant ar ster roet dezhañ en arroud mañ, eleze : "danevellañ war-lerc'h unan all".
- (95)-"RAKDIBABONT (WAR)", - En destenn : "préfèrent à".
- (96)-"AZAV", - En destenn : "promettre" (Kv. Kb.: addaw).
- (97)-"MENOUED", g. - En destenn : "faveur" (hBr.: menguet).
- (98)-"SIOULONI", b. - En destenn : "repos d'esprit".
- (99)-"LAZOÙ", g. - "Intérêts" en destenn.
- (100)-"KELET", - (Verb KELIN). En destenn : "averti".
- (101)-"TRAVOUDAÑ", verb savet ganin evit lavarout gwerediñ en un doare travoudel, fizikel. "Travoudañ" zo, evit an ene, c'hoari e roll e struzhidigezh ar c'horf.
- (102)-"AMREALOU", - Diwar an henvrezhonek "imrogal", "oberiantiz" hag "obererezh" war un dro. Ur ger hollek eta ha pleustrek-tre.

)oc((

D I A N L A V A R

A R R E I Z H I A D B R E D - E N E - S P E R E D

g a n t

J I L E W A N

AR GREADOU HAG AR MENN

Ar c'heal a brederouriezh a vez empleget ennañ ar c'heal a brederoni. Ha pa lavarer "prederoni", e veneger "reolenn-vuhez", neket "mennoziadeg" hepken. Hogen ar c'hreadoni zo ivez reolenn-vuhez e-keñver ar c'hreadoniezh, anezhi Skiant ar greadoù, pe oberoù denel. Kement ha ken bihan ma c'heller diogeliñ ez eo heñvelster prederouriezh ha greadoniezh.

Diwar hevelep evezhiadenn, e verzer gwelloc'h a se talvoudegezh pennrenkel studi ar greadoù e stern ar brederouriezh.

Ar greadoù avat zo anezho anadennoù luziet, peogwir e vezont oc'h ober dave, gwech d'ar c'halloudezh-mañ, gwech d'ar c'halloudezh-hont, ha dalc'h-mat ivez, muioc'h pe vihanoc'h, d'an holl c'halloudezhioù brezel war un dro.

Seurt kendave a laka neuze pep prederour dirak ur sellad kemplezh-kenañ teirrumennek a ranker envel REIZHIAD BRED-ENS-SPERED.

Pep gread a vez arnodet dre berzhioù oc'h ober dave bonel d'ar menn. Setu perak e tleer da'm meno komz da gentañ diwar e benn evit gallout tregerzh-out, war ar wenedenn wellañ ha diogelañ, koadeg teñval ar reizhiad bred-ene-Spered.

Ar menn zo, evit gwir, arwel ha gremmverker pep buhez denel. Arvezet e vez ar menn gant ar vred-oniourion evel uman eus galloudezhioù ar bred, rak eñ eo gwir elfenn strivant ar c'hreizson. Ar c'hreizson avat, zo stern anadennel an ene. Hag an ene zo liamm frammadel etre ar beved korfel hag ar vuhez, - ar vuhez vreden evel reizh, hag ivez ar vuhez Speredel a vez studiet gant pep kravez ha pep teologiezh.

AN DROUKVESK

Alies e vez droukvesket "bred" hag "ene". Hag e galleg n'eus ger ebet evit diforc'hañ an daou geal, pe neuze e vez ezgeriet "ene" gant "bred speredel" ha mat pell 'zo.

Aon am eus e teufed ivez da zroukveskañ "bred" ha "Spered" evel ma vesker endeo "meiz" ha "spered" war leur al lavar boutin.

Razas, war dachenn ar gravez, e c'heller hevel-

ebiñ an ene ouzh ar Spered. Da skouer, evito da vezañ anienoù izeloc'h, ha dacust d'o liammadurezh korfel, ez eo an anaon Speredoù kar da Speredoù arall an Trehont evel an aeles, ha Doue o C'hrouer ar Spered Peurvoudel nemetañ. Hevelep anien, hevelep ene eo a rae anezhañ gwechall ar Skolbrederourion "furmad" ar c'horf denel.

Un digemm bonel zo, avat, etre Spered denel ha Spered aeles.

Kemeromp da gentañ an den amañ war an douar evel m'emañ. Petra eo an den e gwirionez ? N'eo ket korf diouzh un tu hag ene diouzh un tu all, hogen "Caro", "kig", gouez d'ar gristenion gentañ. Ha petra oa "caro" evito ? Iskis eo evidomp **marteze** e zizoleiñ bremañ, hogen atersit gwir Vibourion hag e kavot ar respont : "caro" a dalve da lavarout "ar c'hediad korf-ene" ha neket "korf" hepken. Kement ha ken bihan ma tenn neuze ar ger d'ardameziñ al liammadurezh-korf e vir atav an den, ne vern peseurt hini e ve dere e anien speredel er bed all, ne vern e peseurt stad e ve neuze ar furmad sonet diwar e benn gant ar Skolbrederourion.

Diwar-henn e vezomp gwelloc'h ar fazi bras a zo bet graet abaoe pell amzer pa lavared e c'halle an ene, evel ene ha dre natur, buhezañ peuremren.

Hevelep fazi a gaver ivez gant Descartes en e levr "DISPLEG WAR AN HENTENN". Hogen, war dachenn ar Feiz Kristen ez eo bet grevus seurt kelemnadurezh, ha marteze e klever hiziv c'hoazh, tu bennak e Gall, tud o kanañ en ilizoù "Je n'ai qu'une âme qu'il faut sauver" ... Evel pa vefe an ene, evel boud peuremren, a vefe salvet hepken en diwezh !

Ar pezh a c'hoarvez e gwirionez gant an den a vez kement-mañ : Ar c'hediad korf-enc, bannet evel ur fuc'hell diouzh Kab Kennedy, a dro war ur c'helic'hred dioutañ e-unan, kevazas ouzh e anien, keit ha ma vev war an douar, ha, plaendiheverez, bep ma tosta ouzh e dermen douarel, pe, da vihanañ, ur wech skoet gant taol ar marv korfel, e kemm e gerc'h-red. Tremen neuze war unan all disheñvel diouzh hini ar glenn, kelc'hred ar Spered, evit dont da vezañ, en e stad finvezel, gant Dasorc'h Finvezel ar C'horfoù, ar c'hediad den-Spered a vo e wir anien e klod ar Wenvidigezh Peurbadel. Na mui na maez, stad an Aotrou Krist dasorc'het, o parañ dirak e ziskibled en e gorf klodus, sed a vo, evit gwir, stad mab-den o kaout ar Silvidigezh finvezel.

Liammadurezh-korf a vir eta pep den e ne vern pe stad e ve goude ar marv, nemet, zoken endra vez war an douar, ez a ivez war speredelaat, evit e vad

koulz hag evit e reuz. Ya evit e reuz ivez, rak arabat ankounac'haat bout an dialoued Speredoù ken gwirion hag ar re all, drouksperedoù evel ma lavarar.

Mat e ra neuze al Lidourion Gatolik oc'h arverañ ar ger "Spered" e pedennoù an oferenn, evel ma kaver anezhañ e koshañ pedennoù an Iliz, da skouer gant ar respont anavezet-mat "Ha gant ho Spered... Et cum spiritu tuo".

En diwezh eta ez eo an "ene" an elfenn dirvoudel anvet gwech "bred", gwech "spered", hervez ma komzer yezh ar vredenizh pe hini ar gravezouriezh.

Aes eo neuze gwelout perak e troukvesker "meiz" ha "spered". Ar meiz zo, gant ar menn unan eus div rummenn frammadel dibar bred an den, ar galloudezhioù all (skiantaerezh, eñvorezh, empenterezh) o vezañ kevredin d'an holl, loened pe dud. Ne vez ket droukvesket "menn" ha "spered", peogwir e lakaer ar meiz dreist d'ar menn, hemañ o vezañ divarrek da seveniñ greadoù speredel, hervez ar Skolbrederourion da vihanañ, nemet ha sklêrijennet e vefe gant egile dre luc'h-natur pe zoken dreistnatur. Oc'h arvezif eta ar meiz evel begenn ar bred, n'eus ken nemet ur c'hammedig d'ober evit e hevelebiñ ouzh ar Spered. Un tamm evel ma rae kristenion eus ar werin dre amañ n'eus ket keit-se c'hoazh, pa hevelebent galloud "o"

sent" ouzh hini an Aotrou Doue.

Deuet eo ar c'houlz bremañ, o sellout ouzh rouedeg ar bred a zo gant mab-den, da reiñ spisadurioù diwar-benn :

- a - Ene ha Spered,
- b - Meiz ha poell,
- k - Menn ha youl.

Oc'h imbroudiñ ar steudad rummennel diaraok, e c'hellomp savelañ ar reizhenn gengeñverek da heul :

An ene zo d'ar Spered pezh eo ar poell d'ar meiz, diouzh un tu, ha pezh eo ar youl d'ar menn, diouzh an tu all.

a - ENE HA SPERED

Anzavet e vez gant an holl bout ene an den ouzhpenn ur "bred-aneval" boutin. Bred an den zo, evit ar gristenion, stern anadennel striv mab-den davit Spered an Den, sev an "Den-Spered" a gavo e sevenidigezh hag e leunder gant an Dasorc'h Finvezel.

Padal ar Feurspered, Spered Doue, o klask kacout krog (dre E C'hras) war an den, ne wel ket hemañ gant e gorf diouzh un tu ha gant e vred diouzh an

tu all. Ne wel nemet an HINIENN DENEL, dres "caro" ar gristenion gentañ meneget uheloc'h ganin. An hinienn denel, oc'h aparhantañ neuze ouzh ar c'horf hag ouzh ar bred war un dro, zo evel un tir-etre, na korf hepmuiken evel reizh, na bred hepmuiken kennebeut, na kennebeut-all Spered hepmuiken, hogen ur frammad sellet evel Speredelaüs ha war Speredelaat evit gwir en abeg end-eeun d'ar pezh a vez anvet ENE gant ar gristenion. Ar pep pouezusañ diwar-henn, evidomp Brezhonegerion, perc'henn d'ar gerioù "bred" hag "ene", ez eo termenañ ouzh sklêrijenn ar gelennadurezh kristen petra eo an ene kristen e-keñver bred ar Skiantourion.

Bred an den am eus, dre ma c'hellan meizout savelennoù bonel evel $2 + 2 = 4$, pe c'hoazh "karantez" = "mad" ha "kasoni" = "aroug", ha menhout an eil hag an all.

Diwar seurt arnodadenn, e c'heller tizhout ar bred. Ne dizher ket evalkent an ene evit kelo-se, daoust ma vezer neuze arhentet davitañ. Ar pezh a vez dizoloet war-eeun zo bred, henn eo ardivink an ene, o sellout outañ gant lagad ar c'hristen. N'eo nemet ur rouedeg galloudezhel, ya, ur wikefre, keñveriadus, war dachenn an trehontañ hag ar buhezañ, gant gwikefre ar c'horf, war dachenn an ober

fizikel ha bevedel.

An ene, avat, ne sell en diavaez dre lomberioù ar bred, nemet pa fell dezhañ sellout ouzhoc'h, deoc'h d'e bakañ mar gallit. Holl gevrin an hinienn denel zo stag ouzh buhez an ene sellet evel furmad, evel bon pep beved ha pep buhez denel.

Moarvat e c'hallfen kemer ar skouerioù diaraok ha lavarout : ene am eus dre ma c'hellan meizout $2 + 2 = 4$, pe "karantez" = "mad" ha "kasoni" = "droug", ha mennout an eil hag an all. Hogen un ene DIN am eus e piaou, dre ma c'hellan meizout ha mennout pezhioù all c'hoazh ouzhpenn evel da skouer : va bout Brezhon pe C'hall, va bout gwashaour pe wellaour, va bout evit Krist pe Vouda, va bout evit emgarantez ar renkadoù, ar broadoù pe c'hoazh evit an emober etre renkadoù ha broadoù, h.a., h.a., ha lezel war ar glenn merk va c'hig ("Caro" ar Bibl), merk va ene-enkorfet, merk va c'horf-emeneet dre an emouestl d'un uhelvennad pe d'ur pal hollidik bennak o tennañ d'ar skouerioù rakdispleget.

Keit ha ma vez mab-den war e gela'hred glennel, e c'heller envel "ene" e gwirionez ar seurt furmad bevedel-buhezel, ar seurt boud bonel o travoudañ⁽¹⁰¹⁾

hag o trehontañ war un dro, ma vez amparet gantañ en diwezh pep HINIENN DENEL, pegen "Speredel"pe "disperedel" bennak e ve ergorad hevelep furmad, pa ne c'hell ar gourzhergor anezhañ bezañ "gwelet" nemet gant "lagad" ur Spered, "lagad" Doue da skouer, ken skort ha ma vez evidomp-ni arhent ar bred.

Hogen pa dremen evit mat (ha dic'hwit-kaer war-bouez marv ar c'horf) war gela'hred ar Spered, e vez neuze mab-den en ur bed all, hini ar Spered end-eeun. N'eo ken un ene-enkorfet, daoust ma chom en un doare korf-emeneet, pezh a zisplegan dre lavarout, evel ma ran uheloc'h, e vir an ene liammadurezh-korf, peogwir e chom denel bepred hag e chomo da viken. Emañ neuze mab-den war e hent davit stad finvezel an "DEN-SPERED".

Displegaf dere an "DEN-SPERED" n'hallomp ket avat, peogwir n'eus tu ebet dimp, evit bremañ, da vezout anien don ar Speredoù. Ar pezh a ouzomp eo e vo klodus (gwenvidikaet) korf an den evel ma oa klodus, gant perzhioù dioutañ, korf ar C'hrist dasorc'het. Lenn evit se pajenn an Aviel o tezevell paridigezh ar C'hrist dirak e ziskibled war-lerc'h an Dasorc'h. Evit gouzout hiroc'h diwar-benn ar Speredoù, ar gwellañ a vefe lenn skridoù Tomaz Akwino o pleustriañ war an Aselez. Un displegadur

n'eo ken, avat, rak ael ebet n'eo bet biskoazh gourzh-ergorennet, dre vuzhuh, dirak reiz ar Prederour Meur ! Ha den ne c'hall mont pell, amañ war an douar, gant ur studi evel honnezh ! Gant va menn'ha va c'halon eo e kinglevan hepken pezh a c'hellfe bezañ, da skouer, buhez an Den-Spered Brezhon er Vro Nevez a vo bet aozet evitañ en he leunder hag e Peurvoud-elezh an Dreinded Santel ...

b - MEIZ HA FOELL

Ar poell eo elfenn strivant reiz an den. Eñ, dre berzh e c'halloudezh, ar poellerezh, eo a vroud ar reiz. Eñ eo a laka ar c'halloudezh all, ar reizerezh, d'arc'hwelat, evit ober prederennoù gant reizennoù. Diwar hevelep reizennoù aet da brederennoù eo e sav ar reizadoù.

Ar prederennoù, - hervez an div isgalloudezh a gaver oc'h ober dave, an eil d'ar reizerezh, sev an dezvarnerezh, eben d'ar poellerezh, sev ar poellataerezh, - a zeu da vezañ pe dezvarnadoù pe boellataoù.

Hevelep digemm etre amrealoù⁽¹⁰²⁾ ar reiz a hañval kaout scl, rak, na pet ha pet gwech ne weler ket poellourion nan int tamm ebet dezvarnourion !

Un anadenn eo ha hi bet merzet ervat gant Descartes en e levr "DISPLEG WAR AN HEENTEENN".

Bez'e kaver ivez dezvarnourion hag int diakuit war ar poellata hep bezañ koulskoude dic'halluskrenn, rak un dezvarnour a vez bepred poellour muioc'h pe vihanoc'h, peogwir, evel pep reizour, e vez atav e brederennoù dindan vroud ar poell, evel displeget uheloc'h.

k - MENN HA YOUL

Ar youl zo elfenn strivant ar menn denel. Hi, dre berzh he galloudezh, ar youlerezh, eo a ro gremm ha lank d'ar menn. Hi eo a laka d'arc'hwelat galloudezh ar menn, ar mennerezh, evit ober mennadurezh ma sav diwarni mennadoù.

Evel un dall, avat, e vez drezañ e-unan menn an den. Ha mennadurezh o chom dindan vroud ar youlerezh a vefe kentoc'h da vout arvezet bep tro evel youladurezh.

Broud ar youlerezh a vez dall, ken dre berzh ezhommoù-standur an den, ken dre ziouer a luc'h reizel (luc'h an dezvarnerezh peurgetket) pe c'hoazh pa vez dreistfomm al luc'h reizel, hevelep disklotadur o vezañ marteze gopr ar rezid lezet ganimp !

Hag amañ, gant ar rezid, e kejjomp adarre gant kevrin an ene, kevrin an hinienn denel.

a - O vezañ dall dre berzh an ezhommoù-standur, da skouer : c'hoant-evañ reizh, c'hoant-debriñ reizh, e kenderc'ho ar youlerez youladurezh-c'houzañv, gant diayoulennoù evel ar sec'hed, an naon.

b - O vezañ dall e-kefiver fonn al luc'h meizel, e kenderc'ho ar youlerez youladurezh-werediñ, gant youlennoù evit gwir : youlennoù mat, pe na mat na fall, ha youlennoù fall pe droukyoulennoù. Youlenn ar vroadelourion vrezhon bremañ da sevel ur yezh klok arnevez zo e-devoud ul luc'h meizel dreistfonn : "Den na netra ne viro ouzhimp mont war-du ar pal !" eme lod eus hon diaraogidi tregont vloaz 'zo. Setu ma strivomp neuze evel "dalled" evit mad Breizh, dre berzh ul luc'h meizel dreistfonn.

KEVRIN AR REIZHIAD BRED-ENE-SPERED

Darempredoù kevrinus zo eta etre meiz ha menn, pezh nan eo ket souezhus, rak bred an den zo dezhañ, dre al liamm frammadel anvet "ene", tonkadurezh Speredel, sev tonkadurezh ur Vuhez, hini ar Spered, a van kevrinus evidomp amañ war ar glenn.

Evit abegoù kimmiget dimp gant ar poell eo e

lakaomp speurennoù etre meiz ha menn. Pe Vreizhad pe Bolonied e ven, rediet on bet d'arveziñ ar poell hervez ar gelennadurezh he deus trec'het en hon Europa hellazromanekaet. Pensaos, avat, amañ ar pezhioù en o gwirvoudelezh ? Daoust ha gwir e ve amañ ar meiz dreist d'ar menn ? Daoust ha reizh eo lavarout bout Gras Doue ur sklêrijenn d'ar meiz da gentañ evit d'ar menn da c'houde, dre berzh darboderezh ar meiz dindan seurt sklêrijenn, bezañ barrek da seveniñ greadoù mat ha burzhudoù ?

Razas, evel Kelted e vezomp amjestr en hon donañ ouzh kentelioù Hellaz ha Roma, re dehet da zisplegañ pep kraf gant ar poell e-lec'h ober muioc'h gant ar galon, domani ar menn. Krediñ a-walc'h a rafen e vefe ar wirionez gant M. Glanndour pa lavar amañ ar gwirvoud etre ar boellegouriezh hag ar faltazi (trivliaderezh, barzhoniezh). Moarvat e ra kentoc'h an trivli dave d'an NERZH, perzh ar menn, eget d'al LUC'H, perzh ar meiz, evel elfenn-vuhez pep anien denel. Hogen daoust hag-efñ n'eo ket LUC'H ha NERZH an hevelep pezh, ouzh ar bon ? Gant se n'eo ket dezvarn ervat lakaat speurennoù, evel ma ra Kreisteiziz etre meiz ha menn, peogwir e c'hallfe a-walc'h ar wirionez kludañ dres lec'h ma vez ar speurennoù, henn eo e-kreiz-tre an daou.

Evel reizh, keit ha ma vevomp war ar glenn, e c'hallomp degemer ne vern peseurt diskoulm d'ar gudenn-mañ-kudenn. Pinvidikoc'h a se bepred al lenn-egesh prederouriel ! Hogen, pa welimp Doue tal-ouzh-tal, ha pep pezh Ennañ evel m'emañ, moarvat e vimp discuezhet war veur a graf. Ha marteze e vo tostoc'h neuze ouzh ar wirionez hon doare dimp, Kelted, d'arg-antvout kevrinoù ar Vuhez, evel ma paront dirazomp, eget nan eo doare-gwelout pobloù, dias bepred evidomp kenvuhezañ ganto. Tuet on da grediñ e vefe ar seurt islonk a zo etrezomp, ar seurt diemglev bonel a zo etrezomp, gouestl an emgann etre daou stumm da sevelañ en diwezh ar Wirionez, da dizhout en diwezh ar Gwirvoud. A-hend-all, penaos displegañ hevelep diemglev nan eus anezhañ nag etrezomp hag ar gouennoù all, nag etrezomp "hanternoziz" pe get ha gouennoù du, ruz pe velen ?

DOUE AN EMREZID FEURVOUDEL,
MEIZ HA MENN HEPKEN.

Kent disoc'hañ, greomp c'hoazh ur geñveriadenn :
Ar poellatadoù zo d'ar reizh pezh eo ar youlad-urezh d'ar menn.

Oc'h imbroudiñ hevelep keñveriadur, e sav diraz-

omp kudenn ar reizh. Rak, evel m'hon eus reizh evit lakaat hor reizh da strivañ, sev da lezel hor poell da labourat, pe, mar kerer, hor reizh da "boellerezhif", en hevelep doare hon eus reizh ivez da lezel hor menn da "youlerezhif".

Ar menn zo eta domani nemetañ ar reizh. Daoust da bep tra, eno emañ e gêr hag e greñvlec'h.

En abeg d'ar reizh ez eo poell ha youl rummennoù bredel dibar o tinciñ splann-meurbet olboudelezh an den war an douar. Reizh an den zo ur reizh grataet, asantet gant Doue. Ur prof eo e gwirionez, ganet gantañ d'e heul youl war dachenn ar menn ha poell war dachenn ar reizh.

Reizh Doue, avat, n'eo ket unan kesentet. Eñ zo an EMREZID, ha setu perak e c'haller lavarout nan eus ennañ nemet MEIZ ha MENN hepken. Digemmeskañ Spered a zo eo Doue. N'En deus tamm ezhomm nag eus poell nag eus youl. Kalz eeunoc'h, un tamm mat, ez eo anien speredel Doue eget ar stuz denel am eus klasket ardameziñ gant gerioù evel "reizhiad Bred-Ene-Spered".

Feogwir avat emamp bepred amañ war hon tamm glenn o stourm gant armoù an douar, em eus kavet mat klozañ troadur al levr brudet-mañ gant ur studienn a

dalv pezh a dalv. Ur skridig eo, avat, hag en dije
 graet plijadur vras marteze da zDescartes. Rak,
 laketa, n'hallfe ken anavezout yezh Yann Gouer,
 anvet ken brav gantañ "bas-breton" en oberenn-mañ
 end-eeun ! Gwelout a rafe ez eo hiziv ar brezhoneg
 arnevez ken barrek ha galleg "Jacques Bonhomme".
 Barrekoc'h egetañ zoken evit pezhioù a felle dezhañ
 lavarout en e amzer hag evit gerioù 'zo. Ha kaer
 zo ober rebechoù da baotred an arnevesaat brezhonek,
 ganto emañ ar wirionez, rak poent-bras oa dimp
 sevel hor c'hein un tamm dirak pobloù all Europa,
 pa n'hallent ken ober tra evidomp nemet trueziñ
 dic'halloud ouzh liv reuzeudik hon dremm.

((o))



Komanant 12 niverenn 45 FF.
 Komanant d'ar Geriadur Istorel
 Hepken (4 niverenn) 15 FF.
 Komanant hep ar Geriadur Istorel (8 niverenn) 30 FF.

Renner : G. ETIENNE

Embanner : L. LEROUINE

Sekretourion : P. CALVEZ, M. POULAIN

Al lizheroù da : PREDER, 30 Place des Lices, 35 - RENNES
 An arc'hant da : M. G. ETIENNE, CCP 16 093 13, Paris

Trede trimiziad 1966

Priz ar c'haier-mañ 13,50 FF.

Ioulet gant SADED
 CPPP N° 35.709
 Diskleriet hervez lezenn, Trede trimiziad 1966.

